



HAL
open science

Petra a lak al liseidi da vont e brezhoneg er skol dre soubidigezh ? Diwar skouer lise Diwan

Gildas Grimault

► To cite this version:

Gildas Grimault. Petra a lak al liseidi da vont e brezhoneg er skol dre soubidigezh ? Diwar skouer lise Diwan. Linguistics. 2020. dumas-03168014

HAL Id: dumas-03168014

<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-03168014>

Submitted on 12 Mar 2021

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0
International License

Master 2 Brezhoneg
Skol-veur Roazhon 2

Université Européenne de Bretagne
UNIVERSITE RENNES 2
Master Breton et Celtique

**Petra a lak al liseidi da vont e brezhoneg
er skol dre soubidigezh ?**
Diwar skouer lise Diwan

Gildas GRIMAULT

Renet gant Stefan Moal

Bloavezh 2019/2020

Trugarekaat a ran

Noémi, soutenet he deus ma c'hoant

Liseidi ar strollad brezhonekaat

Tangi A.D.,
Tomaz L.,
Ronan M.,
Paol M.,
Emilie P.,
Pierre S.,
Katell C.,
Gwenole L.,
Kevin P.,
Alexander T..

TAOLENN VERR

Digoradur	4
Metodologiezh an enklask	8
I. Peseurt tuedoù hag endro etreober zo arsellet ?	11
A. tuedou al liseidi : « komzit brezoneg d'ho pugale »	12
1 Ar brezhoneg hag ar skol	12
1.1 Lazhet gant ar skol ?	12
1.1.1 Ur memor a-stroll hollbouezus	13
1.1.2 Pouez ar memor war ar mod-ober hiziv	14
1.2 Saveteet gant ar skol ?	15
1.2.1 Istor goulenn ar c'helenn brezhonek	16
1.2.2 Diwan : « les droits qu'on a on les prendra »	19
1.2.3 Er skol ?	20
2 Tro-dro ar vugale : bezañ enskrivet e Diwan	22
2.1 Ar soubidigezh, arouez Diwan	22
2.2 Dont da Diwan : petra eo prezeg ar rouedad	24
2.3 Dont da Diwan : ar gerent, c'hoantoù klot ha diglot gant ar rouedad	26
B. An endro etreober a-vremañ : al liseidi tapet gant an aergelc'h	29
1. Endro etreober al liseidi : mont en brezhoneg e Diwan	29
1.1 « Soubenn ar maen » : ar galleg a zo deut en-dro	30
1.2 Ur yezh digoulzet	32
1.3 Ar brezhoneg tener o c'halon	34
1.4 Diglosiezh : yezh ar c'helenn versus yezh ar grennardiezh	36
2 Mont en-dro ar soubidigezh : ur sell a-bell	40
2.1 Pleustr ar vugale er soubidigezh : ar skolajoù hañv en iwerzhoneg	40
2.2 Ha ma vefe ar soubidigezh un divyezhegezh ?	41
2.3 Komz brezhoneg un istor personel : stajoù KEAV	43
II. Peseurt pleustroù sokial zo bet arsellet ha peseurt re a c'hall bezañ kemmet ?	45
A. pleustroù arsellet : penaos e ra an ensavadur evit tizhout e bal ?	46
1 An normoù treuzkaset gant ar skipailhoù pedagogel	46
1.1 An desaverezh furmel	47
1.2 An desaverezh nann-furmel	50
1.3 An desaverezh unfurmel	52
2 Peseurt daremped o deus al liseidi gant an norm ?	54
2.1. Normoù ar skol, normoù al liseidi : peseurt levezon war implij ar brezhoneg ?	54
2.1.1 Ar reolennoù evit lakaat da gomz brezhoneg ?	55
2.1.2 Ar galleg er soubidigezh : stad ar melezhour	56
2.2 Komz brezhoneg el lise hag en diavaez	59
2.2.1 Brezhonegañ e-maez ar c'hentelioù ?	59
2.2.2 Ar gerent hag o c'hrouadurioù : eus ar c'hoant divouezh d'ar c'hoant karantez	62
2.2.3 N'eo ket aes mont e brezhoneg e-maez al lise atav	64
B. Levezoniñ an tudeoù hag an endro etreober	66
1 Tizhet ar palioù ?	66
1.1 Diefedus Diwan ?	67
1.2 Sokializañ ar brezhoneg	69
2 « La découverte ou l'ignorance » (Lebesque, 1970)	73
2.1 Ar soubidigezh a rank bezañ ur bedagogiezh	73
2.2 Kavout e c'hoant gant ar Strollad Brezhonekaat ?	74
Klozadur	78
Anneks	81
1 Testenn e evit kendiviz ISRLF e Kemper e 2018	81
2 Goulennaoueg savet e miz Du 2019 gant Katell Chantreau e Lise Diwan	82
3 Skritell savet gant ul liseadez evit un emvod eus ar Strollad Brezhonekaat	83
4 Deskadurezh furmel, nann-furmel ha unfurmel	83
Levrlennadurezh	84
Diverradenn hir e galleg	88
Résumé court	99

DIGORADUR

E 2013 ez asantis mont d'ober skol da lise Diwan Karaez. Desket em boa brezhoneg daou vloaz 'zo. Kroget e oan pa lavaran mat. Diasur e oa ma live. Al liseidi a gelenne din geriaoueg ar skol, frazennoù reishoc'h, pa gomprenen mat anezho. E fin ar bloavezh-skol kentañ e oa bet ganet ma merc'h henañ. Dibab a ris desevel anezhi e brezhoneg, gant ur geriadur em c'hichen. Iskisat tra.

Ma veze komzet brezhoneg ouzhin gant al liseidi e oa techet lod mat anezho da vont e galleg kenetrezo. War-fallaat ez ae an traoù abaoe un nebeud bloavezhioù (dija) diwar ar pezh a gleven. Klemmet e veze gant ar gelennerien eus an diouer a vrezhoneg en ti. Eus un tu all e veze displeget din e oa natureloc'h evit al liseidi tremen a yezh da yezh. Rouez e oa ar prantadoù – pe gwech ebet zoken – ma veze kendivizet er skipailh tro-dro da blas ar brezhoneg gant ar skolidi koulskoude, evel ma vefe un anadenn ekzogen.

Traoù ‘zo ne gomprenen ket. Perak e oa start evit liseidi desavet e brezhoneg abaoe o zri bloaz – ar braz anezho n’ez a ket e brezhoneg er gêr – eskemm e brezhoneg kenetrezo ? Int a ouie ober kimiezh gantañ, kanañ ha diskanañ, sellout ouzh un teulfilm, ijinañ farsadennoù er c’hentelioù... Ne gomprenen ket. Lennet e oa bet levrioù evit ar vugale dezho, desket o doa anv al loened, rimadelloù a glasken derc’hel soñj anezho evit ma merc’h... Me, lakaet diaes evit kelenn, evit desevel ma bugel, a deue a-benn da vont e brezhoneg dibaouez gant ur bern tud.

E 2016 e savis ar Strollad Brezhonekaat gant sikour kelennerien all. Liseidi a deue d’an emvodoù. Gallout a raen sevel ar goulennoù a oa ganin. Ur gwir blijadur. Petra e oa stad ar yezh kenetrezo ? Pegoulz e veze implijet brezhoneg ganto ? Pe pelec’h ? Pe gant piv ? Hag er-maez al lise ? Perak o doa ezhomm da vont e galleg ? Evit lâret petra ? Perak e oant bet enskrivet e Diwan ? Hag a-benn ar fin perak e ouient brezhoneg ? Klevet em boa ur bern traoù gant al liseidi, ha dreist-holl liseadezed peogwir e oa merc’hed a deue da brederiañ ingal.

Evel-just n’em boa ket respontoù sklaer, splann d’am goulennoù... peogwir ne oar ket an obererien sokial orin o fleustroù sokial. Lod liseidi a oa techet da adlâret ar pezh a glevant gant ar gelennerien. Met kalz saourusoc’h e oa deuet da vezañ ar geustereenn pa oa kroget al liseidi da ginnig o istor personel, o hent hiniennel e-keñver ar brezhoneg. Laouen e oant ouzh hor c’hlevet ha hon eskemm. Hag ar Strollad a deuas da vezañ un doare da resisaat o c’hoant da vont e brezhoneg.

Sevel a raen rentaoù-kont o klask lakaat war-wel an hipotezennoù. Prientet hon doa un destenn evit kendiviz ISRLF (Institut Supérieur des Langues de la République Française) e 2017. Bet e oamp en Euskadi e 2019 o studiañ stad ar yezh en ul lise gevell ouzh hini Diwan. Hag e 2020 eo deuet Katell Chantreau da gaout ur c’hlasad eilvet a gelennen dezhañ da sevel un enklask e-tro plas ar brezhoneg en ti.

Ar boued kaset gant al liseidi a digore ma c’halon. Klask a raen gouzout penaos ez ae en-dro ar soubidigezh e lec’hioù all o lenn testennoù eus Euskadi, Iwerzhon, Kanada... Hegaset e oan gant evezhiadennoù ‘zo evel pa veze lâret e oa re lezirek al liseidi evit brezhonegañ. Divoutin e oa mont en-dro Diwan ? Klask a raen dielloù ivez evit gouzout penaos e oa e deroù avañtur Diwan. Peseurt preder a oa gant ar grouerien ?

A-sil-da-sil e teuas da vezañ ul labour skiantel. Enskrivet e oan e Master Skol-veur Roazhon evit gwellaat ma live brezhoneg. Ur c’hounskrid a ranken sevel. N’am boa ket c’hoant da studiañ ma lec’h-labour. Hag am eus graet. D’am soñj eo deuet ar c’hoant da vat pa’m eus

klevet kaoz eus skolidi kastizet peogwir o doa komzet galleg war porzh ur skol Diwan (Delambre, 2017).

Gallout a ran sintezenniñ ar goulennoù a-us en ur c'hudennadur : Petra a lak pe a harz al liseidi da vont e brezhoneg kenetrezo er skol dre soubidigezh ? Petra a ro c'hoant dezho da vrezhonegañ ? O tegemer ar goulenn liammet, perak o deus ezhomm da gomz galleg ? Buan a-walc'h em eus merzhet n'oa ket sklaer petra a veze gortozet a-dreñv ar ger « soubidigezh ». E Karta Diwan e 1977, pa oa bet krouet ar rouedad, n'eo ket implijet ar ger. Hiziv-an-deiz e lenner « *ur strategiezh kelenn eo hag a ro ur plas bras d'ar brezhoneg, d'ar mare a zere* » (diwan.bzh). Hag ivez : « *Ar brezhoneg eo yezh pennañ er c'helenn hag e buhez ar skolioù* ». Disklêriadennoù ha na lâront ket kalz traoù na war ar mont en-dro, na war al lakaat e-pleustr, hep ober anv eus an diaezamantoù. Rankout a rin klask pelloc'h war an dachenn-se ivez.

Neuze eo diazezet ma labour e-tro lise Diwan, an hini nemetañ e brezhoneg dre soubidigezh evit poent. E Karaez eo staliet al lise abaoe 1999 daoust ma voe savet er Releg e 1994. Kinniget e veze an teir rann hollek a-raok an adreizh hag eizh danvez arbennikaat da c'houde. Disoc'hoù ar vachelouriezh a zo uheloc'h eget re an akademiezh. Barrek eo al lise da gentañ evit kas an eilveidi betek ar vachelouriezh. E-tro 300 ha 350 lisead ha liseadez a studi eno gant ur skipailh kelenner ennañ 35 den (*kevatal da 24 implij leunamzer*) pa labour tro-dro pevar den, brezhoneg ganto, evit ar velestradurezh. Tro-dro 16 kasour brezhonek a labour noz-ha-deiz, pa ouezer eo tost tout al liseidi diabarzhidi. Tu ar boued hag ar bod ne vez ket komzet brezhoneg gant al labourerien war-bouez unan pe daou. N'ouzomp ket kalz traoù diwar orin sokial al liseidi. Diwar titouroù an akademiezh eo dreistdileuriet familhoù sternerien uhel ha kelennerien e-keñver ar peurrest eus an akademiezh. 41,4 % eus liseidi Diwan o doa tud sternerien uhel ha kelennerien pa n'oa nemet 30,7% diouto en akademiezh Roazhon. Koulskoude ez eus muioc'h a liseidi o resevout yalc'hadoù e-keñver keidenn an akademiezh (18,9 % diouto e-skoaz 15,1%). (Akademiezh Roazhon, 2019).

Evit kas ma freder war-raok em eus tapet harp war kinnig Lahire a-benn kompren pleustroù an obererien sokial (*komz brezhoneg el lise amañ*). E formulenn am eus adtapet : Tuedoù (« dispositions ») + Endro a-vremañ (« contexte d'interaction ») = Pleustroù arsellet (« pratiques observées »). Un doare da goublañ ur sell a-stroll gant ur sell hinienneloc'h, peogwir e konte istorioù dibar al liseidi a gejen outo. Un doare d'ober gant an dermenidigezh hep displegañ tout ganti.

En ul lodenn vras em eus studiet an tuedoù hag an endro a-vremañ. An tuedoù eo an endro paseet diwar Lahire. Neuze em eus troet ma sell etrezek istor azgoulenn ar brezhoneg er skol evit kompren ar pezh a chome. Da c'houde em eus klasket petra e oa prezeg Diwan evit talvoudekaat he hentenn studi. Ha petra e oa c'hoant ar gerent evit enskrivañ o bugel enni ? ha penaos e vez prederiet anezhi gant o c'hrouadurioù ? An teir elfenn-mañ a c'hall sevel lod eus tuedoù al liseidi.

En eil poent eus al lodenn gentañ e klaskan kompren an endro brezhonek el lise. Petra eo sell al liseidi war ar yezh. Peseurt plas en o identelezh sokial ? Peseurt diaesterioù evit hec'h implij ? Un diglosiezh a verzher. En un eil tu e pinvidikaan hag e pellaan diouzh ma studiadenn o vont da furchal e lec'hioù all a-drugarez da labourioù skiantel : e Kanada hag er Stadoù-Unanet, en Iwerzhon ha tostoc'h ouzhimp gant staj KEAV e Kastellin.

An eil lodenn vras zo gouestlet d'ar pleustroù. Da gentañ, reoù ar gelennerien e karg da lakaat e-pleustr ar soubidigezh. Disrannet eo bet ar preder e teir lodenn : an desaverezh furmel, nann-furmel hag unfurmel. Da c'houde e studian pleustroù brezhonek al liseidi. Penaos int levezonet gant normoù ar skol ? Petra eo plas ar galleg evito ? Pegoulz (pe pelec'h pe gant piv) o devez tro da vrezhonegañ ? Ha petra eo plas ar brezhoneg er-maez mogerioù (pe kleuzioù ma lavaran mat) al lise ?

En ul lodenn diwezhañ ne ginnigan ket diskoulmoù burzhudus. Evelato ne c'hall ket cheñch un ensavadur hep an obererien a sav anezhañ. An enklask perzh, gant ar Strollad Brezhonekaat peurgetket, a zo bet ur c'hinnig kement hag un ober (Aspe, 2010) dija. El lodenn-se em eus dibabet da gentañ cheñch sell ar c'hounskrid o lakaat war-wel berzh mat rouedad Diwan (e-plas prederiañ war ar c'hwitañ). Da heul on bet o furchal tu ar sokializañ peogwir ne c'hall ket ar skol normalizañ¹ ur yezh. O klask chom pell diouzh kendiviz istorel Diwan em eus klasket kompren penaos e rankfe ar soubidigezh bezañ aesaet gant ur bedagogiezh resis. Hag evit echuiñ em eus kinniget labour ar Strollad Brezhonekaat evel un doare da sevel c'hoant al liseidi, gant o hiniennelezh, o istor, o c'harantez, da vont e brezhoneg.

¹ Da lâret eo lakaat implij ar yezh da vezañ normal, boas, ober anezhi ur yezh voutin, evit degouezhioù ha kefridioù'zo hepken, pe evit an holl anezho.

METODOLOGIEZH AN ENKLASK

En un argerzh « arsell perzhiat » em eus kemeret perzh evel kelenner war ar Skiantoù Ekonomikel ha Sokial e lise Diwan abaoe 2013, pe kentoc’h en ur « perzh arsellout » « *dues à l’incompatible nécessité d’être simultanément participant et observateur.* » (Lassiter, 2000) Meur a wech em eus kemeret perzh er sujed enklask (evel ur bokser ?) : « *À ma propre surprise, je me suis pris au jeu, au point de passer mes après-midi au gym avant de passer entre les cordes disputer un combat officiel* » eme Wacquant (2000). Diwar al labour skol-veur, oc’h enrollañ hag o skrivañ notennoù, o selaou hag oc’h eskemm, o lenn hag o skrivañ on bet kap da dielfennañ an arselladennoù : « *Sur le terrain, j’étais davantage dans la participation parce que l’observation passait au second plan, elle n’était plus alors mon objectif premier. Par l’intermédiaire de l’écriture, j’essayais cependant de retrouver une certaine forme de distanciation, de rétablir des dimensions d’observation réflexive.* » (Verrier, 2006) Ar braz eus an titouroù a zo bet dastumet gant labour ar Strollad Brezhonekaat am eus savet e 2016. Aet eo war-raok an enklask :

1- o sevel ur strollad eskemm gant liseidi, kelennerien ha kasourien gant an anv « Strollad Brezhonekaat »². Prederiañ war plas ar brezhoneg e lise Diwan eo bet ar pal atav. Un tregont emvod bennak a zo bet gant liseidi a deue diwar o c’hoant atav. Direoliek e oa an emvodoù etre unan ar sizhun hag unan ar miz hervez c’hoant al liseidi. Etre 4 ha 28 den a deue d’an emvodoù. Cheñchet eo izili ar strollad (lod o vont da ober studioù uhel, lod o chom a-sav gant ar raktres, lod o tont ur wech...). An emzivizoù a denne da dielfennañ ar pleustroù peogwir e oa ar pal stadañ o fleustroù, o lakaat gerioù hiniennel warno, o lakaat war-wel doareoù-ober diwelus ha dibrederiet an aliesañ. An oadour nemetañ e oan a-wechoù met ambrouget e vezen gant keneiled all alies (dreist-holl Tomaz Laken ha Tangi An Dreo). Pouezus-kenañ eo kompren em eus dastumet komzoù skolidi dedennet evit mont e brezhoneg – daoust ma ne zeue ket a-benn lod anezho d’hen ober e-maez ar c’hentelioù. Raktresoù zo bet lakaet e plas (degemer eilveidi, kinnig ur film, mont d’ur c’hendiviz...) daoust ma n’oa ket ar pal diwezhañ. An eskemmoù a zo bet miret diwar stumm rentaoù-kont a implijan evit ar c’hounskrid-mañ. Ouzhpennet em eus ur renta-kont eus un emvod etre kelennerien en eil Derez aozet e miz Du 2016.

2- o vezañ e penn ur preder kroaziet gant liseidi o sevel emzivizoù a-stroll a-benn skrivañ un destenn evit kendiviz ISRLF (Institut Supérieur des Langues de la République Française) « Ar soubidigezh: 40 vloaz a dreuzkas evit dazont hor yezhoù » e Kemper e 2018. Daou brantad un eurvezh zo bet enrollet d’an 8 ha 22 a viz C’hwevrer 2018 (Anneks 1). Ma-unan e oan gant eizh lisead, daoust ma n’oa ket ar memes re bep taol. Un hentenn « emziviz hanter-renet » am eus heuliet, gant goulennoù ragaozet met kemmet int bet diwar evezhiadennoù dic’hortoz, hag o leuskel anezho da eskemm kenetrezo. Korf ar gaoz zo bet tro-dro d’o enskrivadur e Diwan, plas ar brezhoneg hag ar galleg kenetrezo, el lise hag en diavaez.

3- o vont gant ar memes strollad da arsellout mont en-dro ul lise dre soubidigezh en Euskadi. Sevenet ez eus bet ur film gant izili ar Strollad. Anvet eo « Div glogorenn »³. Filmet ez eus bet atersadennoù etre skolidi a oad ganto. Ar goulennoù a zo bet prientet en a-raok gant ur c’helenner, Tangi An Dreo, ha me, met an holl eskemmoù a zo bet renet hepdomp. Peadra da digeriñ ha frankaat ar gaoz. O kemer harp war eskemmoù etre liseidi e lakaomp ar biz war o freder dezho. E korf an atersadennoù ez eus bet komzet eus plas an euskareg hag hini ar galleg er skol hag er familh.

² Kinniget e vo e vont en-dro hag e spletoù e lodenn diwezhañ ar c’hounskrid

³ <https://www.youtube.com/watch?v=fBNEcb-c7fw>

4- o sevel un enklask a-gevret gant an dezennoez Chantreau e miz du 2019. Deuet eo en ur c'hlasad eilvet a gelenned dezhañ. Ur c'houlennaoueg a zo bet savet (Anneks 2). Pal diwezhañ an enklask a oa evit Chantreau gouzout hiroc'h war pouez implij ar brezhoneg e familhoù liseidi Diwan. Memes tra e c'hallomp implijout disoc'hoù an enklask evit ar c'hounskrid-mañ : peseurt santimant ouzh ar brezhoneg ? Peseurt santimant ouzh o live ? Efed kaout tud a oar brezhoneg war al liseidi ? Hag all...

Ne c'hallan ket echuiñ ar c'hinnig metodologel-mañ hep pouezañ en-dro war ma statud kelenner en ensavadur-se, pemp bloaz a skiant-prenet ganin. Evel kelenner em eus ur plas asimetek e-keñver al liseidi. Dont d'ober skol da Diwan zo un dibab evit difenn ur yezh vinorelaet hag evit abegoù pedagogel. Komz a reont e brezhoneg din ha komz a reont dirazon e brezhoneg kenetrezo an aliesañ daoust ma ne lâran grik dezho. Setu elfennoù am boa da deurel e soñj evit pep respont a gaven interesant da lakaat er c'hounskrid. « *Ils ne peuvent cesser de prendre part aux affaires sociales et politiques de leur groupe et de leur époque, ils ne peuvent éviter d'être concernés par elles. Leur propre participation, leur engagement conditionne par ailleurs leur intelligence des problèmes qu'ils ont à résoudre en leur qualité de scientifiques.* » eme ar sokiologour meur Elias (1993). Dibaouez on bet tapet etre un engajadur (gant ma oberoù el lise) ha lakaat hed (o lenn labourioù skiantel, o skrivañ, o kenlabourat).

An titouroù tennet eus ma enklask zo kinniget evit chom hep ouzhpennañ notennoù. Dispartiet int bet diouzh an destenn gant krochedoùigoù, ur skritur stouet hag ur varzenn daou gantimetr larkoc'h a bep tu :

- SB a sinifi eo bet tennet an arroudenn eus emvodoù ar Strollad Brezhonekaat. Resisaet eo bet an deziad bewech. Cheñchet eo bet an anvioù.
- DG a sinifi « Div glogorenn », film ar Strollad Brezhonekaat (22').
- RKED a sinifi « Renta-kont en eil Derezh » da lâret eo emvodoù diabarzh lise Diwan gant kelennerien hepken. Cheñchet eo bet an anvioù. D'an 10 a viz du 2016 e oa bet aozet.
- KCGG a zo un dave d'an enklask savet gant Chantreau ha ganin.

I. Peseurt tuedoù hag endro
etreober zo arsellet ?

A. TUEDOU AL LISEIDI⁴ : « KOMZIT BREZONEG D’HO PUGALE »

A-raok mont da studiañ endro yezhel al liseidi e vimp dedennet evit gouzout ar c’hemennadennoù kaset dezho. Hervez Lahire eo an tuedoù sokial « *ar produioù diabarzh eteus darempredoù paseet eus endroioù etreober* »⁵. N’eus ket tu da arsellout anezho peogwir e teu eus ar sokializadur paseet. « *On ne peut véritablement comprendre pourquoi des individus aux expériences socialisatrices passées différentes réagissent différemment face aux mêmes “stimuli” extérieurs si l’on ne fait pas l’hypothèse que ce passé a été, d’une façon ou d’une autre, sédimenté et converti en manières plus ou moins durables de voir, de sentir et d’agir, c’est-à-dire en traits dispositionnels : propensions, inclinations, penchants, habitudes, tendances, manières d’être persistantes* » (Lahire, 2012). Kement a duedoù zo hag a liseidi peogwir eo tapet pep hini en un doare disheñvel gant elfennoù boutin ar sokializadur kentañ. Hag er sokializadur-mañ eo ar gerent hag ar skol an daou ensavadur pennañ evit levezoniñ identelezh sokial an hiniennenoù. Se zo kaoz ez omp da gregiñ gant studiañ anezho. Da gentañ e klaskimp kompren levezon istor ar brezhoneg er skol war ar skolioù Diwan. Da heul e tielfennin petra eo prezeg Diwan diwar-se ha penaos eo levezonet c’hoantoù tud ar vugale diwar kinnigoù Diwan.

1 Ar brezhoneg hag ar skol

N’omp ket dedennet amañ evit adsevel un istor mil vrudet met evit kompren levezon an istor-se war an obererien a-vremañ. Daou luskad zo bet : an eil evit lazhañ ar yezh hag egile all evit reiñ buhez en-dro d’ar brezhoneg.

1.1 Lazhet gant ar skol ?

Klask kompren a raimp plas an istor-se er memor a-stroll hiziv-an-deiz evit priziañ peseurt levezon zo war ar skolioù dre soubidigezh a-vremañ en ur seurt diemskiant a-stroll.

⁴ Les dispositions sociales, diwar Bernard Lahire. (2011).

⁵ « produits intériorisés de la fréquentation passée des contextes d’action ». (Lahire, 2012).

1.1.1 Ur memor a-stroll hollbouezus

« *Ma zad a oa kentoc'h eus kostez Roazhon met e vamm a oa genidik eus Kemperle, hag ar moustradur he doa bevet d'am soñj, ar prantad lec'h ma oa difennet komz brezhoneg. N'o doa ket bet c'hoant da vont e brezhoneg gantañ.* »⁶ Gaid, Klas Termen, 22/02/2018, SB

Setu respont ul liseadez pa voe goulennet outi perak eo bet enskrivet e Diwan. N'eus forzh piv en deus kaset ar gaoz gant ar re gozh e Breizh-Izel en deus klevet anv eus ar simbol, ar vuoc'h. « *Il est interdit de cracher par terre et de parler breton* ». Hag, evel un toullad tud all en deus klevet kaoz oberer ar c'hounskrid-mañ eus afer ar simbol gant e vamm-guñv. N'on ket sur e kaver un emvuhezskrid e Breizh-Izel gant tud ganet etre 1900 ha 1950 ha na gontont ket penaos eo bet moustret ar brezhoneg. Pe vefe eñvorennoù : François Taldir-Jafrennoù, Pierre-Jakez Helias, Jean Rohou... Pe tud yaouankoc'h o kontañ an droug gouzañvet gant o hendadoù : Mona Ozouf, Michel Le Bris... Labourioù istorel pe skiantel a vern ivez : Fañch Broudic, Klaoda an Du, Yves Griffon (2008), Morvan Lebesque (1970), Françoise Morvan... Evit ur wech n'eo ket disrannet ar pezh a vez kavet war estajerennoù al levraouegoù hag ar c'hredoù poblek.

Ur gwall afer eo moarvat ma'z eus bet graet kement a reuz. Ha diwar-se eo deut ar soñj – ar raksoñj ? – muiañ dasparzhet e Breizh : gant ar skol eo bet lazhet ar brezhoneg. Ral e lakaer ar biz war abegoù all gant ar c'homzoù poblek kement hag ar re skiantel. Ral e klever komz eus perzh ar vodernelezh, an touristerezh, ar mediaoù, an divaeziadeg, ar gêriekadur, ar pignerezh sokial... Ar skol publik c'hall a zo kaoz, ha mat pell 'zo.

Difenn implij ar brezhoneg gant ar simbol hag an diskuliadur zo bet un teknik lakaet e-pleustr e Frañs, en trevadennoù gall pe en estrenvro. Gant ar feulster simbolek-se ne veze ket desavet ar vugale d'an ampoent. Diwar Helias e ouiomp e oa prest ar gelennerien da dreistpaseal o reolennoù : « (...) *ils enseignent dans leur classe qu'il est très vilain de "rapporter". Mais la règle ne vaut pas pour le délit de bretonniser. Comprenne qui pourra* » (Helias, 1976)

⁶ SB s.o. metodologiezh evit kompren ar referañsoù tennet eus al labour enklask.

Ar sistem dre soubidigezh kentañ e skol c’hall an Trede Republik en e doare daoust ma n’eo ket anvet mod-se⁷. Gwech ebet ne vez komzet eus soubidigezh evit ar skolioù gall e mare an trevadennoù nag hiziv evit ar skolioù gall en estrenvro. Irénée Carré, kaset da Vreizh e 1886 evit ensellout skolioù ar vro, en doa c’hoant da degas ar galleg er porzh evel ma vez broudet ar skolidi d’hen ober e Diwan hiziv-an-deiz : « *Le maître les suivra ; il se mêlera à leurs amusements, leur disant en français l’équivalent de ce qu’ils disent en breton. Sans réprimander ceux qui parleront breton, il encouragera et récompensera ceux qui auront retenu ce qu’il aura dit et qui essaieront de le répéter en français* » (Carré, 1888). « An hentenn vamm » a veze graet anezhi peowgir e ranke d’ar skolaer ober e-giz ma raje ur vamm gant ur bugel bihan, mont war-eeun eus an dra d’ar ger gallek ha n’oa ket tremen dre ar brezhoneg.

N’oa ket heñvel poch ouzh ar soubidigezh a-vremañ. Gant Diwan eo bet adprederiet patrom ar skol diwar ar gasoni kaset gant an istor-se. Koulskoude, o lâret eo bet efedus ar skol evit gallekaat ar vugale, e c’hallfe bezañ efedus ar moustrañ evit brezhonekaat en-dro. Ur mennozh mat e vefe rediañ ar brezhonegañ ? Anv eus ar simbol ne c’hallomp ket ober (ne vez ket graet seurt traoù hiziv evel-just) met rebechiñ, pinijañ, kastizañ a c’hall bezañ graet evit tizhout ar pal ? Pe klasket e vo reiñ c’hoant evel ma kinnige Irénée Carré ? Ha petra a ro c’hoant d’ar vugale a-vremañ da vrezhonegañ ?

1.1.2 Pouez ar memor war ar mod-ober hiziv

« *P. 78 ans : En principe, on nous interdisait de parler le breton. Bon, en classe, bien sûr, on ne le parlait pas, puisque c’était le maître qui faisait les cours, mais dans la cour, les petits bretonnants comme moi, ils avaient tendance à revenir à leur langue maternelle* » (Quéré, 2000). N’eus nemet eskemm ar ger *breton* gant *français* hag hon eus un deskivadur damheñvel eus Diwan hiziv-an-deiz. Da deurel evezh zo memes tra. Un diforc’h kreñv a zo : « *En ce qui concerne les écoles Diwan et bilingues la plupart de mes interlocuteurs, et notamment les bretonnants seconds, mettent en exergue la question fondamentale de la liberté du choix de la langue. Considérant en effet qu’on avait "volé leur langue" aux petits bretonnants, ils considèrent aujourd’hui que l’apprentissage du breton est l’objet d’un choix conscient et raisonné de leur part, par opposition à la génération précédente qui s’était vu imposer la langue française.* » (Quéré, 2000, p. 80-81)

⁷ Chauffin a ra un diforc’h etre soubidigezh ha beuzidigezh, hervez ma vez dibabet pe get gant ar skolidi deskiñ yezh ar skol. Ne ran ket peogwir e kavan eo re amsklaer afer ar choaz. Peseurt choaz ? Choazet ‘vez dont da Diwan nemet evit ar brezhoneg ? Hag ar gerent a gomze galleg 100 vloaz ‘zo a choaze ?

Quéré a gomz eus ur memor a-stroll evit ar sistem skol : munter ar brezhoneg eus un tu, ur sistem efedus eus un tu all. « *Appliquons donc au breton le traitement de choc auquel eurent recours les fondateurs du français classique* » a skrive Vallerie (1997, p. 74) diwar-benn ar yezhoniezh. Un diemskiant a-stroll a zo gant obererien Diwan pa vez klasket lakaat ar skolidi da gomz brezhoneg. Un doare a-stroll adplaset en un istor hiniennel. Daoust ma vez klevet ar memes istor atav e-tro ar moustradur ez eo kontet bewech en un doare disheñvel gant pep hini, traoù munut disheñvel zo a-wechoù. « *Ar pezh am eus merzhet oc'h ober al labour kazetenner e brezhoneg. Bewech pep hini a lavare din : « Ah ya ! Ar brezhoneg a oa ma yezh-vamm. Gout' a rez er skol n'on ket bet aotreet da gaozeal » E-giz ma vije un istor dianavezet. An holl a oar an istor-mañ met pep hini en deus ezhom da gontañ e istor* » (Danielou, 2009) eme Tangi, kazetenner e France Bleu Breizh Izel. « *Il n'y a pas d'inconscient collectif, il n'y a que des inconscients particuliers, pour autant que chacun, à chaque instant, donne un petit coup de pouce à la langue qu'il parle* » eme Lacan (1976, p. 133).

Comiti (2007) ha Chauffin a diskouez ivez penaos eo tapet an obererien skol a-vremañ gant an heñveladur. « *En 1977, pour les écoles Diwan, c'est en quelque sorte une immersion "à l'envers" qu'il s'agissait de produire, puisque les élèves bretons francophones allaient parler breton dans des locaux qui parfois, pour les anciennes écoles comme à Lorient ou Carhaix, n'avaient pas toléré un mot de breton entre les mêmes murs* » (Chauffin, 2017, p. 77) Sevel un enep-skouer a vefe trawalc'h evit advuheziñ ar brezhoneg ? Aes eo ar preder met diwar un hanter c'haou « lazhet ar brezhoneg gant ar skol ». Neuze e vo start tizhout ar pal kontrol : « saveteiñ ar brezhoneg gant ar skol ».

1.2 Saveteet gant ar skol ?

Istor ar stourm evit ar brezhoneg er skolioù a vo kinniget e-sell da gompren e levezon war ar re o doa savet Diwan. Peseurt spi zo bet lakaet er raktres-se ? Peseurt spioù pa'z eo bet savet Diwan ?

N'ez omp ket da adsevel istor ar brezhoneg er skol met an abegoù lakaet war-wel evit difenn ar c'helenn e brezhoneg ha war ar brezhoneg.

Goude an Dispac'h Bras e oa bet diskaret ar yezhoù rannvroel gant ar soñj unvaniñ ar Stad C'hall. Gant lezennoù Ferry (1881-1883) e oa kroget ar braz eus ar vugale da vont d'ar skol. Dek vloaz a-raok, e 1870, e oa bet goulennet, evit an taol kentañ en un doare ofisiel, lakaat e-plas kentelioù war ar brezhoneg. An abeg pouezusañ evit lañsañ ar sinadeg kentañ a oa efedoù pozitivel an divyezhegezh dija : « *N'est-ce pas un immense avantage pour un peuple que de parler deux langues ? "L'homme qui possède deux idiomes vaut deux hommes", disait Charles-Quint, et cette parole n'est pas moins vraie d'un peuple que d'un individu.* » (De Charencey, Gaidoz, De Gaulle, 1870) Efedusaat ar c'helenn a oa ar pal : « *Dans un grand nombre de provinces, l'enfant arrive à l'école sachant à peine quelques mots de français. Le maître d'école n'a pas le droit, pour l'instruire, de se servir de la langue locale. Il en résulte que l'élève perd un temps infini à se rendre compte de ce que lui dit son professeur et quitte l'école sans avoir fait de réels progrès.* » Ne voe respont ebet – n'eo ket sur eo bet kaset zoken – peogwir e oa digoret ar brezel e Frañs.

Goude-se e oa bet goulennet ar c'helenn evit ur yezh poblek kevatal d'ar galleg. E 1909 e c'houlenne pennoù bras Kevredigezh Vroadel Breizh (URB) digant gouarnamant Bro-C'hall digeriñ dorioù ar skolioù d'ar brezhoneg. Nac'het-krenn e voe. Ha « *pa vrallas kloc'h ar vrezel e oa bet graet o soñj gant an darn vrasañ anezho : stourm taer evit difenn ar Vro vras diouzh an Alamanted ha gounit degemer ar brezhoneg er skolioù. (...). Da heul ar vrezel e oa bet ul lañs nevez gant difennourien ar brezhoneg. Georges Dottin, dean skol-veur Roazhon en doa goulennet e vije desket brezhoneg er skolioù (...). Betek mont da ginnig ur sinadeg evit ar brezhoneg er skol d'ar Prezidant Wilson a oa en Europa d'ar poent-se.* »⁸ E 1934 e krogas da vezañ peuraozet ar stourm. Gant ar c'homunour Yann Sohier da gentañ. Gant anv *Ar Falz* e lañsas ur sinadeg war-du ar bobl evit ma vefe kelennet ar brezhoneg en holl skolioù Breizh-Izel : « *C'est une langue riche devenue aujourd'hui une langue de culture moderne. - C'est par elle, et par elle seule, qu'est possible l'éducation logique et rationnelle de nos enfants, l'émancipation culturelle du peuple breton...* »⁹ Arguzenniñ a rae evit diskouez e oa posupl bezañ desket er skol e brezhoneg, ar pezh na oa ket anat d'an ampoent. (Na pa voe krouet Diwan e 1977).

⁸ Kentelioù skol-veur S. Moal, Ar brezhoneg er skolioù, master 2

⁹ Ar Falz, n° 20, décembre 1934.

Kroget e veze da gomz eus diskar ar yezh : « *Sauvegarder les derniers vestiges d'une antique civilisation et d'une riche littérature malheureusement en grande partie disparues* » gant luskad « Ar Brezoneg er Skol » Yann Fouéré en e benn. Hag eus live deskadurezh ar Vretoned evel er sinadeg kentañ : « *le régime actuel est pour une bonne part responsable de la grande proportion des illettrés qu'on rencontre en Bretagne* ». Un enep-arguzenn d'ar mare-se pa oa ar galleg tu ar vodernelezh. Er gelaouenn *Gwalarn* e veze diskouezet e c'helled plediñ gant forzh peseurt danvez e brezhoneg er memes mare. Levrioù a veze moulet evit ar vugale ha kaset d'ar skolioù evit netra. « Ar Brezoneg er Skol » a skignas ur mennad war-du ar c'huzulioù-kêr evit kelenn brezhoneg (sinet gant muioc'h eget 300 kumun). Reizhabeget e oa an azgoulenn gant goulioù ar Brezel Bras : « *... la guerre de 1914 dont la Bretagne a souffert plus qu'une aucune autre province de France* ».

Tamm-ha-tamm e tremenas an azgoulenn eus ur c'heleñn e brezhoneg d'ur c'heleñn war ar brezhoneg. Ar gannaded a soutene al luskad o kinnig lezennoù. Pierre Trémintin, ur c'hannad a ginnig daou vennad : « *Article premier : la langue bretonne sera enseignée officiellement en même temps que le français dans les écoles primaires de Basse Bretagne. / Article 2 : La langue bretonne sera admise comme deuxième langue aux examens du baccalauréat au même titre que les langues étrangères et coloniales* » (19 mars 1936)

Gant ar strollad Gwenn-Ha-Du e oa bet staget an azgoulenn ouzh un dra ledanoc'h eget an deskadurezh vrezhonek, da lâret eo « *la libération de la Bretagne* ». Roll oberoù politikel¹⁰ e-maez-lezenn a oa bet implijet e 1936 : « *Nous avons accordé au Ministre français de l'Education nationale un délai d'un mois pour commencer à organiser chez nous l'enseignement de notre langue nationale réclamé aujourd'hui par trois Conseils généraux et plus de deux cents municipalités. Malgré notre patience, nous constatons que le gouvernement français n'a pas encore manifesté la moindre velléité d'accorder à nos enfants leur droit d'être instruits dans la langue.* »¹¹

Intrudu al lakaat e-pleustr kentañ a grogas e-keit troc'h an Eil Brezel-bed. Yann Kerlann, rener *Ar Falz*, a digoras ur skol brevez hollvrezhonek e Plistin (1942-1944), nav bugel enni. Ar skol gentañ dre soubidigezh 35 bloaz a-raok Diwan e voe. Gant renad Vichy e voe damaotreet ar c'heleñn : « 1 eurvezh 30 d'ar muiañ tout ». Etre 1958 ha 1961 e voe renet ur skol brevez katolik

¹⁰ « Répertoire d'action politique » diwar politikoniour Charles Tilly.

¹¹ L'Ouest-Éclair, N° 14406, 16 avril 1936

hollvrezhonek gant Armañs ar C'halvez e Ploueg-ar-Mor. Ret e vo gortoz 22 vloaz goude ar brezel evit ma virvilho ul luskad bras en-dro gant sinadeg Emgleo Breiz 150 000 a sinadurioù ganti. Peuzdigoret e oa bet an nor gant Lezenn Deixonne e 1951 oc'h aotren kentelioù amañ hag ahont. Tamm-ha-tamm e kreskas an niver a skolajidi hag a liseidi dibabet ganto an danvez dibab : eus 66 e 1952 da 1319 e 1981. Muioc'h-mui a liseidi a lakae o anv evit tremen an amprouenn vrezhonek er vachelouriezh ivez.

E 1977 e tigure dorioù ar skol Diwan kentañ e Lambaol-Gwitalmeze, pemp krouadur enni. « *E-keñver hengoun an Emsav evit ar yezh ez eo kement-mañ ur gwir dispac'h, ur reveulzi evel hini Kopernik : bremañ eo sevel, n'eo ket mui klemm hepken ez eo.* »¹² Pa oa bet kelaouet Gilles Servat eus krouidigezh Diwan : « *Me'wel' an traoù atav. Me oa en ma c'harr o vont da Naoned o soñjal putain un huñvre, un huñvre. 'm eus ket huñvreet en dra-se a-raok.* » (Michon, Herry, 2010) emezañ gant dour en e daoulagad 40 vloaz war-lerc'h. Tout ar bloavezhioù paseet hep brezhoneg er skol (pe dister) o deus lakaet an dud da grediñ e vefe an diskoulm da vat.

Evit diverrañ e verzhomp e oa ar stourm evit kelenn brezhoneg a-raok an Eil Brezel-bed kaset da benn gant pennoù bras evit ur bobl. Efedoù pozitivel an diyezhegezh a veze meneget dija. Un ezhomm evit bugale diskiant e galleg. Ingal e veze graet anv eus fealded pobl Vreizh d'ar Frañs evit ur sevenadur ken reizhabeget hag hini Bro-Chall. N'eus nemet e korf ar bloavezhioù 30 gant « Ar Brezoneg er Skol » e teuas war-wel an arguzenn « saveteiñ ar yezh » ha dreist-holl goude ar Brezel-bed. Taolioù esae a grogas d'ar mare-se pa veze ar Stad o reiñ aotreoùigoù.

Diwan zo frouezh ur stourm kroget 100 vloaz 'zo. Ur stourm taer a-wechoù. Pelloc'h eget difenn ar yezh eo silet an azgoulenn : adsevel ur vroad ha difenn enor ur bobl wasket : « *Entendons-nous bien encore quand on parle de la langue bretonne ce qui est en cause ce n'est pas l'existence ou la disparition d'un système linguistique particulier [...] c'est de la communauté humaine qu'il s'agit. Du droit qu'a l'homme à s'épanouir dans sa propre culture à s'enrichir personnellement à la transmettre [...] et encore de lui faire porter fleurs et fruits pour la richesse du monde* » (Denez, 1988). Setu dle Diwan a adkaver er skrid « Perak Diwan ? » : « *Yezh vev, ganti ur sevenadur dre gomz ha dre skrid hep e bar, hêrezh ar Gelted e Europa abaoe 2000 bloaz. Yezh ur vroad mestrez war he zachenn betek ar 15^{vet} kantved, ha komzet en 9^{vet} kantved e gourenez Arvorig a-bezh.* » (Perak Diwan ?, Diwan.bzh) Pebezh raktres skol !

¹² Kentelioù skol-veur S. Moal, Ar brezhoneg er skolioù, master 2, 2016

Memes tra, stad ar yezh ha ar c'hemmoù politikel zo cheñchet goude an Eil Brezel-bed. Istor Diwan a grog kentoc'h gant Yann stourmer, hêrezh an adnevezidigezh er bloavezhioù 70. Studioù uhel gantañ hag o chom e kêr. Torret eo an treuzkas war ar maez er braz eus ar familhoù. Tremenet omp eus ur goulenn evit ma vo desavet ar vugale en un divyezhegezh a-blaen (ar yezhoù a zo dezho ar memes statud) d'un divyezhegezh a-blom (an obererien a sav skolioù evit saveteiñ ur yezh vinorelaet).

1.2.2 Diwan : « les droits qu'on a on les prendra »¹³

Savet eo bet kevredigezh Diwan e 1977 diwar patrom ar skolioù euskarat. « *L'apport des Ikastolas, les écoles basques, a été essentiel* » eme Louarn (1979, p. 41), unan eus saverien Diwan. Unnek skol a zo bet savet dindan daou vloaz. Ar skolaj kentañ a voe krouet e 1988 hag al lise nemetañ e 1994. Hiziv ez eus un eizh skol kentañ derez ha daou-ugent, c'hwec'h skolaj hag ul lise.

Preder ar soubidigezh ne deuas ket diouzhtu : « *L'intention n'était pas de créer des écoles "en immersion" (terme qui n'était jamais utilisé). Ils voulaient des écoles qui enseignaient dans leur langue* » (Chauffin, 2016, p. 65) Teorizet e oa bet ar soubidigezh pemp bloaz a-raok, e 1972, gant Lambert et Tucker. Padal ez eus eus ar pleustr skol-se abaoe pell. Gant ar skolioù gall evel hon eus lâret a-raok met ivez evit difenn yezhoù o vont da get. E Kembre e oa bet savet ar skolioù kentañ en o yezh e 1939. Ar soubidigezh a zo implijet kentoc'h evit ar yezhoù en arvar. Identelezh ar soubidigezh a deuas da vezañ kreñvoc'h e Diwan adal 2002. Ur protokol sinet gant an Deskadurezh-Stad e 2001 evit ma teufe ar rouedad da vezañ dindan ur statud publik a voe nullet gant ar c'huzul-Stad e 2002 peogwir eo ar galleg ar yezh ofisiel nemeti hervez ar Vonreizh. Ouzhpenn-se eo enskrivet e Kod an Deskadurezh (lezenn d'ar 4 a viz Eost 1994) : « *le français est la langue de l'enseignement* ».

Un tabut a zo bet etre izili ar rouedad evit dileuskel ar soubidigezh ha mont war-zu parelezh an eurioù, da lâret eo 50% a c'halleg er c'hentelioù. Aet eo ar maout gant difennerien ar soubidigezh a sav hiziv-an-deiz identelezh skolioù Diwan e-keñver an hentennoù divyezhek. Burutellet eo ar raktres a-vil-vern ha gant tud a bep seurt. Dedennus eo evit kompren penaos eo levezonet mennad Diwan gant ar pal respont dezho.

¹³ Youenn Gwernig, Les derniers bougnoules, 1971

- Ar re na gredont ket e dazont ar yezh. Diefedus eo evit saveteiñ ar yezh : ne vo ket stummet trawalc'h a skolidi. Ouzhpenn-se n'eo ket komprenet ar brezhoneg desket er skol gant ar re gozh : izel e galite, hep pouez-mouezh, kimiek ar c'heriaoueg... Diboell eo kaout bugale o teskiñ ur yezh n'eo ket komzet gant ar gerent. Embannet an ali-mañ war ar groaz gant F. Morvan, Guéguen (2006), M. Morvan (2017), Barré (2007)...

- Ar re a difenn ar yezh. Lod eus an arguzennoù a zo boutin d'ar re diaraok (evel an diglosiezh). Diefedus eo Diwan peogwir n'eo ket sokializet ar yezh en diavaez. Distaget eo he deskerezh diouzh an tiriad. « *Globalement, cette communauté se livre aujourd'hui à une culture "hors sol", pratiquant la langue, la musique ou la danse d'une façon totalement détachée de leurs territoires d'origine. (...) Non seulement la culture bretonne se déconnecte de son espace d'origine, mais elle se détache également du milieu social qui l'entretenait jusqu'à présent.* » eme Ar C'hoadic (2003b). Lod a gav eo didalvez Diwan ha dister al live yezh treuzkaset enni. Patrig Hervé, bet rener Diwan, a displeg : « *Lod eus ar vrezhonegerien n'asantont ket da raktres Diwan ivez : pa vez brezhoneg er gêr, n'o deus ket ezhomm eus Diwan a zegas a-wechoù galleg en ti, gwir eo* » (Chauffin, 2015, p. 117) Ha tud 'zo o dije c'hoant da deskiñ brezhoneg d'o bugale hep tremen dre ar skol. Diwar enklask tezenn Chantreau e seblant munut o niver.

- Er vuhez foran ez eus Jakobined¹⁴ spontet gant ar raktres. Da skouer : « *Après le "il est interdit de parler breton et de cracher par terre", le mot d'ordre serait-il devenu "il est interdit de parler français et de cracher par terre?", interroge ainsi un opposant de Diwan proche de l'école publique* » a lenned e lizher lennerien *Le Télégramme* e 2003. « *Les écoles Diwan sont des écoles communautaristes bretonnes dans lesquelles il est interdit de parler français* » a displeger en ul lec'hienn tu-dehoù pellañ spontet gant an aon e lakfe ar brezhoneg ar galleg en arvar ! Paneve Melechon o lâret « *C'est une secte !* » e 2008. Politikel eo afer ar brezhoneg er skolioù.

1.2.3 Er skol ?

Ur spi bras-meurbet zo bet lakaet e Diwan evit saveteiñ ar yezh. N'eo ket diboell pa ouzomp eo bet lazhet ar yezh gant ar skol evit Yann vrezhoneger. Ar skol a zo bet hervez an istor al lec'h posupl evit sevel « an den nevez » gant meur a utopiezh (Spagn 1936, komunouriezh, naziegezh...). Ha perak pas ar brezhoneger nevez ? « *Les organisations engagées dans le*

¹⁴ Diwar ar stêr poblek a vez roet d'al luskad-se, pellik a-walc'h a-wechoù eus istor ar strollad e-pad an Dispac'h Bras. (S.o Maintenant, 1984).

"renouveau" des langues celtique espèrent que les enfants scolarisés dans les écoles de type immersif participent à la création d'une société bilingue » (Barré, 2007, p. 177).

Al lec'h gwellañ ? N'eo ket sur. « *Un lieu fermé où les connaissances sont transmises avant d'être appliquées par les élèves dans le monde extérieur* » hervez Comiti (2007, p. 54) a labour e Skol-Uhel ar C'helennerzh hag an Deskadurezh (ESPE) e Korsika ne c'hallomp ket krediñ en un efedusted bennak peogwir o deus ar skolidi interestoù all: « *Le "métier d'élèves" suppose des choix, des comportements, des parcours, des stratégies et des préoccupations qui sont aux antipodes des problématiques liées au sauvetage d'une langue menacée. L'intérêt immédiat des élèves est ailleurs. Sauver la langue corse n'est pas le premier de leurs soucis et encore moins une fonction qu'ils pensent devoir assumer. En effet la valeur marchande du corse sur le marché scolaire est bien trop faible pour susciter un quelconque engouement pour doper la motivation de l'ensemble des élèves.* » (Comiti, 2007, pp. 55-56).

Neoazh, abaoe an Eil Brezel-bed ne c'hall ket bezañ en un ensavadur sokializañ all : « *Le tarissement de la transmission familiale ne laisse pas d'autre choix (...) que celui de l'apprentissage par la langue de l'enseignement* » (Garabato, Gosende, 2007, p. 236) Ha Barré o kemer harp war studiadennoù e broioù keltiek : « *La production par l'École de néolocuteurs plus ou moins compétents n'aboutit pas nécessairement à la création de groupes sociaux ou la néolangue sert à l'interaction sociale* » (2007). Kadarnaet gant Renard, ur yezhoniour a sav ur sell pozitivel war ar yezhoù minorelaet : « *l'école ne sera qu'un moyen insuffisant s'il n'est pas intégré dans une authentique politique globale d'aménagement linguistique. Ce dernier, nécessairement plurilingue, doit prendre en compte tous les facteurs impliqués : économiques, culturels, sociaux, linguistiques, éthiques, administratifs, juridiques, éducatifs...* » (2007, p. 31)

Diaezamantoù a c'hall degas reoù all hervez Comiti. Ar gelennerien hag ar gumuniezh desevel a c'hall bezañ lakaet diaes : tapet etre efedusted o labour ha gwask an Emsav, kuit da diorren ur santimant kablusted. Komz a ra eus ar « syndrome du bocal » (Comiti, 2007). Hag al liseidi a zo en ur *bocal* tapet etre o c'hoant krennarded hag hini an ensavadur evito.

Ur sell spis a zo bet war ar remziadoù kentañ. Arouez ur raktres politikel e oant. Savet ez eus bet filmoù, abadennoù tele, pennadoù kelaouiñ... Gwenn, liseadez ar rummad kentañ a displeg: « *Er bak em eus santet e oa un dra bennak a bouez peogwir e oa an holl o c'hortoz evel-just e vije 100% evit ar wech kentañ. Hag aze em eus santet peogwir e oan-me an hini he doa c'hwitet da gentañ, hag am eus bet er repech war-lerc'h. 'M eus santet pa n'oa ket bet 100% diouzhtu e oa ur bern tud o c'hortoz e vije 100% memes tra. Evit Diwan, da lavaret eo n'oa ket me, met*

Diwan. P'am eus bet da c'houde ez eus lod o deus lavaret din a-raok lavaret gourc'hemennoù din e oa kentoc'h "100% mat tre" » (Danielou, 2009). Al liseidi a doug ur brastres skol ledanoc'h eget o hini hepken.

Krouidigezh Diwan n'eo ket dinec'h. Enebourien bolitikel eus un tu. Spioù divent eus un tu all. Gwask a zo peogwir e seblant bezañ an hent pennañ (nemetañ ?) evit saveteiñ ar yezh. Peadra evit lakaat gwask war ar skipailhoù, ha diwar-neuze ar skolidi. Ret eo prouiñ eo posupl deskiñ e brezhoneg ha prouiñ e vez komzet brezhoneg gant ar vugale ivez.

Ouzhpennomp evit echuiñ e ranke da Diwan sevel he flas e-touez ar sistem skol gall. N'eo ket soutenet gant ar galloudoù publik dre-vras. N'eo ket pal an Deskadurezh-Stad sevel bugale divyezhek (munut eo plas ar gomz) met kentoc'h diuzañ ur vegenn. An eiladur sokial stadet gant Bourdieu ha Passeron (1994) a vez merzhet hiziv-an-deiz atav. Penaos e c'hallfe bezañ plas ar brezhoneg treuzfurmet gant ar skol na ra nemet adproduiñ ar memes sistem ?

2 Tro-dro ar vugale : bezañ enskrivet e Diwan

A-raok kas preder an eil lodenn vras evit kompren perak eo start d'ar vugale komz brezhoneg eo dedennus gouzout an endro tro-dro dezho. Studiet e vo daou ensavadur. Da gentañ, rouedad Diwan, pouez ar soubidigezh enni hag he doare da vrudañ. Da heul, tud ar vugale hag o choaz enskrivañ o bugel en un hentenn dre soubidigezh.

2.1 Ar soubidigezh, arouez Diwan

A-sil-da-sil eo deuet da vezañ ar soubidigezh identelezh Diwan. Sevel a ra an diforc'h gant an deskadurezh vrezhonek e skolioù publik (Divyez) pe prevez (Dihun) : « *Dibarder he c'helennadurezh a ra eus Diwan an hentenn nemeti oc'h ober gant ar brezhoneg evel yezh darempredoù hiziv an deiz, d'an holl liveoù, er vuhez skolel ha kevredigezhel* » (Ar soubidigezh yezhel, Diwan.bzh). Estreget ar c'helenn eo : « *N'eo ket ar brezhoneg yezh ar c'hlas hepken, yezh ar vuhez kevredigezhel eo ivez* ». Mont e brezhoneg pep lec'h er skol eo ar pal. « *La langue est considérée comme devant être apprise avec les autres, qui la font vivre dans la réciprocité formative* » eme Servain ha Pentecouteau diwar-benn stajoù hañv Keav dre soubidigezh. « *Il s'agit d'un processus éducatif d'apprentissage (réciprocité didactique) qui se compose dans la relation aux autres (réciprocité relationnelle)* » (Pentecouteau, Servain, 2016, p. 78)

Memes tra n'eo ket simpl da lakaat e-plas. N'ez a ket en-dro evit tud 'zo : « *Soñjal a ra deomp e vefe ret lakaat hor bugale diwezhatoc'h en ur skol m'emañ ar brezhoneg he yezh nemeti (dre soubidigezh evit mat : er c'hlasoù hag er porzh-skol). Evit poent ha diwar a ouzomp n'eus ken nemet unan bennak mod-se (siwazh !)* » eme kerent raktres Kervrezhon¹⁵. Nemet ur skol ! Pell emañ kinnig Diwan. Ha renerez Diwan, Anna-Vari Chapalain, da disklêriañ : « *N'eus ket a bedagogiezh Diwan, d'am soñj eo ur fazi pa vez lavaret "ur bedagogiezh Diwan". Dre skiant-prenet eus un tu, ha dre ar pezh a soñjan en tu all, eo sklaer hag anat, hag eo mat e-giz-se, ur sistem zo, ur sistem hag a zo ar soubidigezh da lavarout graet e vez traoù e brezhoneg ha ret eo implij ar brezhoneg evel yezh kelenn* » (Chauffin, 2015). Kadarnaet eo mui-pe-vui gant hec'h aterserez : « *En ce qui concerne les recherches sur les classes en immersion, l'empirisme représente malheureusement une grande proportion des méthodes pédagogiques des enseignants* » (Chauffin, 2015, p. 41) Marteze he deus abegoù Chapalain evit chom hep termeniñ ar soubidigezh ? Evel renerez he deus c'hoant da chom neptu e liesegezh rouedad Diwan. Penaos e c'hallfe diazez ur sistem skol bezañ hep pedagogiezh, hep hentenn ?

An diouer a resisadurioù war ar soubidigezh a zo rebechet. Tu izili Diwan evel Thierry Jamet : « *Mais encore, c'est quoi la pédagogie de Diwan, mis à part l'immersion et l'incroyable investissement de ses enseignants ? Personne n'en sait rien.* »¹⁶ Pe tu Guéguen he deus savet un dezenn a-enep Diwan : « *technique linguistique qui ne donnait aucun élément concernant les pratiques pédagogiques utilisées dans les classes* » (2006, p. 131). Azgoulenn Dazont Diwan (enebet kreñv ouzh preder Guéguen !) eo a-benn ar fin : « *kelenn ar soubidigezh (termeniñ mat petra eo, penaos he lakaat e pleustr...) d'an danvez-skolaerien ha d'ar skolaerien, o kemer harp war ar skolioù e-lec'h ma vez soubet ar vugale e brezhoneg* ». N'eo ket heñchet ar skipailhoù war an doare-ober.

Dislavaret eo ar renerez gant teuliad degemer stajidi eil derez Diwan memes tra. En ur pennad anvet « pedagogiezh Diwan » e lennomp : « *Ouzhpenn kelenn e zanvez d'ar skolidi e rank ar c'helenner en Eil Derez kenderc'hel gant al labour graet e Kentañ Derez Diwan evit lakaat ar skolidi da vont war-raok e brezhoneg en ur implijout ar yezh e pep degouezh. Ur garg pouezus an hini eo* ». Hag un tammig pelloc'h : « *ret eo [da bep ezel skipailh] broudañ ar skolajidiliseidi d'ober gant ar brezhoneg atav* ». Met start eo gouzout hiroc'h war ar bedagogiezh da lakaat e-pleustr.

¹⁵ Ur gêriadennig e brezhoneg, Ya !, 21/11 /14

¹⁶ Diwan : et si on changeait de direction ?, Thierry Jamet, 7seizh.info, 6/5/2013

Ar bedagogiezh a zo « *hollad an hentennoù evit desevel ar vugale* ». N'eo ket aes atav rannañ ar pezh a denn d'ar bedagogiezh hag ar pezh a denn d'an didaktelezh. « *La didactique porte sur les méthodes ou les pratiques d'enseignement tandis que la pédagogie porte sur l'éducation ou l'action éducative.* » a lenner er Grand dictionnaire terminologique de l'Office de la langue française. Ar soubidigezh a dennfe muioc'h d'an didaktelezh eget ar soubidigezh ? En e destenn e tiskouez ar c'helenner Kerleau penaos e c'hall bezañ implijet ar soubidigezh evit ur mont endro pedagogel : « *En étant un enseignant désirant – d'apprendre mieux le breton – j'ai transmis mon désir d'apprendre.* » (Kerleau, 2016, p. 37)

E teuliad degemer ar gelennerien stajidi e vez lennet adarre : « *A-bell 'zo e ouezer mat eo aesoc'h hag efedusoc'h kelenn mard eo diazezet al labour war ar blijadur hag an dedenn. N'eo ket dre ret lakaat anezho da c'hoarzhin pe d'ober traoù a blij dezho, met kentoc'h kavout an tu da ginnig kement tra zo da zeskiñ pe d'ober en doare sachañ evezh, youl ar skoliad dreist-holl pa vez diaes ar pennad da welet* » War lec'hienn e rubrikenn Kuzulioù da dud ar vugale « *M'en devez c'hoant ho pugel da gomz brezhoneg, roit kalon dezhañ, arabat e lakaat d'ober dre ret avat.* » Perak ne c'hall ket ar priñsipoù-se bezañ lakaet e-plas evit ar soubidigezh ?

A-viskoazh ez eus bet e Diwan daou du etre ar re a difenn ar yezh da gentañ penn hag ar re dedennet gant pleustroù pedagogel disheñvel evit ar vugale (lod 'zo renket e-barzh an div lodenn memes tra !). Amañ ez eus tolpet ur rannerezh kreñv e Diwan a sav diemglevioù etre kerent, kelennerien ha gopridi all.

2.2 Dont da Diwan : petra eo prezeg ar rouedad

Peseurt abegoù zo lakaet war-wel gant Diwan evit displegañ he raktres, evit atizañ ar gerent da enskrivañ o bugel ? Penaos e vez displeget perzhioù-mat ar soubidigezh ? Perak deskiñ brezhoneg d'ar vugale paneve « *muioc'h eget 70% eus tadoù ha mammoù bugale Diwan n'int ket brezhonegerien* » (Ar soubidigezh yezhel, Diwan.bzh) ? Gallout a reomp rannañ an arguzennoù e div lodenn.

Ul lodenn gentañ a dap harp war an istor, ar sevenadur, ar stourm evit ar yezh... Sellit amañ ar pezh a lenner war lec'hienn Diwan :

- « (...) la façon concrète de vivre une dynamique de reconquête et de réappropriation de la culture bretonne et de son support premier, la langue bretonne bien que cette réappropriation culturelle dépasse largement le cadre scolaire. »
- « Hêrezh ar Gelted e Europa abaoe 2000 bloaz » eo ar brezhoneg.
- « ur sevenadur gwriziennet en un endro bev ».
- « Abalamour m'eo ar brezhoneg ul lodenn eus an endro, ar sevenadur en-dro d'ar bugel ».
- « Difenn ar brezhoneg a dalv bezañ tommoc'h ouzh an disheñvelder eget ouzh an unvanadur, ouzh al liesdoare eget ouzh an untonelezh. »

Gwelet e vez ar pouez lakaet war chouk ar vugale hag ar gelennerien. Ouzhpenn deskiñ brezhoneg evito o-unan int binviji ur politikerezh yezhel evit saveteiñ ur yezh a ya da get. Peadra da bennfollañ ! Pe tu ar skipailhoù : ma ne zeuont ket a-benn e vo marv ar yezh ? Evel ma vez skritellet e lec'h degemer al lise « *Diwan, da yezh ne varvo ket* ». Pe tu ar vugale : kiriek int da saveteiñ ur yezh hêrezh ar Gelted 2000 bloaz 'zo ! Klask a raimp gouzout hag-eñ e klot ar palioù-se gant tuedoù (dispositions) ar vugale ha reoù ar gerent ? Hag arguzennoù liseidi Diwan 'zo ar memes re ?

Un eil lodenn ma voder an arguzennoù skiantel ha pedagogel.

- « *Rak er bugaleaj abred e vez, evit ar pep brasañ, diorroet an empenn hag an ampartiz speredel. (...) D'an oad-se e vez digor spered ar bugel; deskiñ a ra hep poan.* »
- « *Naturel eo evit ur bugel ober gant div yezh. N'eo ket dinatureloc'h sevel ur bugel e div yezh eget e lakaat da zeskiñ seniñ piano* »
- « (...) la langue n'est pas un but mais un outil. L'immersion linguistique est une méthode d'apprentissage d'une deuxième langue (dite "cible") qui diffère de la méthode traditionnelle. Cette dernière utilise la langue "cible" comme vecteur de savoir. » eme tud Diwan Kastell-Paol¹⁷.

Promesaoù Diwan da dud ar vugale a lenner amañ. N'eo ket nevez. E 1988 e veze meneget efedoù pozitivel nemeto an divyezhegezh dija, e kein al levr « *peseurt skol evit Breizh ?* » skrivet gant Diwan. Diskouez e oa ken ampart skolidi Diwan hag ar re all eo bet ar stourm kentañ. Lorc'h zo bet gant ar skipailhoù p'o deus paket o bachelouriezh al liseidi gentañ. Lorc'h da vezañ deuet a-benn e galleg. Pell diouzh azgoulenn tremen tout ar vachelouriezh e brezhoneg gant lod liseidi bremañ.

¹⁷ Kemennadenn d'ar gazetennerien kaset gant Association d'Education Populaire Diwan Kastell Paol, Le Telegramme, 08/01/2010

Seblantout a ra bezañ daou bal e-unan. Unan tro-dro d'ar brezhoneg evit ma chomfe bev ar yezh (met o plantañ anezhi en ur bed kozh-Noe). Pal pennañ ar gevredigezh eo : « *Gant Diwan e sav ar goulenn : ha bev e chomo ar brezhoneg ?* » (Perak Diwan ?, Diwan.bzh). Unan all evit kendrec'hiñ eo Diwan ur skol a-feson evit ledanaat ar speredoù (met n'eo ket ar pal diwezhañ). Diwar-se ne vo ket souezhus merzhout n'enskriv ket ur bochad kerent o re evit ma vo implijet ar brezhoneg bemdez. Met petra a ouzomp diwar-benn c'hoant tud ar vugale ? Petra a oar ar skolidi diwar-benn c'hoant o zud ? Penaos e vez treuzkaset ar pal eus an dud d'ar vugale ? Un dislavar a zo etre ar c'hoant ensavadurel Diwan ha hini ar gerent ?

2.3 Dont da Diwan : ar gerent, c'hoantoù klot ha diglot gant ar rouedad

Ar braz eus an dud ne gomz ket brezhoneg gant o bugale : « *l'apprentissage dans le cadre familial concernait un quart des élèves* » (Broudic, 2011, p. 51). Er studiadenn savet gant Chantreau ha ganin e kavomp ur sifr izeloc'h e 2019. 47% eus ar vugale o deus ur vamm pe un tad pe an daou a oar brezhoneg met n'eus nemet 29% eus ar gerent-se az a ingal e brezhoneg gant o bugel. Kar memes ar re a oar brezhoneg a c'hall bezañ lakaet diaes pe n'o deus ket c'hoant da vont e brezhoneg gant o re. A-benn ar fin n'eus nemet 12,4 % eus al liseidi hag a zo desavet e brezhoneg.

Diwar labour Adam (2015) e ouïomp ne vez ket enskrivet bugale en un hentenn dre soubidigezh pe divyezhek nemet evit ar brezhoneg. Lakaat a ra an enklaskerez meur a abeg war-wel. Ar gwareziñ hag an treuzkas eo ar re a glot ar muiañ gant palioù Diwan. Koulskoude e tibab kerent 'zo an hentenn evit ar bastuster da dennañ (*utilités cognitives*), an aezamantoù (aesoc'h deskiñ un eil yezh), mont en-dro pedagogel Diwan pe evit abegoù pragmatek (skol tost-tre ouzh an ti). Ne vo ket atizet er gêr ul lodenn eus ar vugale evit komz dibaouez brezhoneg war porzh ar skol. Hag ar gerent a c'hallfe kaout o c'hont ma'z eo kat o bugel da gompren, skrivañ ha distripañ brezhoneg er sal-glas, ha mat pell' zo. Gwallefedoù a zo zoken : « *on les a mis à l'école pour qu'ils apprennent le breton, mais comme ils le parlent à l'école on le fait moins* ».18

Shemaioù savet gant an enklaskerez a vez adkavet e-touez liseidi Diwan. Deskiñ brezhoneg n'eo ket an abeg pennañ atav :

¹⁸ Rencontre « Divyez. Ecole et famille, De Bretagne et d'ailleurs : éducations plurilingues en contexte minoritaire », 1er octobre 2018. Merzhet eo en Euskadi ivez : « (...) *l'envoi de ses enfants par l'erdaldun dans un modèle éducatif est considéré être un effort suffisant par celui-ci en vue de son intégration linguistique puisque comme nous l'avons vu la communauté linguistique est davantage une communauté de sentiments que d'emploi de la langue* » (Joly, 2007, p. 110)

« *Ma zad en deus lakaet ac'hanon e Diwan peogwir en doa poan gant ar yezhoù. Soñjet en deus marteze e vefe aesoc'h eviti deskiñ yezhoù, kaout aezamantoù, met 'benn ar fin n'on ket ken barrek ha se, e saozneg pe en alamaneg.* » Chan, Klas Termen, 22/02/2018, SB

Pe sistem pedagogel Diwan.

« *Ma mamm he doa kavet e-keñver ma fersonelezh e oa Diwan un aergelc'h a vefe mat evidon. E-keñver skolioù e-lec'h ma vez kalz a dud, ret eo lâret c'hwi d'ar gelennerien. Ma mamm a soñje e vefe gwelloc'h din bezañ en un aergelc'h familh.* » Chan

Kinnig a ra Adam un ahel gant daou benn. Kerent' zo a wel ar yezh evel ur pleustr sokial (strategiezh yezhel) ha lod all evel ur pleustr deskiñ (strategiezh pedagogel). Ar stourmerien, ar vrezhonegerien, ar Vretoned eus un tu. Ar re kendrec'het gant an divyezhegezh, ar « gerent vat » eus an tu all.

E deroù an XXI^{vet} kantved e lâre Ar C'hoadic : « *En l'état actuel de nos connaissances, il semble que les motivations d'ordre psychopédagogique (l'utilité du bilinguisme pour le développement intellectuel des enfants) l'emportent sur les convictions relatives à la langue bretonne.* » (2003a, p. 7) Stadet e veze ar memes tra e Bro-Skos da skouer : « *Ils semblent être plus attachés au thème du bilinguisme en général qu'à la stricte conservation de la langue gaélique* » (Goalabré, 1994, p. 57-58). Moal az a pelloc'h gant enklask Bodart e 1999. Eus un tu eo ar vrezhonegerien (30% eus ar gerent) : « *les plus nombreux à exprimer leurs convictions concernant la langue elle-même, mais c'est aussi le cas des parents à fort capital scolaire* ». Eus un tu all eo ar gerent divrezhonek « *qui marquent plutôt leur intérêt pour une pédagogie différente* » (2007, p. 229).

Ha c'hoant piv eo komz brezhoneg ? Pe euskareg evel ma tispleg Ximun, ul lisead : « *Ma mère voulait progresser en basque elle-même, donc elle a fait en sorte de nous mettre dans une Ikastola pour pouvoir progresser en même temps que nous* » (DG). Ar psikatrour Kress a gomz eus c'hoantoù kerent/bugale pa'z eo bet dilezet ar brezhoneg : « *L'adulte bien souvent renonçait à cet apprentissage et en reportait la charge en même temps que l'espoir sur l'enfant, ce qui lui permettait une économie d'effort psychique en même temps qu'un gain narcissique un enfant interposé* » (1988, p. 70)

Ouzhpenn-se n'eo ket gwall ditouret ar gerent evit a sell ouzh diaesterioù an divyezhegezh atav : « *T, 46 ans : Y'a qu'à l'école qu'ils parlent breton, hein [les enfants] ! Entre eux...* » (Quéré, 2000, p. 62) eme ur vamm, ha hi dipitet. He da grediñ e komzfe brezhoneg he c'hrouadurioù peogwir e ouiont ar yezh ! Ouzhpenn-se n'oar ket brezhoneg ar vamm. Penaos e c'hallfe ar vugale cheñch yezh er gêr ? Ha dreist-holl perak ? « *La connaissance d'une langue n'entraîne pas automatiquement son usage. Plus particulièrement en ce qui concerne l'enseignement, le fait d'apprendre une langue à l'école n'entraîne pas son usage en dehors de l'établissement scolaire si cette langue n'a pas de fonction spécifique en dehors de l'école* » (Artetxe Sarasola, 2014, p. 133) a displeg ur sokioyezthoniour euskarat.

Diwar-neuze e vez laosket ar yezh e domani ar skol re alies. N'eo ket troet war an dazont. Ne gred ket ar gerent e c'hallo o mous labourat pe bevañ e brezhoneg. « *Cette langue n'a pas beaucoup de prestige à leurs yeux. Ils ne l'associent pas au monde du travail, des médias, de la littérature pourtant très riche. Eux la rattachent aux racines, au passé, et la confinent au monde de l'enfance* » (Saint-Andre, 2017) eme Aire. Start eo komz ur yezh, memes war porzh ar skol, ma n'he deus buhez ebet en diavaez.

Evit klozañ eo tapet lod liseidi etre daou c'hoant enebet a-wechoù, urzhioù a c'hall bezañ dislavarus etre ar gerent hag an ensavadur Diwan zoken.

B. AN ENDRO ETREOBER A-VREMAÑ¹⁹ : AL LISEIDI TAPET GANT AN AERGELC'H

Evit kompren an endro sokial e vo lakaet war-wel an doare ma vez komzet eus plas ar brezhoneg gant al liseidi. Da c'houde e vo keñveriet gant skolioù dre soubidigezh all evit adlec'hiañ endro Diwan en ur c'hudennadur ledanoc'h.

1. Endro etreober al liseidi : mont en brezhoneg e Diwan

« *On trouve chez ces jeunes des représentations et des attitudes contradictoires où se combine le maintien de certains préjugés hérités et bien ancrés dans la société galicienne et d'autres qui sont nés de leur contact avec l'école* » (Garabato, Gosende, 2007, p. 235) a skrive div sokioyezhoniourez c'halizat diwar o studiadenn diwar-benn krennarded ul lise. E Diwan ne gav ket d'al liseidi e komzont kalz brezhoneg er-maez ar c'hentelioù daoust m' o deus ur sell pozitivel ouzh ar yezh. 78 % eus al liseidi a disklêr bezañ tomm-tre pe tomm a-walc'h ouzh ar yezh (KCGG). Evit kavout boued da brederiañ e ranker pellaat diouzh ar goulenn « *petra eo stad ar brezhoneg el lise ?* » (an hini a lak da ankeniañ izili an Emsav) Penaos e c'hallfe bezañ mat stad ur yezh vinorelaet ? Frouezhusoc'h eo goulenn « *pegoulz e komzit brezhoneg el lise ?* » da skouer.

Ar respontoù a c'hall bezañ lavar-dislavar evel-just (Dołowy-Rybińska, 2016). Kompliket eo evit ar grennarded bevañ en un aergelc'h diglosiek. « *[Leur discours] dévoile aussi toutes les contradictions qui habitent leurs esprits. D'une part, se trouvent l'attachement et l'envie de défendre et de conserver LEUR langue et la conviction (identitaire) de leur droit à la parler. D'autre part, se trouve une société diglosse, habitée de contradictions et dans laquelle sont ancrées de vieilles représentations* » (Garabato, Gosende, 2007, p. 247) eme ar sokioyezhoniourezed diwar-benn ar re yaouank e Galisia. N'eo ket simpl p'eo ar grennardiezh mare an dibaboù, ar choazoù, an identelezh o sevel... Pa eo bet lañset sinadeg 2016 evit tremen ar vachelouriezh e brezhoneg e oa bet sinet gant daou dermenad Diwan o doa dibabet er memes sizhun tremen ar vachelouriezh war an Istor-Geografiezh e galleg !

¹⁹ Contexte d'interaction présent, diwar Bernard Lahire (2011)

1.1 « Soubenn ar maen » : ar galleg a zo deut en-dro

Pa oa bet savet emvod kentañ ar Strollad Brezhonekaat e lise Karaez, e deroù bloavezh-skol 2016, e oa bet lâret diouzhtu gant ul lisead :

« Ret eo anzav n'eus ket kalz al liseidi a nac'hfe ne vez ket komzet kalz a vrezhoneg el lise. » Feliks, Klas Termen, 4/10/2016

Kempouezetoc'h eo kinnig Izaouen daoust ma'z a d'ar memes tu :

« Sklaer ez eus muioc'h a c'halleget a vrezhoneg », Klas Termen, 08/02/2018, SB

Al liseidi a zo tuet e-keñver an norm, ar reolenn zoken, lakaet e-plas gant Diwan. Peadra da reiñ dour da brad Guéguen. *« Après plusieurs observations sur la cour, pendant la récréation, nous nous serions aperçus que le français était omniprésent quand les enfants se retrouvaient entre eux »* (2008a, p. 2) emezi p'he doa studiet skol kentañ derez Tregon.

Displegadennoù liesseurt a zo eztaolet ganto evit chom hep komz brezhoneg. Hep urzh e c'hallomp menegiñ : ar boazioù etre mignoned, an diouer a c'heriaoueg, ar skuizhder da vrezhonegañ, an ezhomm da gomz buan....

« Boaz eo bet tapet etre an dud da vont e galleg. Start eo mont e brezhoneg goude. » 04/10/2016

« Gout' a ran gant ma mignoned karetañ em eus poan o komz brezhoneg. Atav em eus komzet galleg ganto, ur boaz eo. » Madenn, Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

Boazioù tapet er skol-vamm a vez lâret, daoust ma'z eus lod mat o sevel mignonaj nevez el lise. Met, ur wech diabarzh et an normoù gant an hiniennoù e teuont da vezañ diemskiant.

Lâret a reont n'o deus ket ar gerioù evit komz ivez. Ne gav ket al liseidi o deus ar varregezh da vont e brezhoneg e pep degouezh. Daoust ma'z int bet desavet e brezhoneg er skol abaoe ar skol-vamm n'int ket niverus o vont e brezhoneg gant o mamm pe gant o zad.

« Ar c'heriaoueg a vank. N'ouier ket lâret. » « Evit lâret traoù berr e vez graet e brezhoneg. Evit sevel ur preder e vez graet e galleg. »
04/10/2016

Morvan, ul lisead bet, a displeg penaos e kave diasur e live brezhoneg. *« Parfois nous avons aussi un mauvais lexique, disant moustachou pour la moustache alors que cela désignait d'autres types de poils, batimant pour un édifice alors que cela ne pouvait désigner qu'un navire en breton, botoù pour des bottes alors que le véritable mot était heuzoù, forgeant l'affreux chaosonoù alors que nos ancêtres les Celtes portaient quant à eux des kofignonou, etc. »* (2017, p. VI) Ur santimant a divarregezh a zo gant al liseidi. Nemet 23 % eus al liseidi o deus santimant kaout ul live mat e brezhoneg diwar hon enklask (KCGG).

Ur striv eo brezhonegañ memes goude 15 bloavezh-skol e Diwan :

« Ar skuizhder a lak ac'hanomp da gomz galleg, peogwir n'hon eus ket da soñjal evit komz galleg, dont a ra evel se. Startoc'h eo komz brezhoneg pa vezomp skuizh. » eme Madenn, desavet e brezhoneg gant he mamm memes tra ! (22/10/2018)

Santimant o deus ne vez ket graet trawalc'h a strivoù evit mont e brezhoneg gant o c'hamaladed.

*« - Fantig : al liseidi a c'hallfe ober un tamm striv.
- Izaouen : tu ar striv, bez ez eus ur gudenn. Diaes eo. N'eo ket ur blijadur, ur youl. »* Klas Termen, 08/02/2018, SB

Hag a-benn ar fin eo ar galleg evit komz war ar prim. *« La langue maternelle, on ne la parle pas elle coule. La langue acquise, on doit sans cesse veiller à ce que rien d'étranger n'y pénètre »* eme ar skrivagner Israelat Aharon Appelfeld (Aviv, 2004).

« Kalz aesoc'h eo mont e fulor e galleg, pe kaout tabutoù e-keit ma komzez buan gant an den, peogwir 'peus c'hoant da arguzenniñ war un dra, ha peus c'hoant da vont gant ar maout. E galleg ez a buan-tre

peogwir 'peus ket c'hoant da leuskel un den all da gomz. Goude, e brezhoneg eo ret kaout amzer da soñjal, da raksoñjal, ne zeu ket war ar prim... gorrekoc'h eo. Marteze n'eo ket ar memes tra evit ar re zo brezhonegerien a-vihanik.» Gaid (Klas Termen, 22/02/2018) brezhoneg ebet ganti er gêr.

Ha Gaid da lâret un tammig diwezhatoc'h en atersadenn :

« Memes ar gelennerien zo enervetoc'h e galleg. »²⁰

Evel a lâr ur gelennerez e Kanada : *« ils savent que je suis vraiment fâchée et déçue quand je parle en anglais »* (Moore, Sabatier, 2012, p. 45). Gallout a reomp soñjal eo diaes evit al liseidi ober gwelloc'h eget o c'helennerien !

Testenioù al liseidi a deu da soublañ efedoù pozitivel an divyezhegezh lakaet war-wel gant ar skolioù hag ar gerent. J.-Y. Broudic hag Esteban a embann diaesterioù an divyezhegezh en o buhezskrid evel liseidi Diwan. *« Pa veze goulennet outañ petra oa e yezh-vamm, e responte ne ouie ket, en ur gontañ e oa bet savet e galleg en un endro brezhonek. Ha bremañ e lavare n'en doa yezh-vamm ebet. Diyezh »* eme J.-Y. Broudic (1993). *« Je n'ai rencontré toutefois que des individus qui s'en félicitaient. Et lorsque j'ai tenté, ici ou là, d'exprimer avec quelque franchise mes réticences et plus encore ma suspicion envers une telle pratique (...), mon sentiment n'a provoqué le plus souvent que la surprise »* eme Esteban (1990) en e du.

1.2 Ur yezh digoulzet

Pa vez goulennet ouzh liseidi Diwan : *« petra eo ar brezhoneg evito ? »* gant Kuzul Rannvroel ar Yaouankizoù (KRY) e tro selloù al liseidi war an amzer paseet : *« Pour moi la langue bretonne c'est d'abord la langue de mes ancêtres, la langue que parlait mes grands-parents »* (Alan). *« C'est la langue qui est parlée par nos arrière-grands-parents, nos grands-parents et parfois nos parents »* (Yanna). *« Pour moi, elle représente la culture de la Bretagne »* (Aziliz). *« La langue bretonne, ça fait partie entièrement de la culture de la Bretagne, une culture qui est forte et qui a existé plus forte dans le passé »* (Ulysse). *« Laouen on da c'houzout brezhoneg peogwir e komprenan kalz gwelloc'h traoù er vro. Da skouer, se zo un dra resis met an anvioù-lec'h zo un dra a blij din kalz. Kavout a ran pouezus kompren anezho ha gouzout peseurt*

²⁰ Farsus eo merzhout ez ae an dud e brezhoneg er ger gwechall-gozh evit trouzañ ar vugale ivez !

talvoudegezh zo ganto. Met ivez evit tout ar pezh a zo festoù pe sonerezh hengounel » (Keziah). (CRJ Bretagne, 2017)

Seurt respontoù a deu da gadarnaat soñjoù boutin degaset gant Diwan (s.o. pajenn 24) : « *c'est là une façon de "socialiser" une représentation, de l'aménager, de la modifier pour l'adapter au niveau d'intellection et aux attentes de la société dans laquelle elle se déroule* » (Goffman, 1996, p. 40). Evel pa vez goulennet ouzh al liseidi perak o deus divizet dont da lise Diwan e vez klevet an aliesañ : « *evit ar spered familh hag ar brezhoneg* ». Setu soñj Izaouen.

« Ma teuez da Diwan eo ret asantiñ raktres Diwan memes tra... padal ez eus Divyez. » Klas Termen, 08/02/2018, SB

Ur paradoks zo amañ. Staget eo ar yezh ouzh an amzer tremenet en ul lec'h – ar skol – a rank prientiñ o dazont. Tapet eo al liseidi etre daou brezeg evel e Galisia : « *contre les vieux préjugés des générations passées ni contre des critères comme celui de l'utilité ou de l'universalité des langues* » (Garabato, Gosende, 2007, p. 247). E lec'h ebet n'emaint er plas mat. E-touez ar seizh lisead-ez aterset gant KRY n'eus nemet unan a stag ar brezhoneg ouzh yezh ar pemdez hag an dazont : « *Ca représente une bonne part de la langue que je parle tous les jours parce que déjà au lycée tous les cours sont en breton et chez moi mes parents parlent breton. Le breton fait partie de ma vie.* » Estregetañ n'emañ ket e blas er vuhez bemdeziek evit ar braz anezho. « *On a longtemps tenu un discours assez dramatique sur la situation. Celui d'une langue millénaire, la plus ancienne d'Europe, en train de disparaître. Et le fait de sauver une langue est peut-être une charge trop lourde à porter pour les adultes. Une charge que ne pourront pas supporter les enfants ou les jeunes* » (Saint-Andre, 2017) eme Aire.

Kinnig a ra ar skol d'ar vugale deskiñ ur yezh gwelet evel digoulzet gant ar re yaouank. N'eo ket yezh ar sport, ar fest, ar rouedadoù sokial, ar beajoù... Ur yezh en ur « *sevenadur gwriziennet* » eme Diwan, met plantañ gwrizioù pe fiñval o deus c'hoant ar re yaouank ?

Ne gemer ket fiziañs ar grennarded peogwir o deus santimant e oa gwelloc'h a-raok. Evel ma vez stadet gant ar sokioyezhoniourezed galizat : « *parce que maintenant, je pense que bon, qu'il est en train de disparaître chaque jour, chaque jour parce que les gens, plus ou moins sur quatre mots, trois sont castillans. Si on regarde bien, c'est sûr que c'est vrai, ce qu'on entend dans les classes et un peu partout et ceux qui parlaient véritablement le galicien c'était les anciennes générations et c'est elles que nous devrions regarder* » (Garabato, Gosende,

2007, p. 271). Ar re yaouank a c'hall bezañ ankeniet. Peadra da gemer an ejen dre ar gerniel evit Izaouen desavet e brezhoneg er gêr :

« Er skolaj e soñje din e vefe mat komz brezhoneg, met ne raen ket. El lise em eus bet ur seurt deklík : ma n'eo ket ni a gomz brezhoneg, ne vo ket ken a vrezhoneg. » Klas Termen, 08/02/2018, SB

Met n'eo ket sur e sikour an holl da vont e brezhoneg. Keuz o devez alies. *« For many years we are told that we are responsible and that's what I am afraid of. I worried about this for years. I blamed myself strongly for this. But I think that today ... yes, I feel responsible in a way »* eme ur plac'h a gomz galleg e porzh lise Diwan (Dołowy-Rybińska, 2016, p. 286). N'eo ket ar santimant kablusted a degas ar c'hoant da gomz brezhoneg. Un harz diwelus eo evito. C'hoant o deus da vont war-raok met ne deuont ket a-benn. Diwar-se ec'h anzav al liseidi int techet da bentañ lern.

« Al liseidi az a d'ar skolajoù a c'hallfe komz eus plas ar brezhoneg o vezañ onest. Lâret 'vez eo brav, met n'eo ket gwir. » 22/02/2018, SB

An diforc'h ken bras etre ar c'hoant hag ar realded a lak anezho diaes evit komz eus plas ar brezhoneg.

« Lâret 'vez eo aes d'ar skolidi komz brezhoneg, evel ma vefe naturel ! Ur seurt tabou eo komz eus ar brezhoneg 'ba' Diwan. » 22/02/2018, SB

Katarina, ezelez er Strollad Brezhonekaat, he doa ijinet ur skritell diwar hini *« Un dîner en famille »* gant Caran a-zivout afer Dreyfus ma lenner *« Dreist-holl ! Arabat komz eus plas ar brezhoneg el lise »* (Anneks 3). Dont a ra da vezañ un *tabou* komz eus plas ar brezhoneg gant ar ster roet gant Freud : *« celle d'inquiétant, de dangereux, d'interdit, d'impur. [...] Le tabou se manifeste essentiellement par des interdictions et des restrictions. »* (2009) ... pa vefe gwelloc'h eskemm evit mont war-raok.

1.3 Ar brezhoneg tener o c'halon

En desped d'an daou boent a-raok n'eo ket diseblant al liseidi ouzh ar brezhoneg. Sevel a ra oc'h identelezh sokial er-maez al lise. Ingal e tispiegont o skoliata dibar d'ar re all :

« P'az an d'ober sport n'eus nemet gallegerien hag a c'houlenn perak e komzan brezhoneg. Goulennet 'vez ingal diganin lâret ur frazenn e brezhoneg : neuze aze e komzan brezhoneg. [...] Pa lavaran e teskan SES, fizik, matematik e brezhoneg int souezhet. "Hag ar bak a dremenit e brezhoneg?" a c'houlenn an dud. » Mikaela, Klas Termen, 22/02/2018, SB

Peadra da sevel un identelezh a-stroll da lâret eo « *un processus de différenciation et de légitimation d'un groupe social* » (Fillieule, Mathieu, Péchu, 2009). Ha neuze e vez klevet komz ingal eus Spered Diwan ganto (p'az a an traoù war fallaat an aliesañ).

« ... peogwir 'vez kollet spered kevredigezhel Diwan. » 16/11/2016

Hag al liseidi dipitet gant an diouer a implij eus ar yezh war ar porzh a gav e koller identelezh Diwan.

« - Santimant 'm eus eo standardizet Diwan. Deuet eo da vezañ ul lise evel ar re all.

- Ne welan ket ar pezh a zo disheñvel. » 16/11/2016

E studiadenn Chantreau, 30% eus al liseidi a disklêr bezañ tomm ouzh ar brezhoneg ha 48 % diouto bezañ tomm a-walc'h (KCGG). Met n'eus na 78 % na 30 % diouto o vrezhonegañ er-maez ar c'hentelioù. Moaien e vefe da sevel ur silogism. Tomm eo al liseidi ouzh Diwan. Diwan zo tomm ouzh ar brezhoneg. Al liseidi zo tomm ouzh ar brezhoneg... Met ne gomzont ket ar yezh. Ur sell pozitivel o deus, leun a c'hoant. Memes Morvan a lâr (padal eo taer gant raktres Diwan) : « *Je nourris toujours une certaine sympathie, voire un attachement affectif, pour le "breton" que j'ai appris* » (2017, p. IX). N'int ket diseblant ouzh ar yezh, memes ar re o devez poan o komz ar yezh hervez enklask Dołowy (s.o pajenn 34).

Ha pa vez goulennet o soñj war an dazont, hag-eñ o defe c'hoant da dreuzkas ar brezhoneg d'o bugale eo uhel ar sifr ivez. Ma tenner ar re n'int ket kat da respont d'ar goulenn d'an oad-se e verzhher : 26 % a zo prest da gomz brezhoneg atav pe dost d'o bugel p'o do unan. Met amañ ivez eo start d'ar braz anezho empentañ an unyezhegezh. 44 % a respont kentoc'h « e brezhoneg kement hag en ur yezh all ».

Un diforc'h etre ar pleustr hag ar skeudenn lakaet war-wel gant Colonna. « *Met pa vez sellet a-dost ouzh ar mod ma 'z a an divyezhegezh-se en-dro e vez gwelet pegen dister eo ar c'horseg, ha penaos ne vez graet gantañ nemet evit gwiskañ ur prezeg zo gallek ar braz eus outañ.* »²¹. O fleustr sokial a dle bezañ dispartiet diouzh o sell ouzh ar yezh. Ha Blanchet da genderc'hel war-dro roll ar yezhoù : « *Evit bezañ simpl : ur gefridi kehentiñ ha kelaouiñ hag ur gefridi arouezel, da lâret eo ur gefridi merkañ an identelezh. Hag ar pezh a zo bet gounezet en-dro gant ar brezhoneg abaoe tregont pe daou-ugent vloaz eo lorc'h an identelezh, se zo sklaer.* » Ar pezh a verzhomp el lise.

An dislavar etre o fleustr hag o sell a laka da soñjal e skrid *Sur la psychologie du lycéen* gant Freud (1914). Komz a ra eus amluskegezh al liseidi e-keñver o c'helennerien : « *Nous briguions leurs faveurs ou nous détournions d'eux, imaginions chez eux des sympathies ou des antipathies (...) Ils suscitaient nos plus vives révoltes et nous contraignaient à la soumission totale* ». Ha da glozañ : « *La psychanalyse appelle ambivalente une telle disposition au comportement contradictoire* » (in Lacadée, 2013). Gallout a reomp soñjal ez eus ar memes emzalc'h gant ar brezhoneg, c'hoant pennañ ar gelennerien hervez ar re yaouank.

1.4 Diglosiezh : yezh ar c'helenn versus yezh ar grennardiezh

Ar sokioyezhionourezed Tarone ha Swain a gomz eus diglosiezh e skolioù dre soubidigezh : « *Thus, informal observations suggest that in language immersion classrooms, diglossia may be the norm. A diglossic situation is one in which a second language is the superordinate, formal language variety, and the native language is reserved for use in informal social interactions.* » (Tarone, Swain, 1995, p. 167) An diglosiezh zo bet ijinet gant Ferguson (1959) evit deskrivañ degouezhioù e-lec'h ma vez implijet gant yezherien stummoù disheñvel gant kargoù gwall-disheñvel, da lâret eo, ur « stumm uhel » hag ur « stumm izel ». Tapout a ra skouer ar galleg hag ar c'hreoleg en Haïti. Hervezañ e vez desket ar stumm izel en ur mod « naturel » keit ha ma vez desket an hini uhel er skol. E lise Diwan e vez implijet ar brezhoneg er c'hentelioù gant al liseidi tost atav. An diglosiezh a vez arsellet kentoc'h e takadoù all.

Ar C'hoadic a gomz eus « *ur mod sokial eo da wel' ar fed e vefe meur a yezh, keit hag an divyezhegezh zo ur mod hiniennel* ». Korf ar c'hounskrid a zo amañ peogwir e klaskomp gant an div lodenn gentañ dirouestlañ ar pezh a denn d'an hinienn [tuedoù ha barrezhioù] hag ar

²¹ Aterset eo bet Philippe Blanchet gant Tomaz Laquaine ha ganin e Skol-veur Roazhon 2 d'an 12 a viz Here 2016. Embannet eo bet lod anezhi er gelaouen *Gwidal* (diskar-amzer 2016, niverenn 13)

pezh a denn d'an endro sokial [*an endro etreober*]. Ur fed sokial diwar stêr Durkheim²² a laka nebeutoc'h a bouez war intrudu pep lisead. « *Ils consistent en des manières d'agir, de penser et de sentir, extérieures à l'individu, et qui sont douées d'un pouvoir de coercition en vertu duquel ils s'imposent à lui.* » Atebegezh an hiniennoù zo diouzh an endro. « *La cause déterminante d'un fait social doit être cherchée parmi les faits sociaux antécédents, et non parmi les états de la conscience individuelle* » (1987, p. 100). Peadra da digablusañ an hiniennoù lakaet diaes evit brezhonegañ er skol ?

Estreget e Diwan e vez arsellet an diglosiezh. War porzhioù an holl skolioù e Frañs ne gomz ket al liseidi ar memes live yezh er sal-glas hag en trepasoù da skouer. « *Cour de récréations, escaliers, couloirs, seuil de la classe : lieux d'épreuve où le professeur fait l'expérience d'un autre rapport à la langue que celui dont il croit se soutenir (...)* » eme Henri (2010. p. 57), yezhoniourez ha kelenner. Ha da genderc'hel div bajennad pelloc'h : « *Où suis-je, dans ces couloirs ? En plein vent, comme si les insultes m'étaient destinées, j'entends une langue que je ne cherche parfois plus à déchiffrer (...)* » (p. 59). Peseurt kelenner a gompren : « la go », « je vais monter dans ma gova », « il vient de bicrave » ? Ar pezh a cheñch er soubidigezh n'eo ket al live yezh met ar yezh.

Astennet eo bet notion an diglosiezh o tennañ ar ster hierarkizhet evit implijout ar meziad pa vez div yezh war ar memes takad. E Diwan eo ar brezhoneg yezh an eskemmoù unfurmel evit ar pep brasañ eus al liseidi. Treut eo o implij er vuhez foran ivez. Barrek int evit komz eus traoù ar skol dreist-holl : « *Students have not learned the L2²³ vernacular style they need for nonacademic purposes* » (Tarone, Swain, 1995, p. 176). Betek chom hep reiñ un talvoud all d'ar yezh. Ouzhpenn bezañ berr o geriaoueg eo staget ouzh ar skol. « *En fait depuis tout petit j'ai dû associer l'école au basque parce que c'est à peu près là où on parlait basque le plus souvent. Sauf que j'ai eu beaucoup de mal à l'école. Je l'ai très très mal vécu et du coup je pense que j'ai associé le basque à quelque chose de négatif. Du coup, j'ai eu du mal à aimer cette langue* » eme Iban, eilvead en Euskadi (DG).

Madeg a diskouez mat en e levr *Desevel bugale e brezoneg* (1986) penaos eo techet ar vugale desavet e brezhoneg er gêr da cheñch yezh hervez tem an eskemm ha penaos int tapet gant plegoù ar gevredigezh tro-dro dezho. Ar grennarded a zo techet da implijout yezhoù disheñvel,

²² Pour Durkheim, un fait social obéit à trois caractéristiques : – un fait social est extérieur à l'individu ; – un fait social est doté d'un pouvoir de coercition (de contrainte) ; – un fait social s'explique par d'autres faits sociaux.

²³ L1 : yezh a vihanik, L2 : yezh desket

krouiñ o yezh (luc'haj, verlan, gerioù dezho...) O doare da vont da ved ar re deut o komz eus tabou (seks, kunujenniñ...). En o seizh plijadur warn-ugent emaint pa lâront gerioù 'zo²⁴. Met penaos ober e brezhoneg p'eo yezh ar c'hentelioù. « *Komz a ran brezhoneg. Ha yezh ma c'halon eo. Ul lodenn don ouzhin eo met a-wechoù e vank gerioù din. Gerioù skoemp, gerioù kuzh, gerioù mouget* » (Thepot, 2011) eme ar gazetennerez Goulwena an Henaff bet ganet en ur familh brezhonegerien, bet e Diwan hag a labour e brezhoneg. Ne c'hallont ket bezañ kelennet : « *Teachers who try to use or imitate teen language usually end up looking like idiots.* » (Tarone, Swain, 1995, p. 174)

Gouzout a reomp a-walc'h e Breizh e veze implijet ar brezhoneg evit lâret traoù kuzh pe kunujennoù. « *Les parents encore bilingues réservent leur langue maternelle à ce qu'ils veulent tenir secret à l'égard de leurs enfants : les sentiments intimes, la sexualité, les maladies graves, les affaires de famille, bref tout ce qu'il faut tenir à l'écart, au sens où cela se rapproche du refoulement. Voici placée dans la réalité, d'une manière presque caricaturale, cette "autre langue" qui situe l'envers du discours acceptable, ce qui reste en dehors du discours commun* » (Kress, 1988, p. 72) Implij ur yezh all a zo evel gwiskañ un ouel (*sur le discours non acceptable* a-benn ar fin). Evel-just e vez komprenet galleg gant an oadourien (evel ma veze komprenet ar c'hunujennoù gant ar vugale gwechall). Met eskemm e galleg (o galleg dezho) zo un doare da chom yen ouzh c'hoant ar re deut (komz brezhoneg). Identelezh ar grennarded a zo diskouezet ganto, prest da disentiñ, da heul o hent dezho... « *A la fois le signe et la jouissance de la séparation* » eme Henri (2010, p. 58). Komz brezhoneg a zo evit a re deut p'o deus c'hoant al liseidi da vezañ yaouank da gentañ penn ?

Pa grog ar vugale da vezañ krennarded e tigrisk implij al L2 evel ma vez stadet un tamm pep lec'h (setu mammennoù teiryezhek dindan da heul) :

- « *selon ce schéma les enfants utilisent le basque mais dès qu'ils arrivent à un certain âge (12-13 ans ou moins) ils passent à l'erdera par mimétisme (les adultes utilisent en plus grand nombre l'espagnol- et parce que l'erdera leur permet de s'ouvrir un monde plus vaste et plus prestigieux).* » (Joly, 2007, p. 115)

- « *que se pasa de la etapa infantil a la adolescente, aumenta la tendencia a utilizar la lengua externa : (...) la proporción de alumnos que se comunican sólo en euskera o lo hacen en mayor medida en euskera que en erdara es del 58% entre los de 4º EP [CM1] y del 33% entre los 2º*

²⁴ Evel kelenner e lise Diwan e klevan bep bloaz troioù-lavar a blij d'al liseidi. Gerioù eus ar c'hiz tennet eus filmoù da skouer. Terminidi a blije dezho lâret « *habile* » tennet eus ar film gall OSS 117. Evel-just n'o deus ket kement a referañsoù e brezhoneg.

ESO [pevare klas]; es decir, existe una disminución en el uso de 25 puntos entre esos dos grupos de edad. » (Luna, 2014, p. 133)

- « *In the early grade levels, immersion children are reported to use the L2 with each other to a much greater extent than children in the upper grade levels. If ease of use is the only issue, why would the older learners tend to use the L2 less, precisely when it ought to be easier to stay in the L2 because they are acquiring better mastery of L2 syntax and academic vocabulary?* » (Tarone, Swain, 1995, p. 167)

A-benn ar fin eo implijet ar galleg hag ar brezhoneg etre ar memes tud hervez an degouezh (en ur sal-glas pe war ar porzh), an tem (ar matematikou pe ar c'hoarioù video), an dud tro-dro (ur c'helenner pe ur strollad bras), statud al lisead (anavezet pe get)... Traoù a c'hoarveze gwechall ivez, pa oa ar memes tud o komz brezhoneg oc'h en em gavout e-tro ar parkeier ha galleg en ti-kêr da skouer. « *Un registre paritaire et disparitaire* » merzhet kement e galleg hag e brezhoneg gant Le Dù ha Le Berre (1996).

Gant studiadennoù tro-dro d'an divyezhegezh e tiskouezer mat penaos n'eo ket ur choaz emskiant implij yezh-mañ-yezh met ur choaz pleustrek. Bugale desavet gant divyezh a c'hall bezañ techet da gomz ur yezh hepken hervez Abdelilah-Bauer : « *la tendance naturelle de tous les enfants de ne pas conserver une langue sans raison essentielle* » (2015, p. 66). Meur a abeg zo, en o zouez ar badelezh selaou : « (...) *les enfants entendant seulement 20 % d'espagnol chez eux refusaient de produire des mots dans cette langue dans les situations de jeux. Ce qui a mené l'équipe à conclure que des enfants avec un apport aussi minimal dans une seconde langue ne pouvaient pas être considérés comme bilingues* » (p. 66). Ha dedennus eo gwelout jedadenn Diwan : « *Kontomp asambles war ur sizhunvezh : 7 devezh 24e = 168e, en o zouesk 70e kousk, chom a ra 98e. 26e er skol (brezhoneg met galleg ivez er lañ derez), 72e gant ar familh, ar vignoned, h.a. e galleg alies-tre). Da lavaret eo 25% pe 30% eus an amzer (er-maez ar c'houk) e brezhoneg.* » (Respontoù d'ho koulennoù , diwan.bzh). Peadra da degas un diglosiezh.

2 Mont en-dro ar soubidigezh : ur sell a-bell

Ar sell diavaez a sikouro ac’hanomp amañ evit dirouestlañ an elfennoù a denn da lise Diwan, evit pellaat moarvat diouzh arguzennoù evel liseidi lezirek pe skipailhoù pedagogel dizampart. O tiblasañ hor sell eo ar pal diuzañ elfennoù ‘zo evel ur skiantour oc’h arsellout anezho *ceteris paribus*. Poentoù boutin ha divoutin gant Diwan o deus an teir skouer kinniget:

- Ar skouer gentañ eo ar soubidigezh en ur yezh vinorelaet, met nemet e-pad an hañvezh,
- An eil eo ar soubidigezh, met n’eo ket evit deskiñ yezhoù minorelaet,
- An trede skouer a zo tro-dro d’ar brezhoneg, met evit tud deut e-pad ur staj hañv.

2.1 Pleustr ar vugale er soubidigezh : ar skolajoù hañv en iwerzhoneg

Gwelet e vo spisoc’h peseurt diaesterioù implij ur yezh L2 en ur skol dre soubidigezh gant pennad Petit Cahill “*As Gaeilge!* » : *Enforcing the Irish-only rule in a summer college*” (2016)²⁵. Studiet en doa ar skolioù-hañv, *Coláistí Samhraidh*, en Iwerzhon gant studierien etre 13 ha 17 vloaz o oad. Evit kinnig un « *total immersion situation* » ez eus savet ur reolenn strizh ha dibleg embannet er reolennaoueg :

« - *A Student found speaking in English will be cautioned and the incident noted.*

- *A second incident will lead to a final caution and the student will telephone or write home to explain what has happened.*

- *Following a third incident the College Authorities will be entitled to ask the parents/guardians to take the student home from the Coláiste.* »

Ken strizh ha reolennaoueg lise Diwan ez eo ? Skrivet eo e-barzh raktres pedagogel Diwan eo brezhoneg yezh al lise : « *liseidi, evel an holl dud, o deus da implij ar brezhoneg etrezo atav ha bepred, e pep lec’h.* ». Sinet eo gant ar studierien hag o zud.

Arsellet en deus Petit Cahill meur a emzalc’h az ae a-dreuz ar reolenn, traoù boutin da lise Diwan :

- Da gentañ, kerkent ma’z a kuit ur gelenner eus he c’hlas e komz saozneg ar vugale. Memes pa glask ur bugel mont en iwerzhoneg e vez graet un evezhiadenn dezhañ gant ar re all evit ma

²⁵ Hag ar frazennoù stouet da heul.

komzfe saozneg. « *This little event shows that interactional rules are permanently renegotiated by participants in interaction.* » Daou stumm a normoù a zo : ar re ensavadurel ha re ar skolidi.

- Da heul, « *Teachers addressed students in Irish at all time, but sometimes used English to translate key information which students did not understand.* » Sevel a ra ar goulenn ha posupl eo evit gwir ha talvoudus ober hep al L1 evit deskiñ ul L2 ?

- Evel e Diwan e lâr ar gasourien « *to speak Irish* ». N'en deus efed ebet war etreober ar studierien. Padal eo disheñvel gant Pat an hini e penn ar skol. Aotrouniek eo. Pa dremen e-biou skolidi e chomont mut evit adkregiñ e saozneg da c'houde. Bezañ aotrouniek n'eo ket kaout aotrouniezh !

- Evit echuiñ eo techet ar skolidi da implijout un iwerzhoneg direizh pa gomzont gant skipailh ar skolaj. En un doare difoutre, hep derc'hel kont eus reolennoù yezh anavezet ganto. Lakaet eo diaes ar skipailh evit trouzañ dezho peogwir e vez implijet iwerzhoneg ganto memes tra !

An diaesterioù stadet e Diwan evit ar soubidigezh a seblant bezañ boutin d'ar skolioù dre soubidigezh all, daoust ma c'hall bezañ disheñvel ar skeul a skol da skol.

2.2 Ha ma vefe ar soubidigezh un divyezhegezh ?

Dre ma'z eo kroget ar soubidigezh da vezañ teorizet e Kanada e kavomp eno pe er Stadoù-Unanet lod mat a lennegezh skiantel. Stadet eo ganto ar c'hudennoù tro-dro da implij ar yezh-skol. Sevel a ra goulenn plas ar yezh a-vihanik er skol. Peseurt implij ? Talvoudus eo rediañ hec'h implij ?

E-touez al labourioù-se emañ hini Turnbull ha Dailey-O'Cain. Sevel a reont goulenn plas ar yezh 1 er soubidigezh (2009). Diwar o enklaskoù e kavont eo un emzalc'h galloudel (« *virtual position* ») nac'hañ implij ar yezh a-vihanik. Kredennoù ar gelennerien (« *beliefs* ») a degas ar pleg da difenn implij ar yezh-vamm (« *official policies in certain language learning contexts that officially ban first language* » p. 2). Ar raksoñj pennañ gant ar gelennerien zo gwelout ar yezh vamm evel ur reustlad (« *there is a blind acceptance of the notion that exclusive target language is the best practice that refuses to entertain any kind of meaningful dialogue about this hegemony, about the realism or desirability of the position or about the potential usefulness of the first language for learners.* » p. 4) Met n'eus studiadenn ebet hervezo ma tiskouezer eo efedusoc'h ober hep ar yezh orin er c'hlas.

Dedennus eo gwelout 100 vloaz goude Irenée Carré hag e « hentenn vamm » (s.o. pajenn 24) n'omp ket gwall avansetoc'h war ar preder : « *they argue that since the first language is the only language present during L1 acquisition, the second or target language should be the only language present or available when a second or additional language is acquired.* » (p. 4) Rankout a rafe deskiñ un eil yezh war patrom an hini gentañ, an hini desket war barlenn ar vamm... hag hini an tad er XXI^{vet} kantved.

Evit ar sokioyezhoniourien eo ur « *virtual position* » peogwir n'eo posupl neblec'h ha gant n'eus forzh peseurt live ober hep ar yezh 1. Memes ar gelennerien a zo techet da implijout anezhi. Ar pezh hon eus gwelet a-raok gant testenioù liseidi Diwan. « *Teachers used the first language for a variety of reasons but pressure from the learners, discipline problems and the need to save time (...)* » Met ar *code-switching* a zo gwelet evel « *unfortunate ha regrettable* p. 4 » ganto.

Dedennus hag efedus e c'hallfe bezañ implij ar yezh 1 diwar meur a enklask. Servijout a ra evit prederiañ, evit kompren, evit sklaeraat ur c'hemenn, evit kas da benn ul labour... Obererien al levr a stourm evit ma vefe ledanoc'h spered ar skipailhoù pedagogel a labour er soubidigezh : « *It seems clear that an extreme version of the virtual position is not theoretically or pedagogically tenable.* p. 8 » Implij ar yezh 1 a seblant bezañ ur gudenn e pep skol diwar labourioù Tarone ha Swain. « *One of the most persistent an perplexing problems for researchers as well as for immersion teachers is the tendency of older immersion students not to use the second language (L2) in the classroom, particularly when conversing with each other.* » (1995, p. 166)²⁶ Rannet eo mat an implij : an etreberoù sokial a zo er yezh 1 hag ar sujedoù akademikel er yezh 2.

Merzhet eo gante ivez (s.o. pajenn 38) e c'hall mont war digresk pa gresk ar skolidi. « *Children (...) need to work out power relationships verbally by means of competition, invidious comparison, argument, or insult* » (p. 169). Liammet eo ouzh un identelezh oc'h en em stummañ : (« (...) *preadolescents and adolescents need a vernacular style as a way of signaling their identities.* » (p. 169). Setu ar pezh a lâz merc'hed er studiadenn-se : « *“They only give us words to use that we'd use with the principal. They teach us words like ‘volcano,’ not : ‘This is sweet, this is fresh’.* » (Rachel) « *I speak differently to my friends than I do to my parents. It's almost a whole different language, and... [immersion classes] don't teach us how to speak [French] that way.* » (Suzannah) (p. 172) Pelloc'h eget un diouer eo peogwir eo dibosupl deskiñ

²⁶ Hag ar frazennoù touet da heul.

anezho : « *It appears to be Suzannah's opinion that it is not possible for adolescents to learn the vernacular language in immersion classrooms* » (p. 173).

Int ha sevel teir hipotezenn :

- « *It is impossible to teach immersion students an L2 vernacular. This position accepts that diglossia is inevitable in immersion classrooms and overtly stresses the superordinate uses of the L2. This position allows students to use the native language for informal conversation.* »

(p. 174) Peadra da sevel ur preder e Diwan ? Met gouzout a reomp a-walc'h adalek al lodenn gentañ eus ar c'hounskrid eo savet identelezh Diwan tro-dro d'ar soubidigezh.

- « *Involve immersion children in activities outside the classroom with peers who are native speakers of the L2.* » (pp. 174-175) Graet e vez e Diwan met n'eo ket simpl peogwir e c'houlenn kalz a amzer. Diwan a chom ur skol da gentañ gant programoù an Deskadurezh-Stad « (...) *such contacts must be integrated into the school structure and the teacher's usual work in order not to be time-consuming add-ons.* » (p. 175) Ha n'eo ket aes liammañ ar brezhoneg ouzh an diavaez ken treut eo implij ar yezh er vuhez sokial.

- « *Sociostylistic variation needs to be explicitly taught in immersion classrooms.* » Sevel a ra goulenn ar ster evit ar skolidi. Studiet e vo pelloc'h. « *The teacher might ask students what they want to know how to say and then ask francophones how to say it, compiling a dictionary of idiomatic French expressions* » (p. 175).

2.3 Komz brezhoneg un istor personel : stajoù KEAV

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion (KEAV) a oa bet savet e 1948. E-pad div sizhunvezh e-korf an hañv e vez strollet brezhonegerien c'houziek pe o teskiñ. Soubet eo ar stajidi evel e Diwan : « *La sociabilité immersive est présente dans tous les aspects du stage notamment par un partage social de l'intimité, dans les espaces communs que sont les chambres de 6 lits et les salles de bain collectives* » eme Pentecouteau ha Servain (2016, p. 79)²⁷. « Ger gallek ebet » eo ar bennreolenn ivez. An eil hini a zo « *ar re a oar ar muiañ a sikour a re a zo o kregiñ* ».

Mennet eo ar stajidi evit kemer perzh ha klask a reont doujañ d'ar priñsip : « *l'engagement individuel nécessite une adhésion dans cet engagement qui devient collectif* » (p. 78). Seurt mennozhioù a gav o flas e Diwan, er reolennaoueg peurgetket. Met n'eo ket trawalc'h goulenn digant liseidi sinañ un tamm paper en distro-skol evit lakaat anezho da vezañ mennet !²⁸

²⁷ Hag ar frazennoù stouet da heul.

²⁸ Ouzhpenn int techet da vezañ beuzet gant ar reolennoù d'an oad-se. (Sell ouzh Ott, 2019)

Gouzout ar pezh a lak stajidi KEAV da vezañ mennet a c’hall sikour hon enklask evit kompren peseurt c’hoant a desach an dud evit mont e brezhoneg. Daou abeg pennañ (ouzhpenn hini ar stourm) a lak an dud deut da vont d’ur stummadur brezhonek. An hini kentañ a zo liammet ouzh un istor buhezel : « *créer une nouvelle relation avec son père* » da skouer. An eil a zo pragmatek : « *trouver un emploi ou négocier une reconversion professionnelle* » (p. 85).

Diwar o arselladenn eo solutoc’h an hini buhezel eget an hini pragmatek. « *Quand l’engagement n’est que pragmatique et trop éloigné d’un engagement parallèle permettant de donner du sens à l’implication, il est difficile de poursuivre l’apprentissage.* » (p. 85) A-raok bezañ soubet, ar pezh a gont eo abeg pep hini evitañ e-unan : « *l’apprentissage s’établit parce que cela a du sens pour soi, dans le projet de vie construit ou en construction. C’est cette articulation, dans un premier temps, qui conforte l’apprentissage* » (p. 85). Berr eo an amzer gouestlet evit prederiañ war plas ar brezhoneg e buhez al liseidi. Gwelet hon eus ar ster lakaet gant Diwan hag ar gerent (s.o. pajenn 22). An hini lakaet gant al liseidi a zo disheñvel ha start da ezteurel, da frammañ.

Ar vuhez a-stroll, evit mont e brezhoneg a gont ivez hervez an daou sokiologour. Ar rouedad sokial « *permet d’installer la pratique de la langue dans un réseau de relations* » Da heul « *il renforce l’idée d’appartenance à un groupe d’apprenants.* » (p. 86) Komzoù a glever a-berzh al liseidi.

II. Peseurt pleustroù sokial
zo bet arsellet ha peseurt re
a c'hall bezañ kemmet ?

A. PLEUSTROU ARSELLET : PENaos E RA AN ENSAVADUR EVIT TIZHOUT E BAL ?

El lodenn vras gentañ eo bet studiet endro etreober al lise – start eo implij ar brezhoneg – hag an tuedoù tapet en istor personel al liseidi e-keñver istor ar skol ha c’hoant ar gerent. An endro etreober hag an tuedoù a degas pleustroù. Da gentañ e vo gwelet pleustroù degaset d’ar skipailhoù pedagogel. Pal ar skolioù zo sevel normoù o kemer e kont tuedoù hag endro etreober ar skolidi. En un eil lodenn e studiimp peseurt pleustroù yezhel o deus al liseidi. Penaos e reont gant c’hoant o zud ? Hag hini ar skol a c’houlennt mont e brezhoneg ?

1 An normoù treuzkaset gant ar skipailhoù pedagogel

N’eus hentenn ebet savet evit lakaat ar soubidigezh e-pleustr evel m’eo bet gwelet a-raok. Daoust da-se e chom pal ar skipailhoù lakaat al liseidi da vrezhonegañ. Ijinañ a reont doareoù-ober, o talañ ouzh gwirvoud ar skol, o *vitellat* en o doare. Ar biteller eo hervez Levi-Strauss an hini a zo « *apte à exécuter un grand nombre de tâches diversifiées* » « (...) *la règle de son enjeu est de toujours s’arranger avec les "moyens du bord", c’est-à-dire un ensemble à chaque instant fini d’outils et de matériaux, hétéroclites au surplus* » (1962). N’oa ket kalz a skridoù nag a dafar kelenn p’eo bet teorizet ar soubidigezh e fin ar bloavezhioù 70. Evelkent ez eus bet aozet ur bern emvodoù, kolokoù, bodadoù preder gant Diwan. Un seurt « *tâtonnement expérimental* » diwar ster Célestin Freinet, ur pedagogour en deus awenet ar rouedad.

Dastumet em eus un nebeud teknikoù gant ma enklask. Liammet em eus anezho ouzh labourioù Guéguen, tost ar roudoù nemeto war an dachenn-mañ. Dedennetoc’h e vimp gant ar pleustroù er-maez ar prantadoù klas. Peseurt norm (« *horizon normatif* ») zo savet gant ar skipailhoù evit lakaat al liseidi da vrezhonegañ ?

E skiantoù an deskadurezh e vez rannet an oberoù deskiñ etre an deskadurezh furmel, an hini nann-furmel hag an hini unfurmel. Implijet e vo ar rummoù-se. N’int ket pleustroù enebet koulskoude. Ur seurt *continuum* eo. « [Il] *apparaît l’inévitable décalage entre une langue qui construit des catégories dotées de frontières et le continuum d’une réalité qui ne peut que difficilement s’enfermer dans les filets du langage.* » (Brougère, Bézille, 2007, p. 121) Met an

diforc'h etre an tri stumm a denn da div elfenn. Da gentañ ma'z eo spisaet ar mennad, ar pal (Anneks 4) : « (...) *une opposition entre présence et absence d'intentionnalité éducative aussi bien chez celui qui apprend que chez celui qui "enseigne"* » (Brougère, Bézille, 2007, p. 125). Da heul, hervez ma'z eo resis ar stummoù kinniget d'an deskidi, « *selon lequel les activités d'apprentissage sont socialement organisées et contrôlées.* » (Foley, 2000, p. XV)

1.1 An desaverezh furmel

An deskadurezh furmel eo an hini urzhiet en ur framm ensavadurel (skolioù, kreizennoù stummañ...). Ur pal desavadurel a zo gantañ. Savet eo en ul lec'h dispartiet diouzh ar vuhez voutin. Ar gouiziegezhioù treuzkaset n'int ket termenet diwar c'hoant an deskarded met diwar hini un norm diavaez.

Komz brezhoneg e pep degouezh eo norm al lise. Embannet eo e mellad kentañ reolennaoueg al lise. Ha da heul : « *C'hwi eo an hini hag en deus dibabet dont da heuliañ prantad diwezhañ an Eil Derezh e Lise Diwan ha da vevañ e brezhoneg ennañ.* » Reizhabegiñ a ra intrudu izili ar skipailh evit pouezañ war implij ar yezh. Sinañ a ra al liseidi ur seurt promesa : « *Dans le second cycle, les jeunes de la sixième à la terminale signent un "contrat" où ils s'engagent à parler breton dans la vie quotidienne, avec leurs enseignants, mais aussi avec leurs camarades.* » (Chauffin, 2015, p. 100) El lise n'int ket kastizet evit bezañ kaozeet galleg. Er skolajoù e c'hoarvez a-wechoù. Skridoù-aotre a vez kavet e skolajoù 'zo gant poentoù a-benn priziañ emzalc'h ar vugale.

« *Evit gouzout piv a gomze ar muiañ brezhoneg e oa ur c'haier kenskrivañ gant notennoù diwar dek. Deomp-ni da notenniñ : komz a ran brezhoneg er sal-glas « ya » « ket », er self, gant ar vignoned, gant ar gelennerien... ha da c'houde e veze leuniet gant ar gelennerien... Un evezhiadenn hollek war an emzalc'h a oa hag unan war implij ar brezhoneg. Pep tra a oa kemmesket an notennoù skol, an emzalc'h hag ar brezhoneg !* » Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Pa vez graet traoù a-dreuz – komz galleg kement ha bezañ dichek – gant ur skoliad e vez tennet poentoù digantañ. « *Dans le secondaire, de la même façon que courir dans les couloirs peut valoir aux collégiens un avertissement, si vous êtes surpris par l'adulte à parler français, vous aurez aussi droit à un avertissement. Et les tarifs n'ont pas changé, trois avertissements*

entraînent toujours une consigne. » (Guéguen, 2008b, p. 218) Evel-just ma'z eus kastizoù ez eus gourc'hemenoù evit ar re a bleg :

« E Kemper e oa kaset d'ar preti ar re a gomze ar muiañ brezhoneg. Ur strollad 15 skolajiad, eus pep rann, gant kelennerien 'zo. Soñj am eus e oan bet. Spontus e oa... pe iskis. » Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

« E Naoned e oa bet aozet ur c'hoari evit komz brezhoneg. En ur skipailh e oan. Ne gomzen ket brezhoneg er skolaj, ha memes tra en doa gounezet ma skipailh ! Met n'oa ket ar santimant ober kalz e brezhoneg... Oc'h ober ul laser game e oan bet ! » Ivona, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Gwelet a reer ur skipailh a volonteiz vat a glask broudañ ar skolajidi. Met n'eo ket aes evit skolidi tapet etre c'hoantoù ar gelennerien hag ar strolladoù par. Peadra evit ma lâre Katarina « *spontus e oa* ».

Kinnig a ra Guéguen ur skouer all. « *Mais dans les classes Diwan, à ces fonctions vient s'en ajouter une autre "archerien ar brezhoneg", c'est à dire "les gendarmes du breton". Alors, en quoi ça consiste ? Chaque semaine, deux enfants sont désignés comme « gendarmes du breton » et doivent donc reprendre les autres enfants qui parleraient français entre-eux, en dehors de la présence de l'adulte* » (2008b, p. 218). Gant he c'hoant da vurutellat groñs n'he deus ket gwelet – n'he doa ket c'hoant ? – orin pleustr pedagogel ar skolaerien. O kemer harp war pedagogiezh Freinet e oant mar plij ! Sur n'oa ket ar ger *archer* implijet gantañ met ne c'hallomp ket chom a-sav gant ar preder abalamour d'un doare-lavar diampart. Guéguen a oar peogwir e tislep gêrezh Freinet e skol Diwan : « *des fonctions ou des métiers sont confiés aux enfants à tour de rôle : distribuer les cahiers, effacer les tableaux, distribuer la parole lors des moments collectifs* » (2008b, p. 218). *Archer* n'eo ket ur vicher hervezi ? O klask e oa ar skolaerien lakaat ar skolidi da vezañ atebek ouzh mont en-dro ar yezh er skol.

Koulskoude e chom ar galleg eus tu an emzalc'h. Evel Helias a oa trouzet e brezhoneg gant e dud : « *Le tout n'est pas d'avoir été puni à l'école pour avoir parlé breton : une seconde punition attendait les enfants coupables de bretonner, à leur retour à la maison. Les parents, qui ne savaient pas toujours eux-mêmes le français [...]* » (1976, p. 213). Ur gerig a c'hall bezañ skrivet – e galleg – war ar c'harned kenskrivañ e skolajoù 'zo peogwir ez eus bet komzet

galleg. « *Il m'est même arrivé d'avoir des signalements dans mon carnet de correspondance* » eme Morvan (2017, p. VI), lisead bet. « *Ne raent ket forzh* » eme ur liseadez diwar-benn he zud. Savet e vez « *une situation exemplaire "d'injonction paradoxale" au sens des théories systémiques* » eme ar psikiatrou Kress (1988, p. 71).

Lakaat ar brezhoneg tu ar reolenn a sav ar yezh tu ar skol, tu an danvez-skol. Un diskoulm kavet gant ar gelennerien hag ar gasourien. Ur framm a vestroniont mat. Hag arabat disoñjal eo deut ar galleg dre ar moustrañ er skol diwar soñjoù boutin.

« E [skolaj] Kemper e oa ur strolladig a gomze brezhoneg, un dek bennak. N'ouzon ket hag e oa an emskiant da gomz brezhoneg pe peogwir o doa c'hoant da vezañ gwelet mat gant ar gelennerien... evel ma vez graet al labour-noz. » Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Karg ar gasourien ha hini ar gelennerien eo broudañ ar skolidi. Goulennet e vez diganto en un doare eeun « e brezhoneg mar plij » pe « n'ouit ket brezhoneg ? » pa vez galleget.

« N'eo ket ar memes politikerezh hervez ar skolajoù. Goulenn "komzit brezhoneg" bep taol gant ar skolajidi zo pouezus. Gwelloc'h eo lâret un dra eget chom diseblant. » Fantig, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Lod kelennerien a glask hentoù treuz :

« Ur wech e oa daou lisead o flapiñ e galleg em c'hentel. Goulennet am eus diganto hag aesoc'h e vefe ma tisplegfen dezho e galleg. Diaes e oant bet lakaet. » Levenez, kelenner, RKED

Klask a ra ar gelenner a-raok diskoulmoù evit atizañ implij ar brezhoneg :

« Ur preder 'zo da gaout 'pad ar c'hentelioù evel ma vez kelennet ur yezh estren. O sevel eskemm 2 ha 2. Cheñchet 'm eus ma doare kelenn peogwir eo dre gomz an arnodenn SVD saoznek, evit lakaet anezho da gaozeal. » Levenez, kelenner, RKED

1.2 An desaverezh nann-furmél

An desaverezh nann-furmél a denn d'ar pezh a zo dispis, strewet. N'eus na notenn na diplom ebet. « *Toutes les activités sociales comportent potentiellement une dimension éducative, peuvent être occasion ou objet d'éducation* » (Brougère, Bézille, 2007, p. 143). Evel-just e chomomp e framm al lise gant hor studiadenn met war ar varjenn ez eomp da glask : prantadoù hep pal treuzkas gouiziegezhioù... Amañ e vo dizoloet oberennoù na seblant ket, pe gant izili ar skipailh gopridi pe gant al liseidi, bezañ o fal brezhonekaat ar skol. Gallout a rafent bezañ diverret gant formulenn ur c'hasour dastumet e-pad un emvod :

« Ar pezh a zo start eo nompas bezañ diseblant hep lakaat gwask kennebeut. » RKED

War an dachenn-se eo puilh tezenn Chauffin. Diskouezet he deus penaos e oa atizet ar spered-krouiñ e Diwan o vrezhonegañ e-maez ar c'hentelioù. Ne lârimp ket muioc'h egeti. Ingal el lise e vez savet darvoudoù, e vez pedet tud eus an diavaez evit kinnig raktres-mañ-raktres. Klasket e vez liammañ ar brezhoneg ouzh ar blijadur, evel lugan ar Redadeg « brezhoneg ha plijadur » p'eo ar brezhoneg yezh ar skol, ar redi, ar c'hentelioù evit lod mat anezho.

« Evit kaout ur sell gwellwelus : c'hoariva ha c'hoari roll a aozan. Pa zeu ma re vihan da c'hoari gant al liseidi, int-i zo kiriek ouzh ar yezh. Komz a reont ur brezhoneg flour d'ar re vihan, ha nompas o zrefoedach hag a zo kenetrezo. » Mael, RKED

Nann-furmél eo peogwir n'eus stumm resis ebet. Amañ e c'hall an deskarded kemer ur plas brasoc'h. Ur stumm diresis, hep framm termenet a-raok, a vez kavet ivez. Evel kelennerien pe kasourien a glask en emsilañ e-touez al liseidi pe ar skolajidi.

« Klask a ran mont e darempred ganto, a-wechoù e kendalc'hont e brezhoneg. » RKED

« 'Ba' Plijidi ez eus daou hent evit distreiñ da sal ar gelennerien. Unan ganto, unan hepto ! Gant ur c'hamalad hon eus dibabet mont da zebriñ ouzh taol ganto ivez, d'en em strewiñ evit adplantañ brezhoneg. Krouiñ digarezhioù. » Fulup, RKED

N'eo ken ar c'helenner en ur sal-glas a sav goulennoù, o c'hortoz un emzalc'h direbech, respontoù a zere. Ar grennardiezh eo an oad e-keit ma vez klasket daveoù e-maez eus tadig ha mammig. Pouezus eo an darempredoù-se gant ar re deut. An treuzkas eo anvet an dra-se er bredelfennerezh freudour.

« - Gaid : An doare ober a gont kalz. Pa vez lâret "brezhoneg mar plij", dre n'hon eus ket kalz a darempred ganto e teu nemet tu ar rebech. Padal er skolaj e oa kasourien 'zo a blije deomp, hag o doa muioc'h a fiziañs ennomp, hon doa muioc'h a darempred, ober a raemp kalz a oberiantizoù, o doa c'hoant da grouiñ ul liamm ouzh skolajidi. Padal el lise ma vez klevet "komzit brezhoneg" hep ger ouzhpenn, "salud" "mont a ra" eo un tamm iskis.

- Katarina : Hag an tech 'zo lâret daou c'her e brezhoneg hag echu ur wech aet kuit.

- Gaid : el lise e cheñch roll ar gasourien. Deuet int da vezañ muioc'h evezhierien. Al liamm a gont kalz evit reiñ c'hoant da gomz brezhoneg. » Klas Termen, 08/02/2018, SB

Tapet eo Diwan gant enkadenn ar c'hresk ivez. Ment al lise a zo meneget gant ar re yaouank. Nebeutoc'h a darempredoù zo gant ar skipailh kasourien e-keñver ar skolaj evel a lâr Gaid a-us.

« Startoc'h startañ eo mont e darempred ganto peogwir e kresk niver ar skolidi. Digresket eo an amzer tremenet gant pep hini. Diaesoc'h eo bodañ anezho, sevel beilhadegoù. Er bloaz-mañ hon eus bodet anezho evit degemer an eilveidi. Krouet o deus kanaouennoù brav diwar o intrudu. » RKED

N'eo ket ar memes tra kaout nav den o tremen ar vachelouriezh e 1998 ha 350 skoliad enskrivet e 2018. Ar strolladoù par zo pouezus hag an efed heñveladur az a asambles. « *L'influence linguistique la plus déterminante chez l'adolescent est celle de ses pairs, et de son groupe d'âge, et non celle de ses parents ou de l'école* » (Yaguello, 2013, p. 113). Ul levezon o deus kenetrezo war ar pleustroù yezhel.

« Ar pezh am eus merzhet eo peogwir e komzan alies brezhoneg on gwelet gant ar re all evel ar plac'h a gomz brezhoneg. Neuze memes

an dud a gomz atav e galleg a zeu da welet ac'hanon o komz brezhoneg, dreist-holl tud ar c'hlasad. Santimant 'm eus bezañ gwelet evel ur c'helenner pe ur c'hasour, betek bezañ klevet ur cheñchamant yezh pa deuan. Iskis-tre eo. Chalus eo. Evit sevel darempredoù mignonaj pe bezañ tostoc'h ouzh ar c'hlasad ez an e galleg.» Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

« An dra efedusañ a chom gwelet ar re vras o komz brezhoneg, ar re vras n'eo ket ar gelennerien nag ar gasourien, met an dredeidi o komz. Pa oan erruet e Naoned e oa an dredeidi ar re o doa digoret ar skolaj. Un dek bennak o doa ur seurt kiriegezh, pa oant aet kuit e oa digresket plas ar brezhoneg.» Ivona o komz eus ar skolaj, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Ur sell dasparzhet gant Ximun skoliataet en Euskadi. *« Ceux qui sont internes, la plupart, ils ont une grosse affection pour le basque, même deux trois et ces deux trois-là, ils vont aller voir les autres et souvent leur rabâcher de parler en basque. Je pense que ça a plus d'influence venant d'une personne de notre âge que d'une personne adulte. Et ça fait changer quelque part »* (DG). Disheñvel eo ar skouerioù diwezhañ diouzh hini Guéguen gant an archerien peogwir eo dibabet o ferzh gant al liseidi.

1.3 An desaverezh unfurmel

An desaverezh unfurmel a zo meneget evit treuzkasoù gant ur mennad dispis. Ne vez ket emskiant an obererien sokial eus efedoù o fleustroù atav. Ar stumm a c'hall bezañ frammet peogwir eo liammet ouzh un oberiantiz pemdez. *« Apprentissage dans des situations liées à la vie quotidienne, à des activités qui n'ont pas ou n'avaient pas pour objectif l'apprentissage. »* Treuzkaset e vez gouiziegezhioù hep gouzout dre ret pe gant ar santimant treuzkas un dra all. *« Une situation marquée par l'absence d'intentionnalité éducative et d'institutionnalisation sociale »* (Brougère, Bézille, 2007, p. 122).

Da skouer, bezañs ur c'helenner e-kichen a c'hall lakaat liseidi da vrezhonegañ : *« Diouzh an noz oan bet e levraoueg. Echu ar c'hentelioù. Liseidi a oa o labourat eno o-unan. O klask e oan ul levr en un estajerenn betek ma'z erru ul lisead ha n'en doa ket gwelet ac'hanon. Kregiñ a ra da c'houlenn un dra bennaket digant ul liseadez e galleg 'vel-just. Al liseadez a rae*

daoulagad du dezhañ evit lakaat he c'hamalad da gompren e oan amañ. Kroget eo al lisead da vont e brezhoneg. ». Unan all a displeg « *ur wech e kaozee daou lisead e galleg kenetrezo dirazon er sal-glas. Ne lâren netra. O prientiñ ma dafar-skol e oan. P'o deus merzhet e oan amañ en doa lâret unan diouto "oh, digarez !" ».*

Diwan o kinnig ur framm poell a lak ar skolidi da vrezhonegañ en desped dezhe. Evel al liseadez a displege e teue tamm-ha-tamm ar brezhoneg o tremen treuzoù dorioù ar skolaj. An aergelc'h-se zo sammad ur bern emzalc'hioù bihan ha disheñvel savet gant obererien al lise. Boazioù tapet gant ar skolidi war-hed ar bloavezhioù-skol e Diwan. An endro a servij da deskiñ brezhoneg ivez. « *This creates a group identity based on the relation with the Breton language and ideas for its preservation. »* (Dołowy-Rybińska, 2016, p. 280)

Gallout a reomp merzhout an dra-se war an identelezh kreñv tapet gant al liseidi. An identelezh sokial a zo daou du dezhi : bezañ anavezet gant ar re all evel ezel eus ur strollad tud, en em anavezout evel ezel eus ar strollad. Evit Dołowy eo « *the knowledge of the Breton language as an objective indicator of identity and one that is the most symbolic ».*

« pa lavaran e teskan SES, Fizik, matematik e brezhoneg int souezhet. »
« E Gwened hon eus tremenet an devezh e kêr, hag hon eus komzet tost tout an devezh peogwir e teue evel-se. An aergelc'h a oa plijus. [...] Pa oamp 15 o c'hortoz ar bus, an dud a oa o sellout ouzhimp. » Mikaela, Klas Termen, 22/02/2018, SB

Ur strollad dispartiet diouzh ar re all, kuit da vurutellat an hentenn divyezhek, gant talvoudoù ha normoù : « *It is not the same identity, the same culture. We are more ... I think that we are much more open to diversity. We are all a little bit extravert here. We are all a little mad, I would say. Well, maybe not mad, but ... crazy. And I think that it's a kind of mentality. I don't know really, but I think it is important. That we are a little bit different. (Interview with F. 18 M).* » (Dołowy-Rybińska, 2016, p. 288) N'eo ket ar pal eskemm ma'z eo gwir pe gaou er c'hounskrid-mañ peogwir on dedennet gant ar pezh a ijin an dud eus o flas sokial. Diwar ar faltazi-se e teu ar c'hoant, pas eus ar gwirvoud dre ret.

Spered Diwan e vez meneget ingal ivez hep gouzout resis petra eo. « *The distinction between Diwan people and "the others" helps to create and reinforce the group identity. »* (Dołowy-Rybińska, 2016, p. 282) Met n'eo ket didalvoud evit brezhonegañ : « *C'est l'intégration sociale qui provoque l'appropriation linguistique et pas le contraire »* eme Blanchet (Chauffin, 2015,

p. 280). Ha liammet eo koll an identelezh ouzh an diouer a vrezhoneg evit al liseidi evel gant ul lisead dindan da heul.

« *Santimant 'm eus eo standardizet Diwan. Deuet eo da vezañ ul lise evel ar re all* » 16/11/2016.

Ar pleustroù unfurmel a zo pouezus evit treuzkas ar brezhoneg. A-benn ar fin eo tout an oberennoù a vez savet gant skipailh al lise. Efedoù a zo war implij ar yezh hep gouzout resis ar rag hag ar perag.

2 Peseurt daremped o deus al liseidi gant an norm ?

« *Ar gudenn eo ma chom ar gelennerien vut n'ez a ket en-dro, ma vez rebechet deomp pe e vezomp kastizet n'ez a ket en-dro kennebeut.* »
04/10/2016

Setu ar pezh a voe disklêriet gant ul liseadez e-kerzh emvod kentañ ar Strollad Brezhonekaat. N'eo ket simpl evit ar skipailhoù pedagogel labourat gant krennarded atav. « *L'adolescence, "cette fièvre du temps de la vie" est le temps de tous les paradoxes, le temps de la conflictualité psychique où l'on désire une chose et son contraire, où le besoin de s'affirmer se conjugue avec la peur de se confronter au monde extérieur, où le désir de liberté s'oppose au besoin de sécurité, où le besoin de recevoir, d'être entouré, protégé, contrarie la volonté de se suffire à soi-même* » (Delefraye, 2013). Penaos eo resevet gant al liseidi pleustroù ar re vras evit plantañ brezhoneg en ti ? Da gentañ e klaskimp kompren levezon an normoù war al liseidi. Da heul e studiimp o respontoù evit kompren e peseurt degouezh e komzont brezhoneg.

2.1. Normoù ar skol, normoù al liseidi : peseurt levezon war implij ar brezhoneg ?

E pennlevr Lewis Carroll *Through The Looking-Glass, and What Alice Found There* e tremen an harozez a-dreuz ur melezour. Da studiañ ez eomp peseurt normoù zo tro-dro d'ar brezhoneg el lise ha goude ar re evit ar galleg. Evel Alice e welimp en tu all d'ar melezour ar memes traoù war an tu gin...

2.1.1 Ar reolennoù evit lakaat da gomz brezhoneg ?

Plaset eo ar brezhoneg eus tu ar reolenn gant ar grennarded. Poell eo gwelout anezho o treuztremen an norm er skolaj :

« *Neuze e oa sinoù pe huchadennoù loened evit lâret "un den gour zo o tont". En tu kontrol pa groge un den da gomz brezhoneg, an holl a oa o c'houlenn "pelec'h emañ ar c'hasour ?", padal n'oa den ebet o tont. Deuet e oa ur seurt c'hoari a-wechoù evit ober aon d'ar re all. »
Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB*

« *Se eo enebiezh ar grennarded. Kastizoù zo lakaet, gwashoc'h eo. »
Katarina, Klas Termen, 04/10/2016*

El lise int deut da vezañ diseblant a dispieg Fantig o kaout keuz :

« *Tud n'o deus four kaer. Ma vez ur c'helenner pe ur c'hasour e kendalc'hont e galleg, kudenn ebet... lod a huch e galleg zoken... ar pezh n'oa ket er skolaj. N'eo ket doujus. »
Fantig, Klas Termen, 08/02/2018, SB*

Ha da verzhout evel Petit Cahill (s.o. pajenn 41) e c'hallont plegiñ hervez galoñsoù an oadourien.

« *Depand a ra gant piv. Ma'z eo ur pennkasour 'vo komzet brezhoneg muioc'h eget ur c'hasour nevez erruet. »
Fantig, Klas Termen, 08/02/2018, SB*

« *Komz a raemp brezhoneg peogwir ne soñjemp nemet er binijenn pe er vezh hor befe da gomz galleg dirak ar c'helenner. El lise ar pezh a cheñch eo ar re a gomz brezhoneg pe galleg eo muioc'h ur choaz, un emskiant. »
Izaouen, Klas Termen, 08/02/2018, SB*

Met douetañs o deus war efedoù ar rediañ. Efedus war verr dermen met n'eo ket sur e sikour pep hini da reiñ ster d'ar yezh.

« *Eus un tu all, diwar-se e teue a-wechoù ur boaz da gomz brezhoneg memes ma n'oa ket kelennerien tro-dro.* » Ha da lâret diwezhatoc'h
« *Ar redi n'eo ket efedus atav. Ar pal n'eo ket reiñ ar santimant da gomz brezhoneg, met komz brezhoneg kenetrezomp.* » Izaouen, Klas Termen, 08/02/2018, SB

« *Ar fed rediañ en deus tennet ar fed soñjal: "petra eo komz brezhoneg?". Ma vez lakaet ur reolenn "se zo mod-se ha n'eo ket mod all", ne vez ket prederiet pelloc'h eus petra eo. Pe gallout a ra kaout ur c'hontrefed degas ar c'hoant da vont a-enep ar reolenn.* » Izaouen, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Lakaat ar brezhoneg eus tu ar redi a seblant bezañ silet e mont en-dro ar skol diwar al liseidi betek lakaat war-wel un dislavar etre ar raktres skol hag hini yezhel e Diwan :

« *Pelloc'h eget ar brezhoneg eo raktres Diwan, an doare da leuskel an dud da gomz brezhoneg e rankfe leuskel un tamm frankiz dezho.* » Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

2.1.2 Ar galleg er soubidigezh : stad ar melezour

Padomp gant metaforenn ar melezour. Pa wel ar bugel bihan e skeudenn dre ar melezour e kred eo unan all. Plas ar galleg a zo un tamm heñvel e Diwan. Komzet e vez eus ar galleg evel ma vefe *ur yezh all*. Padal n'eo ket enebet ar yezhoù evit ar bugel divyezhek met doareoù evit etreober, evit ezteurel. Hervez Petit Cahill, en e bennad diwar-benn skolioù-hañv Iwerzhon, e vez komzet saozneg ha nemet saozneg gant ar stajidi er-maez ar c'hentelioù evel un efed-melezour. « *The monolingual model being hegemonic, it is not surprising pupils opted for an English-only rule in students-students interactions which was the mirror image of the Irish-only rule.* » (Petit Cahill, 2016). Hervezañ eo peogwir eo direizhabeget o yezh a-vihanik ivez eo techet ar studierien da implijout anezhi, evel un harzherezh a-enep un diviz direizh. Ar soubidigezh zo dindan ar « *Riail na Gaeilge* » (pe « *Irish-only rule* ») ha mat pell' zo. Heñvel-poch eo ar c'homzoù dastumet gant Dolowy : « *It seems to me that we speak mostly French, because... we were forced to speak Breton. We were told everything must be in Breton. And I think that because we were told all the time: "speak Breton"... in all... finally we were not willing to speak Breton in high school. (Interview with B. 17 F)* » (2016, p. 286)

E Diwan ivez eo treut plas ar galleg war ar paper. « *A l'appréciation de l'enseignant, en fonction des situations, le français pourra être utilisé ponctuellement comme recours, notamment auprès de nouveaux élèves.* »²⁹ Evel-just ne c'hall ket bezañ mod all. Penaos e vefe posupl digeriñ an dorioù d'ur yezh vestroniour ? Met mont a ra kalz pelloc'h e gwirionez. Ouzhpenn bevennet eo e blas, plaset eo eus tu ar fazi, ar pec'hed zoken.

« *Start eo degas ar c'hoant [komz brezhoneg], peogwir eo bet plaset ar brezhoneg e tu ar rebech, langajiñ. Ar santimant ober ur fazi o komz galleg.* » Ivona, Klas Termen, 08/02/2018, SB

E film ar Strollad Brezhonekaat eo dedennus gwelout ouzh peseurt geriaoueg eo staget implij ar galleg gant al liseidi euskarat : « *déraper* », « *contaminer* », « *culpabilité* »... Ha liseidi Diwan o doa mezh o vezañ klevet o vont e galleg er skolaj :

« *Bezañ klevet komz galleg dirak ur c'hasour e oa peogwir n'oan ket bet fin a-walc'h evit nompas bezañ tapet. Mezh hon doa, mezh da vezañ rebechet gant ur c'helenner, ur c'hasour. Komz galleg a oa tu ar vezh...* » Uriell, Klas Eilvet, 08/02/2018, SB

N'eo ket stag ar brezhoneg ouzh un endro pozitivel kennebeut diwar-se. Ha penaos nompas soñjal en « yezh ar vezh » evel titl film Durand, komzoù Kervella e degouezh Redadeg 2010 pe labourioù Ar C'hoadig (2001) o klevout tud yaouank oc'h implijout ar ger-se. Hag ar vezh n'eo ket ur santimant dister hervez ar psikiatrou Kress e dave d'ar galleg : « (...) *la honte. C'est ce sentiment qui contribue à donner à un événement sa valeur traumatique (...)* » (1988, p. 71) Ha da glozañ : « *l'intrusion d'un événement extérieur devenant étranger au plus intime des individus, l'incapacité de trouver une réponse adéquate permettant de sauver la langue, la perturbation de l'identité qui se trouve divisée et la modification de la structure psychique par rapport au refoulement.* » (p. 76)

Ar c'hoant staliañ ar soubidigezh a lak da nac'hañ met ivez dispriziañ, dismegañsiñ zoken, implij al L1 hag a zo yezh a-vihanik ar braz anezho : « *We can see that the use of English is associated with laziness, sin and failure, while the use of Irish-only is the key to success.* » Ne c'hall ket bezañ prederiet an div yezh asambles : « *It defines Irish and English as two separated entities, giving more legitimacy to Irish over English* ». N'eo ket desavet bugale divyezhek met gant div

²⁹ <http://www.diwanbreizh.org>, Lec'hienn Diwan, ar raktres pedagogel, sellet outi d'an 24/11/2018

unyezh : « *parallel momolongualism* ». N'eus ket anv eus *code-mixing* pe *code-switching* e Diwan padal int pouezus evit ar re divyezhek.

Un ezhomm eo komz galleg evit ar re desavet er yezh-se :

« Arabat lâret brezhoneg, brezhoneg, brezhoneg, normal eo komz galleg a-wechoù peogwir eo evit lod brasañ ac'hanomp hon yezh-vamm, ne c'hallomp ket cheñch an dra-se. Pouezus-kenañ eo ar brezhoneg, met ar galleg ivez. Ne gavan ket fall komz galleg... ha ne gomzomp ket galleg gant ar gasourien, pe ar gelennerien... met a-wechoù e komzomp galleg kenetreomp. » Ivona, Klas Termen, 08/02/2018, SB

« Evidon-me n'eo ket ar pal ober 100% [e brezhoneg] » Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Amañ eo pozioù div blac'h deuet d'ar Strollad Brezhonekaat e-pad daou vloaz evit difenn plas ar brezhoneg el lise. A-benn ar fin o deus dilezet ar santimant kablusted evit en em dieubiñ diouzh ar reolenn ofisiel.

Graet e vez evel ma vefe posupl ober hep ar galleg. N'en deus plas ebet evel un tabou. Ne sinifi ket eo ret dilezel tout al lezennoù tro-dro d'ar yezh nag aotre tout. Sevel reolennoù komprenet, eskemmet, savet asambles a vefe efedusoc'h zoken. Komz eus ar skoilh e-plas klask mougañ anezhañ. N'eo ket posupl lakaat yezh a-vihanik al liseidi eus tu ur binvidigezh kentoc'h ? Ne vefe ket gwelloc'h reiñ ur plas bihan dezhi, harzhet mat, eget nac'hañ anezhi pa vez implijet mod-pe-vod ?

Penaos chom hep soñjal e pennlevr Memmi pa vez gwelet penaos eo prederiet plas ar galleg e lise Diwan. « *L'affirmation du soi du colonisé, née d'une protestation, continue de se définir par rapport à elle. En pleine révolte, le colonisé continue à penser, sentir et vivre contre et donc par rapport au colonisateur et à la colonisation.* » (Memmi, 2012) Eus hêrezh difenn ar brezhoneg e teu emzlac'h ar gelennerien ?

2.2 Komz brezhoneg el lise hag en diavaez

Klemmoù ar skipailhoù pedagogel n'int ket kement-se evit implij ar brezhoneg e-pad ar c'hentelioù met en diavaez pa n'eus ket hantererezh an dud deut, pa vez eskemmoù etre al liseidi. Studiet e vo tri ensavadur boutin d'an holl liseidi : al lise war-bouez ar salioù-klas, ar familh ha soñj al liseidi war c'hoant o c'herent da enskrivañ anezho e Diwan, hag e-maez al lise hep ar gerent nag ar gelennerien.

2.2.1 Brezhonegañ e-maez ar c'hentelioù ?

Start – dibosupl ? – eo gouzout pegoulz ha perak e vez komzet brezhoneg ganto. Gallout a reomp sevel un nebeud martezeadennoù memes tra. Oc'h eskemm gant al liseidi hon eus merzhet e oa staget implij ar brezhoneg ouzh oberoù pozitivel. N'eo ket yezh an dristidigezh, ar santimantoù fall pe ar fulor. Evel displeget e tezenn Chauffin e sikour da grouiñ pe da gaout ur giriegezh bennak.

« - Mikaela : Er strollad c'hoariva e komzemp brezhoneg memes gant tud a oa boas da vont e galleg, memes er straed pa n'oa ket ar c'helenner ganeomp.

- Gaid : ar youl a oa ganeomp peogwir e oa ur raktres, savet ganeomp, da lakaat ar brezhoneg war al leurenn, dirak ar vugale. » Klas Termen, 22/02/2018, SB

« Sevel kluboù a vroud implij ar brezhoneg. » 22/02/2018, SB

Ar blijadur, ar startijenn, an intrudu a c'hall bezañ staget ouzh implij ar yezh :

« N'eus poell ebet. A-wechoù ez eus degouezhioù ispisial. Da skouer p'emaomp peder pe pemp hag e ouzomp ez eus plijadur gant an holl o komz brezhoneg, p'emaomp en un degouezh ispisial, an holl a zo laouen d'ober tra-mañ-tra, n'ouzon ket, o vale evit mont d'ul lec'h d'ober un dudi, an dra distennet... ma krog unan da gomz brezhoneg ez a aes a-walc'h. [...] Ar brezhoneg a zeu gant al levenez... pe al levenez a zeu gant ar brezhoneg, n'ouzon ket. » Gaid, Klas Termen, 22/02/2018, SB

« *Ya, met er gabanenn e veze komzet brezhoneg. El lec'hioù dudi e vez komzet brezhoneg. Gwan a oa al lec'h met prop. N'oa den ebet evit lâret deomp mont e brezhoneg.* » Fañch, Klas Termen, 22/02/2018, SB

« *Padal diouzh ar beure e komzomp brezhoneg "poent eo dihuniñ", "an eur eo". Evit frazennoù 'zo e teu diouzhtu e brezhoneg, peogwir hon eus ar boaz.* » Ivona, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Gwelet e vez amañ gant komzoù al liseidi : plijadur, intim, mignoned, strolladoù bihan... Ar brezhoneg a difoup, dic'hortoz evel ar jouisañs. Ha ma vefe ar brezhoneg ur « *la lalangue* » diwar tro-lavar Lacan, da lâret eo e tflukfe ar brezhoneg evit lâret un dra eus ar sujed. Souezhusoc'h eo klevout eo ur yezh furmel el lise etre ar re yaouank :

« *Komzet 'vez brezhoneg pa ne vez ket anavezet an dud, pa vez komzet d'un den eus ur rann all, pe evit goulenn traoù er self p'emaomp o tebriñ.* » Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Etre ar c'hlas eilvet hag an hini termen e kreskfe an eskemmoù e brezhoneg. Ar giriegezh e-keñver o flas el lise ? Un doare da vezañ bras ? Evit gwir eo ar re deut a gomz dibaouez brezhoneg e Diwan.

« *Memes tra e vez klevet muioc'h a vrezhoneg bremañ e Termen eget en Eilved (...) Marteze, tud o tihuniñ : "ma bloavezh diwezhañ eo, n'am eus ket komzet a-walc'h".* » Izaouen, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Ur yezh a vez implijet kentoc'h en darempredoù hiniennel dreist-holl. Ingal em eus klevet e oa aesoc'h komz brezhoneg er strolladoù bihan :

« *Pa vez strolladoù bihan e vez graet e brezhoneg, pa vez ur strollad brasoc'h ez omp e galleg.* » 04/10/2016

« *Ar pezh a gont eo « piv ». Evit mignoned tost ouzhip ez an muioc'h e brezhoneg eget gant tud all eus ma rummad. Eilveidi ha kentaidi a vo e brezhoneg.* » Fantig, Klas Termen, 08/02/2018, SB

« Muioc'h a aezamantou gant unan en deus muioc'h a blijadur da gomz brezhoneg. Bez ez eus lod a gav aesoc'h komz galleg, gwir eo araok komz gantañ e ouzomp n'emañ ket en e vleud gant komz brezhoneg. » Izaouen, Klas Termen, 08/02/2018, SB

« Aussi faut-il généralement que, pour que des personnes acceptent de conformer leurs usages à un autre, qu'ils perçoivent un intérêt ou une raison à le faire. » (Morvan, 2017, p. 11) Peadra da displegañ perak eo efedus an eskemmoù e brezhoneg gant ar gelennerien, met startoc'h etre al liseidi. Peseurt abeg, peseurt interest o deus al liseidi evit brezhonegañ ?

Ne sinifi ket eo laouen al liseidi gant stad an traoù. En emvod kentañ ar Strollad Brezhonekaat eo bet savet ar goulenn ouzh an holl (liseidi, kasourien, kelennerien) perak e oan deut ? Pell int da vezañ diseblant. Keuz 'zo gant al liseidi war plas ar brezhoneg. Setu daou respont :

« Un diouer a vrezhoneg el lise. » « War fallaat ez a plas ar brezhoneg. Dipitet on. » 05/10/2016

C'hoant o deus da gavout, kaout diskoulmoù evel an oadourien e Diwan :

« Dedennet on gant ar pal sevel gwir darempredoù, sevel ur strollad, prederiañ asambles. » « C'hoant am boa da glevout mennozhioù, memes ma 'm eus ma re bersonel. » « Kurius e oan da c'houzout petra 'vo graet. Mennozh ebet. » 05/10/2016

Ur santimant atebegzh o deus war plas ar brezhoneg.

« Deomp-ni al liseidi d'ober war-dro, pas ar gasourien. » « An holl a zo er memes bag gant ar brezhoneg. » « Ar pal a zo brasaat ar vinorelezh a gaoz brezhoneg, o klask kinnigoù, o sikour, o selaou » 05/10/2016

N'eo ket anat evito. N'eo ket ken simpl komz brezhoneg :

« C'hoant am boa da selaou soñjoù, evit kaout c'hoant da gomz brezhoneg. Ne ran ket kalz. » « Kollet on gant ar sujed-mañ, se a sav ur bern goulennoù diganin-me ».

Dibosupl eo sevel ur roll, ur poell eus ar pezh a lak al liseidi da vrezhonegañ. Levezonoù zo memes tra. Eskemm en ur strollad bihan (muioc'h a intim ?), ar blijadur evel un aergelec'h ispisial (memes en ur gabanenn er-maez al lise), etre tud dianavezet e lise (dichek e c'hallfe bezañ komz galleg zoken !), ar c'hluboù (dañs, sinema...), ul live klas uheloc'h (brezhonegañ zo evit ar re vras ?). Liseidi zo kizidik ouzh implij ar brezhoneg memes ar re o devez poan d'ober gantañ. E 2020, n'eus nemet 14 lisead diwar 314 a responte « ne ran forzh » d'ar goulenn « Petra eo da santimant ouzh ar brezhoneg ? » (KCGG).

Hollad an displegadennoù eztaolet el lodenn-mañ zo bet en ur framm a-stroll – emvodoù an aliesañ. Dont a reont da gejañ ouzh abegoù hiniennel (*tuedoù* pep hini). O treiñ hor sell davet ar familhoù e klaskimp tostaat ouzh c'hoant pep hini.

2.2.2 Ar gerent hag o c'hrouadurioù : eus ar c'hoant divouezh d'ar c'hoant karantez

E labour Adam (2015) ez eus lakaet war-wel pevar efed eus emzalc'h ar gerent war representadurioù yezhel o bugale : *effets de miroir, effets reflets, effets d'accroissement ou de diminution, absences d'effets ou effets contraires*. Ha pa n'eo ket gourc'hemennus diviz an dud eo techet ar bugel da ijinañ an interest da deskiñ ar brezhoneg. Souezhet on bet o verzhout n'eo ket roet ster enskrivadur Diwan d'ar c'hrouadurioù atav. Pa vez savet ar goulenn ouzh al liseidi : « *Perak out bet enskrivet e Diwan ?* » eo ar respont muiañ klevet ganin : « *n'ouzon ket* ». Evel Uriell e klas eilvet :

« *N'ouzon ket perak on bet enskrivet e Diwan. N'am eus james goulennet digant ma zud. Graet em eus ma soñj ma un' perak ma zud o deus enskrivet ac'hanon met n'am eus james goulennet oute evit gwir.* » 22/02/2018, SB

Penaos reiñ buhez da balioù Diwan ma ne oar ket o bugel orin choaz divoutin³⁰ o zud. Pemzek bloavezh skoliata e Diwan a vefe kreñvoc'h eget ali ar gerent ? Un ensavadur ret eo ar skol evit ar re yaouank, n'eo ket gwall garantezus atav ! Diwar-se e vez kavet e Strollad Brezhonekaat al lise krennarded o doa asantet prezeg ar skol, ul live-skol uhel ganto.

³⁰ nemet 0,5 % eus ar skolidi e Breizh zo enskrivet e Diwan

« *Ur skeudenn zo eus an hini a gomz brezhoneg : unan gant disoc'hoù mat pe a selaou er c'hlas. Er skolaj e oa gwiroc'h.* » Katarina, Klas Termen, 08/02/2018, SB

Lod a glask en o istor familh evit leuniañ un istor toull-didoull betek erruout d'ar goulenn buhezel « eus pelec'h e teuan ? ». Adsevel a reont un istor karantez etre o zud. O enskrivadur a vefe frouezh un emgav karantez evel o ganedigezh a-benn ar fin :

« *Ma zud zo en em anavezet dre ar brezhoneg en ur fest e Bro-Leon. Ma zad a oa o teskiñ brezhoneg d'ar mare-se goude bezañ dizoloet Skol Diwan Montroulez. Ha ma mamm a oa brezhonegerez a-vihanik, kwa, he zud ne gomzent ket brezhoneg outi met klevout a rae brezhoneg atav, neuze e oa gouest da gompren pep tra.* » Bleunvenn, Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

« *Goude ma zud o doa kejet ha poell e oa evidon-me dont da Ziwan* » Gaid, Klas Termen, 22/02/2018, SB

Ar gerent (gant ar ster ledan) a zo meneget evel ar c'hoarezed hag ar vreudeur :

« *C'hoant am boa da vont da Ziwan peogwir e oa aet ma breur a-raok.* » Lanwenn, Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

An dud-kozh ivez. Istor an troc'h gant treuzkas ar brezhoneg a chom bev evit remziadoù ganet e bloavezhioù 2000 (s.o. pajenn 13). Er c'hontrol da Adam e tizoloomp amañ n'eo ket an enskrivadur e Diwan plaset en ur raktres pedagogel, yezhel pe stourm. Liesseurt eo al liseidi dedennet evit sokializañ ar brezhoneg el lise. Ne c'hallomp ket lâret eo dreistdileuriet ar vugale desavet e brezhoneg er gêr³¹. Ha ma vefe levezonet implij ar brezhoneg pa'z eo plaset en un istor familh, a garantez ? Bezañ difeal d'ar brezhoneg a c'hallfe terriñ istor karantez o zud ? Penaos chom hep soñjal e frazenn mil vrudet Lacan o selaou al liseidi : « *An holl c'houlennoù zo goulennoù karantez* »³². Reiñ c'hoant da gomz brezhoneg a dremenfe dre un treuzkas, oc'h en em anavezout en un den a degas c'hoant. N'eo ket dre ret gant un tad pe ur vamm, met ne

³¹ Estreget bugale stourmerien a oa e-touez ar 15 lisead o doa dibabet skrivañ o c'hopienn vatematik e brezhoneg evit bachelouriezh 2018 ivez.

³² An hini treuzfurmset da nebeutañ peogwir eo hemañ an hini resis : « *L'homme désire car la satisfaction de ses besoins passe par l'appel adressé à un autre, cet appel se fait demande, demande d'amour* » (Lacan, 1966, p. 278).

c'hall ket bezañ treuzkaset ar yezh – hag amañ eo lakaet diaes ar skol – hep *affect* : « *ce n'est ni la faim, ni la soif, mais l'amour, la haine, la pitié, la colère, qui leur ont arraché les premières voix* » eme Rousseau (2009). Ha ma ne vefe ket o reiñ ster d'ar vugale ez afe war-raok plas ar brezhoneg met o reiñ tro da bep bugel da enskrivañ ar yezh en e istor personel.

2.2.3 N'eo ket aes mont e brezhoneg e-maez al lise atav

Komzet e vefe muioc'h galleg e-maez al lise gant ar skolidi. Setu ur raksoñj dasparzhet e Diwan. Chauffin a dap harp war stajoù DABU evit difenn he savboent : « *En un aergelc'h gall emamp bemdez, lennet ha klevet galleg hep er gouiet hag a-hed an deiz, neuze e teu diaes deomp. Met an DABU, get e aergelc'h e brezhoneg en deus lakaet ac'hanon da gomz ar yezh a-hed an deiz, ha memes, chalet oen o klevet pe o komz galleg.* » « *Pa'z on en em gavet el lise, em eus soñjet : poent eo din kregiñ e-barzh da vat.* » (2015, p. 231) Simpl a-walc'h e vefe. Ur wech tennet framm ar skol e vefent laouenoc'h mont e brezhoneg : « *En dehors des cours, deux clubs, l'un de rap, l'autre de kan ha diskan (chant à répondre traditionnel en breton, destiné à la danse) me permettaient de voir des groupes de jeunes s'exprimer et créer en breton alors que le carcan scolaire s'effaçait et permettait une expression plus libre.* » (p. 22) Peadra da frealziñ an holl. Evit lâret an traoù kren-ha-krak n'ouzomp ket penaos ez a an traoù da c'houde. Soñj am eus em boa klevet prezidant DAO o tisplegañ din en doa klevet un tropellad liseidi o pegañ skritelloù evit tremen ar vachelouriezh e brezhoneg... o vont e galleg kenetrezo.

Komz brezhoneg e kêr n'eo ket aes evit an holl grennarded. Tapet eo ar re yaouank gant sell ar re all d'an oad-se. N'eo ket aes bezañ brezhoneger en diavaez atav.

« *En ur stal eo diaesoc'h ober [e brezhoneg] peogwir e c'hall an dud sellout ouzhimp gant ur sell un tamm iskis. Dismegañs en un doare.* »

Gaid, Klas Termen, 22/02/2018, SB

« *El lise e komzan brezhoneg an aliesañ met er-maez eo un dra disheñvel... evit mont da greiz-kêr Karaez. Neuze, gant ar memes re e komzan brezhoneg el lise ha galleg e kêr.* » Madenn, Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

Diasur eo plas ar brezhoneg e-maez Diwan. Hag Uriell da gaout douetañs :

« *N'ouzon ket hag e kavin tud evit komz brezhoneg.* » « *Ar re gozh a nac'h komz brezhoneg.* » Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

N'eo ket gwall sammet ar plas brezhoneger atav. Ha n'eus ket kalz a degouezhioù evit implijout ar yezh.

« *Estreget er familh hag el lise ne ran ket kalz a draoù e brezhoneg war-bouez traoù bihan.* » Bleunvenn, Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

Pa vez tro da gomz e-maez ar skol e c'hall degas lorc'h o kreñvaat an identelezh (o lakaat da virvilhañ traoù don). Pe er familh evel Uriell:

« *Pa oan e pempved er skolaj e oan bet e Pariz gant ma zud, ma zud-kozh, ma breudeur... En ur stal e oamp krog da vont e brezhoneg hag e-pad tout an devezh hon doa komzet brezhoneg... An dud o doa ur sell iskis, n'ouient ket petra e oa.* » Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

Pe gant ar mignonezed evel Madenn

« *P'az an da selaou Bleunvenn war al leurenn, fier on o klevout ma yezh embannet mod-se.* » Klas Eilvet, 22/02/2018, SB

N'eo ket simpl komz brezhoneg e-maez al lise. Rankout a reer kaout tro d'hen ober, hep mezh. Met pa vez tro e vez gwelet penaos e ro buhez d'ar yezh ar sokializañ o sevel ul liamm etre an diabarzh hag an diavaez. Statud sokial ar yezh a zo ur vevenn evit ar re yaouank « *parce que notre langue n'est pas forcément présente socialement, quand on veut l'aborder en société, on se pose mille questions* » (DG) eme Aire.

B. LEVEZONIÑ AN TUDEOÙ HAG AN ENDRO

ETREOBER

N'ez omp ket da ginnig diskoulmoù. Rankout a rafen bezañ ur sapre fougaser evit hen ober. Er bed a-bezh ez eus diaesterioù gant ar soubidigezh. Abaoe 40 vloaz e vez labouret start, prederiet, eskemmet e Diwan war an tem-se. Pal al lodenn diwezhañ a vo adprederiañ disoc'hoù Diwan e-keñver he falioù. Da heul e klaskimp gwelout petra a c'hall lakaat tud yaouank da vrezhonegañ muioc'h.

1 Tizhet ar palioù ?

Ur pouez bras a zo bet lakaet war chouk rouedad Diwan evel hon eus gwelet e deroù ar skrid : kaout ar memes efedoù ha skol an Trede Republik evit ar galleg, paneve dieubiñ ar vro. Lod eus ar stourmerien a gav kerse. Moal a zo aet war forumoù internet evit dastum un nebeud diouto. Da skouer : « *Enseigner un charabia infâme à Diwan ben ça sert strictement à rien vu que ça ne sert qu'à l'école* » (2016). Ul lodenn eus ar skipailhoù a zo lakaet diaes ivez gant ur santimant c'hwitañ (s.o. pajenn 21) e-keñver ur pal dibosupl da dizhout.

Hag el lise ez eus santimant e oa gwelloc'h gwechall-gozh : « *Depuis le temps que j'entends dire que l'usage du breton régresse chez nous, on ne devrait même plus l'entendre lors des pauses !* » (Broudic, 2010, p. 35) a lavare rener al lise e 2010 dija. Komzet e vije muioc'h a vrezhoneg a-raok etre al liseidi. Met souezhus eo klevout Morgana Cloître, ul liseadez bet e-touez an nav c'hentañ o tremen ar vachelouriezh e Diwan. Ur wech bezañ stourmet evit ma vefe digoret al lise o doa graet « *ur striv* » evit « *kenderc'hel gant ar brezhoneg er skol, er c'hentelioù met ivez en diavaez* » (Danieloù, 2009). Da lâret ne veze ket eskemmet kenetrezo e brezhoneg er skolaj dija ? Pa ouiemp e oant tostoc'h ouzh ar gelennerien dre o niver bihan, o tont eus familhoù stourmerien hag ul lodenn kalz brasoc'h a oa desavet e brezhoneg er gêr e c'hallomp kompren pegen start eo evit al liseidi a-vremañ. Ha petra soñjal eus pozioù degaset gant Vallerie e 1972 pa zibabe liseidi' zo an opSION brezhoneg : « *on voit beaucoup de jeunes apprendre le breton au lycée, mais, sortis des cours, ils ne parlent que français* » (1997, p. 85) !

Etre implij dibaouez ar galleg ha hini ar brezhoneg peseurt paliou zo bet tizhet gant Diwan ? Da heul e klaskimp adlec'hiañ disoc'hoù Diwan en endo sokioyezhoñiel.

1.1 Diefedus Diwan ?

Ma'z eo ar soubidigezh ur vuhez vrezhonek penn-kil-ha-troad – unyezhegezh vrezhonek da vat – eo c'hwitet an taol, ha mat pell 'zo. Memes tra n'eo ket unyezhek gallek kennebeut buhez lise Diwan. Ma prizier efedoù Diwan war stad ar yezh, trenket eo ar soubenn, daoust ma c'hallomp gwelet ur c'hreskig eus barregezh ar rummadoù yaouank³³. « *L'école n'est pas là pour sauver la langue* »³⁴ eme Jureczek, an agregad nemetañ war ar c'horseg. Penaos priziañ efedoù Diwan neuze ? Lâret tout e brezhoneg ? Komz gant ar re gozh ? Komz ur brezhoneg direbech ? Lenn e brezhoneg ? Komz er vuhez pemdez ? Ma n'eo ket tizhet an holl baliou e tizher lod anezho.

Distroomp daou-ugent vloaz a-raok pa oa bet krouet Diwan. Start eo ijinañ « *kinnig ur skoliadur klok dre soubidigezh eus ar skol-vamm betek ar vachelouriezh* » d'an ampoent. Digor a-walc'h eo ar sistem peogwir ez eus kement a yalc'hourien hag e liseoù all (s.o. pajenn 6). Posupl eo gant ar vugale deskiñ istor yezh o hendadoù. Ar « *sevenadur gwriziennet* » a zo lakaet e-plas en un endro bev. Marteze n'eo ket efedus a-walc'h Diwan evit reiñ ul live propik e brezhoneg, met efedusoc'h eget hentenn Divyezh pe hini Dihun. Posupl eo keñveriañ disoc'hoù skolidi Diwan gant re all. En daolenn³⁵ dindan da heul e tiskouezer disoc'hoù en trede klas. Al live B2 a zo gwelloc'h eget an hini A1. Disoc'hoù skolidi Diwan a oa eus 26 poent gwelloc'h eget keidenn an div hentenn all. Taolomp pled memes tra, estreget efed ar soubidigezh hepken e c'hall bezañ (plas ar brezhoneg er familh evit skolidi pep hentenn n'eo ket anavezet da skouer).

Hentenn \ Live	Publik	Prevez	Diwan	Keidenn
B2	26,8 %	18,8 %	65,4 %	39,2 %
B1	43,3 %	47,3 %	32,1 %	40,1 %
A2	29,9 %	33,9 %	2,5 %	20,6 %

Deskiñ e brezhoneg eo korf ar soubidigezh. Diwan a ginnig tost an holl gentelioù e brezhoneg. Aire, kenurzhier pedagogel Seaska, a lak war-wel efedoù na welont ket ken : « *Rien que d'être capable de réfléchir, de raisonner, d'aborder des sciences, de la littérature en basque, c'est énorme.* » (DG) Ma ne gomz ket dibaouez brezhoneg al liseidi kenetrezo evel huñvre kaer deroù

³³ 3% eus ar vrezhonegerien zo etre 15 ha 24 bloaz pa n'eus nemet 2% etre 25 ha 39 bloaz. TMO, Région Bretagne, Les langues de Bretagne, Enquête sociolinguistique, Sondage 2018 : les principaux résultats, Rennes, 2018. p. 32

³⁴ <https://www.lepoint.fr/societe/l-ecole-ne-suffira-pas-le-seul-agrege-de-corse-appelle-les-insulaires-a-parler-leur-langue-22-03-2019>

³⁵ Conseil académique des langues régionales, le 25 juin 2019. Tests de compétence en langue bretonne en filières bilingues.

Diwan n'eo ket dister o implij. Ar gelennerien, ar gasourien hag ar skipailhoù melestradurel a eskemm e brezhoneg gant al liseidi. Kap eo al liseidi da respont e brezhoneg. Er sal-glas eo laouen a-walc'h ar skipailhoù gant plas ar brezhoneg. Er-maez ar c'hentelioù e vez implijet a-wechoù : evit sevel ur pezh-c'hoari da ginnig e kentañ derez, evit sevel kazetennoù (Humpf, Arsav-brezel...), evit sevel skritelloù el lise, e-pad ar c'hlaboù lakaet e-plas ganto (sinema, dañs, kanañ...), e-pad bodadoù savet kenetrezo...

Arabat disoñjal palioù ledan Diwan : « *Aesaat dre an divyezhegezh un diorroadur psikologel, speredel ha sokial pinvidik, hag ober un hent efedus evit mestroniañ meur a yezh* ». Ul live skol uhel a zo tizhet gant ar skolidi o teskiñ e brezhoneg. An disoc'hoù-skol a zo e-touez ar re uhelañ e Bro-C'hall³⁶. Ouzhpenn ar brezhoneg a vez treuzkaset gant Diwan, da lâret eo palioù all a zo tizhet.

Mestroniet eo gwelloc'h ur yezh vev all ganto. Gant enklaskoù e tiskouezer « *l'aisance plurilingue des jeunes du système immersif breton à Diwan : 60 % des jeunes bretonnants maîtrisent une deuxième langue vivante autre que le breton et le français, contre 20 % des monolingues francophones.* » (Chauffin, 2015, p. 63) Diwar-se ez a ul lodenn vat diouto da studiañ yezhoù goude bezañ tapet ar vachelouriezh ha techet int da vont d'an estrenvro : « *Dre-vas, n'eus ket muioc'h eget 4% eus ar studierien c'hall a ra o studioù en estrenvro bep bloaz 18. E-touez liseidi gozh Diwan, sevel a rae da 12% feur ar re a oa en estrenvro e 2012* » (Ofis Publik ar Brezhoneg, 2013, p. 11). Penaos chom hep soñjal e labour Cassin diwar-benn an treiñ. « (...) *la première condition pour savoir qu'on "a" une langue est d'en entendre au moins deux.* » (2016, p. 218) Hag an eskemmoù sevenadurel : « *L'amour de ma langue n'est tel pour moi que par mon désir des autres langues : "plus d'une langue".* » (p. 193) Unan eus palioù Diwan eo bezañ digor d'ar sevenadurioù all. Berzh zo bet graet !

Daoust ma n'ouzomp ket peseurt implij zo eus ar yezh goude Diwan e vez kavet ur toullad skolidi bet o stourm : Redadeg, brezhoneg er skol-veur, Ai'ta... Lod a deu da gelenn d'o zro d'ar rummadoù nevez enskrivet. « *Apprendre le breton, c'est "faire société"* » (2018) eme Pentecouteau ha Servain, da lâret eo e vez kavet e Diwan ur « *réciprocité d'action* » hag « *une unité permanente ou passagère* ».

Troomp hor sell davet ar gerent ivez. Ar soubidigezh a zo un doare da souten ar gerent. « *Lod a c'hortoz kalz, pouezus-tre eo ar skol en o strategiezh treuzkas* » eme Chantreau (2017, p. 82) en he c'hounskrid. Renard a lakaa war-wel tri foent pozitivel : degas d'ar poblañsoù lorc'h en

³⁶ <http://etudiant.lefigaro.fr/les-news/palmares/detail/article/le-classement-2013-des-meilleurs-lyceesde-france>, arsellet ar 26 a viz even 2018.

o yezh, sevel normoù ofisiel ha sikour kempouez psikoanaouedel, buhezel, fromel ha sokiosevenadurel ar vugale. « *Il était fier, il était vachement fier ! Alors qu'au début il ne comprenait pas que les gens reparlent breton, enfin, l'école Diwan et tout ça. Mais en fait il était très fier que son petit-fils parle breton. Très fier, il le disait à tout le monde d'ailleurs.* » (Quéré, 2000, p. 83)

Labour Diwan zo tost ouzh ar pezh a c'hoarvez evit ur bern yezhoù minorelaet. E levr *Halte à la mort des langues* e laka war-wel Hagège (2002) efedoù ar vestroni war ar yezhoù minorelaet. Traoù a gavomp e Diwan : « appauvrissement du lexique », « emprunts en masse », « perte des marques diversifiées du pluriel », « nivellement analogique », « foisonnement d'invention ». Setu ar pezh a vez merzhet evit yezhoù ken disheñvel hag an Dahaloeg (Kenya), an Hayueg (Nepal), an Iwerzhoneg, an Hungareg (en Alamagn) Diwar-se eo dibosupl lakaat tout war chouk ar sistem-skol dre soubidigezh, ha nebeutoc'h c'hoazh war al liseidi hag al labourerien.

Memes tra e vank ur studiadenn veur evit kelaouiñ ac'hanomp war implij ar brezhoneg goude ur c'hursus e Diwan. Petra a vez graet gant al liseidi bet eus ar brezhoneg er vuhez foran ? Kar bezañ divyezhek e fin Diwan ne sinifi ket dre ret bezañ brezhoneger da c'houde.

1.2 Sokializañ ar brezhoneg

N'eus rendael ebet etre ar sokioyezhoniourien war ar fed ne c'hall ket ar skol saveteiñ hec'h-unan ur yezh. (Renard, 2007 ; Comiti, 2007 ; Xavier Vila, 2012). Pe hini mil vrudet Fishman : « *Without considerable and repeated societal reinforcement schools cannot successfully teach either first or second languages and, furthermore, where such reinforcement is plentifully available, languages are acquired and retained even if they are not taught in school* » a skrive 30 vloaz 'zo (1991).

Sevel a ra a-du Le Lay, kuzulier pedagogel : « *Diwan a ra pezh a c'hell, mat eo pe n'eo ket, met d'am soñj, ma ne zibrad ket al live brezhoneg zo en-dro deomp e teuio da vezañ divlaz un tamm al labour a reomp, ar yezh a rank cheñch statud e-barzh an endro deomp* » (Chauffin, 2015, p. 354). Levezon an diavaez a vez merzhet gant ar skipailhoù pedagogel : « *Le directeur du lycée Diwan de Carhaix a observé pour sa part la tendance qu'ont les élèves, au lendemain d'un week-end ou au retour des vacances, à utiliser davantage le français : "le français leur vient plus naturellement. Il suffit qu'il y en ait un pour entraîner tous les autres."* » (Broudic, 2011, p. 35)

Ar skol ne c’hall ket normalizañ ar brezhoneg, dreist-holl pa n’eus nemet 0,5% eus ar skolidi vreizhat enskrivet e Diwan. « *Pal Diwan n’eo ket brezhonekaat Breizh, n’omp ket gouest d’ober an dra-se, n’omp ket niverus a-walc’h, ha n’eo ket ar pal* » (Chauffin, 2015, p. 354) hervez Le Lay. Ma ne c’hall ket ar skol normalizañ ar brezhoneg e c’hall ar yezh desket er skol bezañ sokializet, da lâret eo o tiorren an darempredoù sokial e brezhoneg etre an hiniennoù.

Pleustroù a bep seurt a zo stadet hervez youl ha nerzh skipailhoù pedagogel ar mare : pediñ tud eus an diavaez, mont da welet brezhonegerien a-vihanik... Tezenn Chauffin a laka da dalvezout an dra-se. Pelloc’h int bet en Euskadi an Hanternoz o labourat evit ma vefe atizet ar skolidi da vont en euskareg e-maez ar skol : « (...) *nous créons des situations qui permettent aux enfants de parler euskara entre eux en récréation. Sans cette incitation, influencés par une société majoritairement francophone, ils utiliseraient le français.* »³⁷ N’eo ket ar redi, ar reolenn a laka ar skolidi d’hen ober met an degouezhioù savet. Penaos chom hep soñjal e Guy Debord a ginnig sevel « situations » evit cheñch ar bed en e levr *Rapport sur la construction des situations* (2000).

Komz eus ar sokializañ a sav goulenn plas ar c’hentelioù war ar brezhoneg ivez. Un danvez boutin evel ar galleg ? E Diwan e vez kelennet programmoù ispisial war ar yezhadur, war al lennegezh, war ar skridaozañ... Met petra zo da lakaat war-wel da gentañ ? Al lennegezh evit talvoudekaat ar brezhoneg o tiskouez eo ur yezh ken pinvidik hag ar re all ? Pe ar brezhoneg bemdez evit diskouez eo posupl implijout anezhañ er vuhez pemdez ? Blanchet a sach an evezh war bevennoù un treuzkas re c’hlan, pell diouzh implij an dud : « *Ils ne réalisent pas que chercher "la pureté de la langue", c’est chercher "une pureté", c’est refuser les contacts les mélanges, les métissages, c’est refuser la vie sociale (...)* » (2016, p. 164) Hag ar vuhez sokial eo ar pezh a glask ar re yaouank.

Yekel, skolaer e Divyezh, a difenn deskiñ ur yezh tostoc’h ouzh hini pep parrouz. Evel Morvan e rebech d’ar skol deskiñ ur yezh divlaz : « *C’était aussi un breton "de nulle part" : langue d’un locuteur de zone gallophone, qui a fait sa scolarité dans le Trégor puis le Poher, formé des enseignants tour-à-tour bigoudenphones, vannetophones, léonophones, centrebretonnophones, ou de nulle-part-ophones, comme leurs élèves.* » (2017, p. V) Evit dont a-benn da reiñ c’hoant d’ar skolidi d’hec’h implijout e rankfer « *contribuer à inverser les représentations négatives qui s’attachent à des langues et cultures menacées* » (Burban, Lagarde, 2007. p. 22). « *Nous travaillons beaucoup sur la perception des locuteurs vis-à-vis de l’euskara.* » (Saint-Andre, 2017) a displeg Aire. Diwar-se e sav Yekel daou c’houlen (hag a zo respontoù en o

³⁷ Aire X., Bodad labour Divyezh, *Ecole et famille, de Bretagne et d’ailleurs : éducation plurilingue en contexte minoritaire*, 01/10/2018

doare) « *Penaos lakaat hom skolidi da gaozeal gant o zud-kozh ma eo re dishañval an div yezh ? Penaos implijet ar brezhoneg er-maez deus ar skol ma ne bermeta ket ar yezh desket da doullañ kaoz gant an dud diwar-dro ?* » (2017b) Ne nac'h ket an interest da gaout ur yezh standardizet koulskoude : « *Deskiñ ur yezh standard a c'hall kaout un interest, met ne soñj ket din e vanka ober dioutañ pal diwezhañ an deskiñ brezhoneg.* » En eil derez ne c'hallfemp ket leuskel karg ar brezhoneg nemet d'ar c'hentelioù (2 pe 3 eurvezh ar sizhun hepken). Penaos e c'hallfe ar gelennerien a labour e brezhoneg reiñ buhez d'ar yezh ?

Yekel en deus c'hoant da adsokializañ dre ar familhoù ivez : « *'Barzh pep familh pe dost ez eus un den kar bennak hag a oar brezhoneg mat !* » (2017b). Met eus un tu pe d'egile n'eo ket aes mont e brezhoneg. Setu un testeni dastumet gant Dołowy e 2012 « *I have grandparents on my mother's side who are Breton-speakers but I have never spoken with them in Breton... and with my mother... hmm... she speaks to me in Breton and I answer her in French. Not because I don't want to speak Breton but the problem is that I don't speak Breton as well as she does and when I speak she corrects me all the time. (Interview with B. 17 F)* » Ouzhpenn bezañ ral ar brezhoneg er familhoù n'eo ket aes e implij atav.

Ha kavout doareoù da gomz e-maez al lise a seblant pouezus evit ar re yaouank (evel mennozh Yekel). Daoust ma n'eo ket aes komz gant ar re gozh dre ur yezh standardizet atav, n'eo ket dibosupl gant lod 'zo. Pa'm eus savet ar goulenn pegoulz o doa bet lorc'h bezañ komzet brezhoneg eo bet meneget :

« *Pouez-mouezh Groe a oa gantañ. Estregetañ n'oa nemet un den o komz brezhoneg e Groe. Ur wech kentañ eñ da welet ur plac'h ken yaouank o komz brezhoneg. Hag en deus savet goulennoù ouzhin. Komzet hon eus e-pad un eurvezh. Ma mignoned tro-dro din n'oant ket holl eus Breizh, o doa goulennet diganin : "met e-pad un eurvezh az peus komzet brezhoneg ? Komz a rez brezhoneg evel ma komzez galleg ganeomp." Int a oa bamet ivez. Ar paotr en deus pedet ac'hanon er gêr.* »

Gaid, Klas Termen, 22/02/2018, SB

Evit sokializañ e c'hallomp treiñ hor sell davet ar gerent. « *Goulenn a ra Diwan digant tud ar vugale krouiñ e-touez an tiegezh un aergelc'h emsav a-benn reiñ d'ar brezhoneg e blas en o buhez pemdez.* » (Karta Diwan, diwan.bzh) Gouzout a ouzomp mat eo divrezhonek ar pep brasañ anezho. Ha memes ar re a oar ne desavont ket dre ret o bugale e brezhoneg (s.o. pajenn

Erreur ! Signet non défini.). Kerent' zo a glask deskiñ ivez, met n'eo ket aes cheñch yezh gant o bugel. Meur a wech em eus klevet seurt testenioù :

« *Klasket he doa deskiñ brezhoneg dre gentelioù-noz pa oa erruet ma breur koshañ e Diwan, met p'he deus dizoloet mare ar c'hemmadurioù eo paouezet.* » Gaid, Klas Termen, 22/02/2018, SB

En enklask Chantreau e verzhomp un diforc'h bras etre al liseidi a glev brezhoneg er gêr hag ar re n'o devez ket tro. 54 % eus al liseidi gant ul live treuzkas brezhoneg kreñv pe etre gant o zud a zo tomm-tre ouzh ar brezhoneg paneve 25 % diouto pa ne gomz ket ar gerent brezhoneg. Evit ar pezh a sell ouzh al live : 52 % eus al liseidi gant ul live treuzkas kreñv pe etre o deus santimant kaout ul live brezhoneg mat paneve nemet 18 % diouto pa ne gomz ket ar gerent brezhoneg. (KCGG). Ar santimant barregezh pe bezañ tomm ouzh ar yezh a zo daou dra a c'hall broudañ an implij evel ma vo gwelet gant ar '*COD model*' dindan da heul.

A-benn ar fin, implij ar galleg war ar porzhioù ne gav ket e orin er skol met en diavaez. Ne c'hall ket Diwan hec'h-unan-penn normalizañ ar brezhoneg. Met sokializañ e implij a zo pouezus evit reiñ ster d'an deskerezh skol o kavout digarezioù, o sevel degouezhioù evit implijout ar yezh en diavaez.

Evit gwir ne deu ket implij ur yezh vinorelaet eus an ezhomm evel ma tispieg Grin (2003). Komz un eil yezh zo posupl atav pa'z anavezet ur yezh vinorelaet. Ijinet en deus ur patrom anvet '*COD model*'. Teir elfenn a gont evit komz yezhoù minorelaet : ar varregezh d'hen ober (Capacity), an digarez da implijout anezhi (Opportunity) hag ar c'hoant (Desire) (2003, pp. 43–44).

MODEL COD

C

BARREGEZH

(Peseurt kentelioù war ar brezhoneg ?
Peseurt treuzkas er-maez ar c'hentelioù ?)

O

KAOUT TRO

(Pelec'h komz brezhoneg e-maez al lise ?
Penaos sevel digarezioù evit brezhonegañ ?)

D

C'HOANT

(Petra a degas ar c'hoant da vont e brezhoneg ?)

« *When examining the situation of young people belonging to language minorities we can observe that the last factor is the most difficult to achieve* » eme Dołowy (2016, p. 280) diwar-benn lise

Diwan « (...) *young people have to find the need and the determination to use the minority language beyond pragmatic motivation* » (p. 280). Digevatal eo an divyezegezh.

Studiet hon eus er pennad-mañ al lodenn C hag O eus ar patrom. Er bartienn da heul e vo prederiet ha posupl eo degas ar c'hoant da vont e brezhoneg ?

2 « La découverte ou l'ignorance » (Lebesque, 1970)

Guéguen a wel kinnig Diwan evel ur redi nemetken : « *l'immersion en langue bretonne représente pour l'enfant une contrainte supplémentaire puisqu'elle s'ouvre sur une langue qu'aucune société ne parle ni ne comprend et sur une culture proche de celle du français*. En tu all, Chauffin a wel Diwan evel ar choaz-mañ : « *L'immersion en breton, c'est parler 100 % du temps en breton, c'est un système choisi*. »

Met petra a degasfe c'hoant dezho ? Gant ar skol e vez degaset ar c'hoant deskiñ lenn pe jediñ, hini komz brezhoneg a c'hall bezañ savet enni ivez ? Labour ar bedagogiezh eo o kinnig un doare da bep skoliad da gaout c'hoant ha da gavout e c'hoant. Ha n'eo ket dre ret oc'h arguzenniñ war interest ar brezhoneg : « *Pourquoi apprendre le breton ? (...) Ces arguments sont multiples, je n'ai jamais vu qu'ils aient convaincu personne* » (1997, p. 60) eme Vallerie.

Da gentañ e welimp, diwar labour an Ikastola en Euskadi, penaos e rank bezañ prederiet er soubidigezh ar bedagogiezh ma'z eo ar pal treuzkas ur yezh vinorelaet. Da heul penaos e vez labouret tro-dro da c'hoant al liseidi gant ar Strollad Brezhonekaat.

2.1 Ar soubidigezh a rank bezañ ur bedagogiezh

Tud e Diwan o deus c'hoant da dermeniñ, efedusaat, resisaat ar soubidigezh. Eus un tu all eo aonet ar rouedad hen ober peogwir e c'hallfe degas diemglevioù. Enebet e vez ar raktres yezhel diouzh an hini pedagogel. Diwar skiant ar rouedad dre soubidigezh euskarat ne c'hallomp ket prederiañ an eil hep egile.

Ma ne vez ket prederiet war ar soubidigezh, da lâret eo ma ne vez ket savet ur plas arbennik dezhi e framm ar skol, e sinifi tamm-pe-damm e chom ar raktres tost ouzh hini skol Vro-C'hall o vrezhonegañ. Anavezet eo efedusted ar sistem skol-se. Treut eo plas an dre gomz ennañ. Live yezh ar skolidi c'hall zo izel ha dreist-holl dre gomz : « *En 2016, les élèves français ont,*

globalement, de bons résultats en compréhension de l'écrit d'une langue étrangère. (...) En revanche, les élèves français continuent à rencontrer de réelles difficultés pour s'exprimer en langue étrangère (...) À l'international, les résultats des élèves français sont très nettement inférieurs à ceux de leurs camarades européens. » (Cnesco, 2019) M' o deus c'hoant izili Diwan da aesaat implij ar brezhoneg e rankont prederiañ war hentennoù pedagogel ispisial.

Izili ar c'hevread Seaska en Euskadi o deus adsavet raktres pedagogel ar skolioù abaoe un nebeud bloavezhioù. Aire, kenurzhier ar raktres, a labour evit ma vefe kelennet gant diazezoù disheñvel. An ezteurel dre gomz zo e-kreiz ar jeu : o reiñ ar gaoz d'ar vugale, o trevezañ geriaoueg ar c'horf, o teskiñ dre eñvor... Ar vugale o deus da broduiñ evit bezañ "oberour" o c'helenn. Kendivizoù zo lakaet e-plas. Broudañ a reont ar c'hlasadoù lieslive evit ma vefe muioc'h a eskemmoù kenskoazell etre ar vugale. Distro ar vakañsoù zo ur prantad pouezus evit atizañ ar vugale da vont en euskareg peogwir ez eskemm ar braz anezho e galleg er gêr.³⁸

Hentenn Artigal - ur yezhonour Katalan - zo lakaet e-plas. Savet en deus kontadennoù gant jestroù ha lusk evit aesaat implij an ober dre gomz. « *Je croyais que pour être un bon maître, je devais savoir expliquer et les élèves devaient bien m'écouter. À présent, je me rends compte que je dois leur donner les moyens d'être écoutés. Les enfants apprennent à parler en parlant et non en écoutant seulement.* »³⁹ Diwar-se e teufe da vezañ ar soubidigezh hep pedagogiezh un doare da deskiñ ur yezh padal e vefe un doare da gomz anezhi gant un hentenn azasaet.

Endro sokioyezhoniell ar vugale zo e-kreiz ar jeu gant labour Seaska : ar gerent, er-maez ar skol hag er-maez ar c'hentelioù. « *Mais je travaille moi en dehors de ces 15 %, ce qu'on appelle l'environnement de l'enfant. Et qui va de la cour de récréation, au foyer et à l'ancrage sociétal en général.* » Klask a ra Aire broudañ ar gerent da vezañ oberiatoc'h e deskadurezh o c'hrouadurioù. Memes ar familhoù dieuskarek a desk kanaouennoù er gêr ganto. « *Une prolongation affective* » eme Aire. Ar pal nemetañ n'eo ket lakaat ar gerent da gomz euskareg met da bouezañ war o ferzh evel kerent ar vugale. « *On souligne le rôle de parent* » emezañ.

2.2 Kavout e c'hoant gant ar Strollad Brezhonekaat ?

« *L'enfant n'apprend pas le breton pour communiquer avec des locuteurs qui pourraient être par exemple ses grands-parents ou ses voisins. Il n'apprend pas le breton ni pour avoir accès à*

³⁸ Aire X., Bodad labour Divyez, *Ecole et famille, de Bretagne et d'ailleurs : éducation plurilingue en contexte minoritaire*, 01/10/2018

³⁹ L'apprentissage des langues avec Artigal, Joseph Maya, sudouest.fr, 15 avril 2013

une littérature enfantine en breton (...), ni pour avoir accès à une culture bretonne bien spécifique » (Guéguen, 2006, p. 219). Diwar patrom COD gant Grin n'eo ket distriv komz ur yezh vinorelaet. « *On ressent actuellement de plus en plus l'usage du breton comme le produit d'un choix, d'une volonté et non comme un outil usuel de communication* » (Quéré, 2000). Ne c'hall nemet dont eus ar youl. « *Speaking Breton is related to a conscious decision and requires a certain effort* » (Dołowy-Rybińska, 2016, p. 285) Sur n'eo ket aes evit ar skipailhoù dont a-benn ma'z eo lakaat bec'h brezhonegañ : « *C'est que l'adolescence elle-même est une procrastination, si je puis dire* » eme Miller (2015). Ar skol zo ul lec'h strivañ dija, ha bezañ er soubidigezh a ouzhpennfe unan all ! « *Une contrainte supplémentaire* » eme Guéguen (2008a).

Adalek ar preder-se eo bet savet ar Strollad Brezhonekaat e 2016. Ar pal a oa kendivizout evit reiñ ster d'an urzh « *komzit brezhoneg.* » Larvol a sav ur c'hinnig damheñvel en e gounskrid tro-dro d'ar c'hentañ derez : « (...) *il est important de traiter explicitement du sens de leur apprentissage du breton et donc de l'expression volontaire en langue bretonne.* » (2014)

War skritell galv an emvod kentañ e saved ar goulenn « *Komz brezhoneg el lise ?* ». Ar pik goulennata a oa un doare da diblasañ ar reolenn war-zu ar goulenn daoust ma tiskoueze anv ar strollad ar youl da vont war-raok. N'eo ket bet savet e stumm ur bodad gant dileuridi evel ma vez graet er skolioù (un dileuriad = ur c'hlasad da skouer) met ur strollad gant tud a-youl-vat eo. Pep hini a dileur e-unan hepken, da lâret eo e teu gant e vennozhioù dezhañ. Bodet e vez ar strollad diwar c'hoant al liseidi, en un doare direoliek, pa vez ezhomm. « *Et Calvet nous met fort justement en garde contre les "bons sentiments" et le "discours politico-linguistiquement correct" qui n'auraient de valeur qu'incantatoire. Il prône au contraire des politiques linguistiques, non pas venues d'en haut, mais "conçues par les communautés qui les désirent menées par elles"* » (Burban, Lagarde, 2007. p. 22). En ul live mikrosokial eo bet kaset ar preder-se. « *Les véritables progrès ne peuvent être observés que lorsqu'il y a conjonction entre l'action d'en haut et l'action d'en bas* » (Burban, Lagarde, 2007. p. 22). Penaos sevel ul liamm etre an ensavadur Diwan (ar skipailh pedagogel) hag ar skolidi. Penaos sevel ur c'hoant boutin ? Prest eo an oadourien da azasaat o c'hoant ?

E penn-kentañ ar strollad e oa bet klasket terriñ an hierarkiezh tro-dro da implij ar yezh. Da gentañ eo bet degemeret ar fed e c'hallfe bezañ start komz brezhoneg hag evit al liseidi hag evit tud ar skipailh. Da heul eo bet savet priñsip an ingalded etre an izili, daoust ma chom disheñvel ar plasoù. « *N'eus ket tud a-us ar re all. Kompren penaos ober evit mont war-raok pe war-zu ar skipailh pedagogel pe war-zu al liseidi eo ar pal* » zo bet skrivet gant al liseidi war ur skritell kinnig eus ar strollad. Digor d'an holl liseidi tomm ouzh ar brezhoneg pe get (s.o. pajenn 34) :

« N'omp ket o rebechiñ, o klemm pe o varnañ den-mañ-den, met o klask kompren penaos eo disheñvel plas ar brezhoneg evit pep hini. Penaos reiñ pe kaout c'hoant komz brezhoneg bremañ el lise, met ivez diwezhatoc'h ? » Ar pal a oa sevel darempredoù disheñvel diouzh reoù ar sal-glas pe reoù ar c'houkva.

Evit gwir n'eus den ebet a oar muioc'h eget ar re all war ar sujed-mañ. Pe ma'z eus tud desketoc'h eo al liseidi. Ar c'hinnigoù evit brezhonekaat al lise a rank bezañ ijinet ganto neuze. N'eo ket pal ar strollad sevel oberiantizoù dre ret, met degas ur preder da gentañ tout. En deroù e oa bet klasket kompren petra a c'hoarvez el lise ha perak ne vez ket komzet brezhoneg dibaouez ennañ. En un eil pazenn e oa bet klasket kompren petra a c'hoarvez evit pep hini. Peseurt darempred en deus savet pep hini gant ar yezh. Tud ar skipailh a oa amañ evit goulennata palioù savet gant al liseidi ha skoazellañ o intrudu. Buan a-walc'h e oa bet komprenet ne vo diskoulm ebet. Memes tra e vez klasket diskoulmoùigoù peogwir ez eus meur a stad e implij ar yezh etre morse, a-wechoù hag atav.

Ur paradoks zo bet stadet. Ne vo ket brezhonekaet o kendrec'hiñ ar re n'o deus ket c'hoant da gomz met o souten ar re o deus ar c'hoant-se. Ar strollad zo un doare d'ober anaoudegezh, da welout piv zo mennet da vont e brezhoneg. An efedoù zo evit ar re a gemer perzh da gentañ. Hep gouzout int tapet perzhidi ar bodad gant un engouestladur. Goude emvod kentañ ar strollad e oa al liseidi o c'hortoz un efed war ar re n'oant ket deut. Ar c'hontrol zo c'hoarvezet :

« E-pad tout an nozvezh hon eus komzet eus an dra-se. » « Aet omp asambles d'ar self, d'ar c'horn butun, ha chomet omp asambles peogwir e komzemp brezhoneg. Met ar re all a responte e galleg. » « Evidomp-ni hon eus komzet muioc'h a vrezhoneg er gambr goude an emvod. Aesoc'h e oa. » « Goude an emvod kentañ em eus bet un tilt gant ar plac'h he deus lâret hon doa da vezañ lorc'hus [komz brezhoneg]. » 18/10/2016, SB

A-benn ar fin eo deut implij ar yezh un atebegezh (ha nompas ur giriegezh !) evito. Peadra da soñjal e mont en-dro staj Keav (s.o. pajenn 43) : « *Le deuxième principe est que chaque participant est invité à endosser le rôle de formateur à l'égard d'autres participants, dans certains espaces sociaux du stage.* » Un doare da reiñ tro da vrasaat evit bezañ an hini a degas ar c'hoant. « *Être responsable de son désir* » eme Lacan da lâret eo bezañ kat d'ober choazioù evel tud deut.

N'eo ket diefed war ar re all memes tra. Gant ar Strollad Brezhonekaat e vez diskouezet ez eus tud prederiet gant stad ar brezhoneg el lise. Lod a deu ur wech hepken evit lâret un dra hepken. Gallout a reomp menegiñ eo bet savet ar stourm « bak e brezhoneg » er memes bloavezh hag e oa bet krouet ar Strollad. Gant ar stourm-mañ o deus ijinet al liseidi un doare da diskouez e oant tomm ouzh ar brezhoneg. P'o deus tremenet 15 anezho un amproenn vachelouriezh e brezhoneg hep aotre e oa kement evit ar stourm hag evit skipailh pedagogel Diwan. Un doare da diskouez oa doa kemeret ar penn-bazh d'o zro, e fin o skoliata dre soubidigezh.

Laouen e oant komz eus ar brezhoneg en un aergelc'h digor ha frank. Memes e lise Diwan e lâront n'o doa ket tro da eskemm kement-se diwar-benn ar brezhoneg. Ha pa veze graet o doa santimant da vezañ barnet pe lakaet eus tu an norm. Gant ar Strollad Brezhonekaat e oa posupl anzav e vez komzet galleg ganto. Ur bern o deus kontet istor ar brezhoneg en o familh, oc'h adsevel ur buhezskrid yezhel. Un doare, marteze, da diblasañ al liseidi eus un engouestl pragmatek (bezañ enskrivet er skol dre soubidigezh) d'un engouestl buhez (komz brezhoneg peogwir eo bet treuzkaset ar c'hoant dezho) « *Un engagement en termes d'héritage* », an hini solutañ evit padout gant ar yezh hervez Pentecouteau ha Servain (2016).

Daoust ma'z eus tud oc'h arguzenniñ difenn ar brezhoneg abaoe 100 vloaz e teu remziadoù nevez o sevel o abegoù, o frezeg tro-dro d'ar yezh. Al luskadoù sokial n'erruont ket peogwir eo mennet an hiniennoù en en doare heñvel met peogwir ez eus ur bern abegoù subjektivel a gav o respont en un ober a-stroll (Devereux, 1985) « *En cherchant à définir la langue, c'est bien généralement une définition de soi-même, dans son rapport aux autres* » a displeg Morvan (2017, p. XIII) diwar-benn ar geriadurioù. Posupl e vefe lâret ar memes tra eus ar Strollad Brezhonekaat : o klask prederiañ war plas ar brezhoneg, prederiet e vez ennañ e-unan, en e darempredoù gant ar re all hag ar yezh az a ganto. « *A chacun, l'âge venu, la découverte... ou l'ignorance !* » eme ar barzh.

KLOZADUR

Klasket hon eus respont d'ar goulenn : petra a lak al liseidi da vont e brezhoneg e-maez ar c'hentelioù ? Gant labour Lahire omp bet sikouret evit lakaat war-wel elfennoù istorel, pedagogel, sokiologel, met ivez displegadennoù hiniennel o klask selaou ar pezh a stag anezho ouzh ar brezhoneg. Diwar hol labour enklask omp kroget gant an Istor bras evit mont betek istor bihan an hiniennoù.

Frouezh un istor politikel a 100 vloaz eo Diwan. Ha gallout a reomp astennañ ar preder o lâret eo al liseidi disoc'h ar stourm-mañ. Mare ar moustradur en deus merket an holl o lakaat da grediñ e c'hallfe bezañ efedus ar skol hec'h-unan evit treuzkas ur yezh. Peadra da lakaat gwask war Diwan, da lâret eo an obererien sokial ennañ, tapet gant ar « *syndrome du bocal* » (Comiti, 2005). Ar fed a oa posupl deskiñ ha bevañ e brezhoneg a rankfe prouiñ kement d'an enebourien ha d'ar stourmerien. Ar gwask-mañ n'en deus ket aesaet al labour emvurutellañ evit gwir. (Coser, 1982 (1956))

Ar soubidigezh a zo e korf identelezh Diwan. Lakaet eo war-wel evit abegoù yezhel ha reoù pedagogel (adalek ar bloavezhioù 80 dija). En e brezeg evit kaout enskrivadurioù e vez lennet. Met ar raktres yezhel ne glot ket gant hini skol atav. Hag ar gerent a c'hall dibab ar soubidigezh evit unan eus an daou abeg hepken (Adam, 2015). Sevel a ra un dislavar etre palioù Diwan hag reoù ar gerent. Ha diwar-se n'eo ket sklaer-sklaer evit ar vugale pouezusted ar brezhonegañ dibaouez er soubidigezh ma n'asantont ket penn-kil-ha-troad ar gerent d'ar raktres yezhel.

Klevet hon eus al liseidi o tiplegañ o santimant war aergelc'h yezhel o skol ivez. Daoust ma o deus ur sell pozitivel ouzh ar brezhoneg – a sav o identelezh sokial en un doare – e roont d'ar yezh kentoc'h ur gefridi arouezel eget unan kelaouiñ. Start eo dezho komz brezhoneg. Meneget eo ar striv, ar boaz mont e galleg, ar c'homzioù prim, al live yezh... Ha pa vez goulennet buanha-buan diganto perak brezhonegañ eo ar respontoù heñvel ouzh prezeg Diwan : ar sevenadur,

an Istor, ur yezh geltek... An displegadennou-se ne glotont ket gant pal ar skol, ul lec'h evit prientiñ an dazont na c'hoantoù tud yaouank. Stadet e vez un diglosiezh (Ferguson, 1959) el lise hervez al lec'h, an tem, an degouezh, an den... Kreñvaet eo gant ar grennardiezh (Joly, 2007 ; Luna, 2014 ; Tarone ha Swain, 1995).

An endro yezhel-mañ a vez stadet e skolioù dre soubidigezh all. E skolioù-hañv Iwerzhon e vez merzhet « techoù da dremen e-biou » heñvel ouzh reoù liseidi Diwan. (Petit Cahill, 2016). Ur « *virtual position* » eo krediñ e vefe posupl mont diehan e yezh 2 (Turnbull ha Dailey-O'Cain, 2009). Diziazez eo an emzalc'h pedagogel-mañ peogwir eo treut al labourioù evit prederiañ plas ar yezh 1. Ouzhpenn da-se e chom an abegoù evit brezhonegañ pouezus-tre evit implijout anezhañ, evit sevel un engouestladur yezhel (Pentecouteau ha Servain, 2016).

Diwar an elfennoù a-us e vez savet strategiezhioù desevel lies gant ar skipailhoù pedagogel. Ar reolenn a-stroll – e korf mont en-dro ar skol – a chom an doare pennañ, kuit da lakaat ar brezhoneg tu an emzalc'h (Guéguen, 2006). Klask a reont ar skipailhoù sevel ur bern oberennoù evit sokializañ ar yezh (Chauffin, 2015) met int lakaet e kevezerezh gant an efed heñveladur a seblant krenvoc'h evit ar re yaouank. Memes tra eo Diwan ennañ e-unan un framm unfurmel – spered Diwan – a vroud da vrezhonegañ.

